



TONKAD

61

Rigakos

A. Heussaff

P. Denez

A. Even

Y. Olier

Bodmael

Abanna

Gourlann


Gw. Ar Menn

A. Toravel

Kaier 24-25

Mezheven-Gouere

1961



TONKAD

61

Divizet hon eus, etre un nebeut keneiled, sevel pep a bennad war an danvez : tonkad Breizh a-vremañ, da lavarout eo, er stourm a renomp, penaos e wel hag e veiz an traoù, pep hini ac'hanomp. Ar skridoù-mañ n'int ket enta kentelioù war an istor pe ar brederouriezh, hogen emzivizoù a-raok ur c'hrogad. Ma komz hemañ eus an doare ma kollas o reized Kembreiz hag Iwerzhoniz, n'eo nemet a-benn pleustrifñ hon hentoù-ni da adkavout hor reized dimp. Ma tispleg hennezh emzalc'h ar gouerien o stankañ an hentoù, n'eo ket evel dancveller dinoaz, met hepken da brientiñ ar gejidigezh a zo da beurober, e rez ar reiz fraez, etre hengoun Breizh hag emsavadeg pobl Vreizh.

A-raok brezel 39, an Emsav eo a oa Breizh. Hiviziken eo Breizh a vo an Emsav. Aspadenn an Emsav kentañ a zo chomet sac'het a bep tu abaoe fin ar brezel. Ur geun diyac'h n'eo ken. Ur geuniad santimanchoù mat, ha Doue oar pegen flaerius ar re-se pa vanont da chagiñ ! Dre c'hras Doue, setu dourioù nevez o tiflukañ a-builh, o lakaat ar fardelloù da darzhañ evel dornadoù plouz, ken ma chomomp sabatuet rak o zaerder.

Tonkad an Emsav a zo marteze bremañ da steuziañ. Tonkad Breizh an hini eo a vern. Hon emell-ni n'eo ket bezañ nerzh an niver, met nerzh ar reiz.

Abanna

A. Toravel

B R O Æ D V R E I Z H

I

En ur bed nevez emamp o vevañ. Biskoazh bete vremañ hor bed n'en deus anavezet ur seurt reveulzi en e frammadur abaoe donedigezh ar grist-enelezh. Daou zarvoud a bouez a zo deut abaoe derou ar c'hantved-mañ da zispennañ doareoù kozh hor c'hevredigezh. Da gentañ penn ar gumunouriezh, he deus klasket kas d'an traoñ doueoù kozh an Tonkad, oc'h embann trec'h mab-den warnañ e-unan. An eürusted, a gred dezhi, a c'hell bezañ tizhet diouzhtu war an tamm douar pri mañ, p'emañ he mammenn en den en unan. En tu all, ez eus an dispac'h diwanet e kenframmidigezh ar bed, dre ar broadoù nevez o tiflukañ a bep tu, o kerzhout a-gevret gant araokadenn an emskiant bed en ur c'horf marnaoniek a vuiañ-magañ hag a vuiañ spered. Desket he deus an denelezh ne vo peurachuet he flanedenn nemet pa vo roet buhez d'an holl izili a ya da sevel he c'horf. Da vevañ, da genlabourat asambles gant ar re all, kuit a emgarantez, setu ar gudenn o deus an holl da ziskoulmañ, e-kreiz diaesterioù bras siwazh.

Nerzhioù kilañ a labour a-enep da araokadenn an denelezh, a gred lakaat befiveg dreist ar skiant e servij izelañ froudoù loen hor boud, dre zasorc'hiñ euzhusterioù hor boa ankounac'haet, da viken a grede deomp. N'on ket spontet kement-se avat o welout eo deut e soñj tud 'zo an amzer vremañ gwerzhañ tumporelloù, en eskemm miliadoù a yuzevien, pe sevel

kumunioù pobl 'lec'h ma vez savet ar vugale hag an dud en oad gour eval pennoù chatal, ha gant tro-spered engroezioù tud ar c'hornog. Ur seurt tro-spered a c'heller livañ gant ar c'homz boutin-mañ : "Gant ma vo peoc'h, ne ran foutre kaer", adsked hor faszidigezh dirazomp hon-unan n'eo ken. Gwell eo da gornogiz bevañ bevañ, dindan n'eus forzh petere gouarnamant e ve, e kamm aergalc'h enkouskus un eurvad hag ur vertuz bennak, eget mont er-meez eus e di tomm da gemer kiriegezhioù. Ne sarmonan ket amañ evit an emlorc'h, hogen e kredan start e doujañs personelezh mab-den, a vez saotret a-hed deiz gant laoskedigezh ha pilpousezhez an "dud vat", dindan bonnedigezh ar renerien, mirourien, gouezh dezho, ar gwir hag ar mad.

Diazezet eo talvoudigezh ar bersonelezh war he gwir da vevañ hag a gas d'ur poent ispisial, divizet gant doardoù an diabarzh hag an dieveaz, kempouez etre holl c'hoantoù an dud, a vez anvet frankiz. Ar frankiz n'eo ket ur pal, hogen frouezh un doare bevañ a c'han diwar hon darempredoù-ni gant uhelvad ar gevredigezh. Strollad abet, stad ebet na c'hellfe kemer hor plas evit kas da benn an dezer-mañ. Ne c'heller ket eta kevredigezh an amzer da zont chom o kousket war ur gwele tomm a reolennoù o deus gallet treuzvevañ a drugarez da zifivaded an darvoudoù, e-barzh mogerioù lous ur Parlamant bennak. Trawalc'h a nerzh e vo ret dezhi er c'hontrol, evit kavout e koustiañs pephini ar moien da zont trec'h war gudannoù ar vuhez a 'n em laka war skeul an hollved. Ra vo taolet eta ur sell, evit kantal, war ziskar an emskiant broadel e Bro-C'hall, a grad he stad, an anv relijion ar vroad un he disrannus dougen un disheñvalded re zont a gumuniezhioù a zo touzet en he c'hreiz. Gant enklask ar Grael e strivas ar Grennamzer kavout un arcuez danvezel eus ar santelozh. Gout 'ouzomp vat bremañ e vo ar Spered trec'h d'an Danvez, hag ez eo ar frankiz an nor nemati, daoust da bep tra, evit mont an e varzh.

N'eo ket evit ar blijadur da fistilhañ am eus pouezet war gemant-se, hogen e sell diazezañ en e wir endro kudenn Vreizh. Anez se, netra stabil ne vo graet. Un nerzh dedennañ re zirendael a ro dre vras an omsaver entanet d'eo ober e-barzh an Emsav hep marzout diseblanted an diabarzh a respont d'eo ferdex, pa ne daol ket an arvester war un ton figue : "pouah ! setu otonomisted !" Emouestladur an amzer vremañ a zeu da vezañ abred keneñ anez ha difrouezh ma nac'her gwelout didro pal an amzer da zont, a zle doareañ pep ober hep dale. Ne vez ket estran an diouezenn-mañ ouz disunvaniozh an Emsav goude an eil brezel-bed, daoust ma spuzmant an amzer vremañ promesaoù ledanoc'h a unvaniozh e-touez ar re yaouank. Da belec'h e kas an hent 'maomp o vont gantañ e Breizh ?

Ne vern penaos e vo troet ar gudenn hag ar gorraou evit he dibunañ, kudenn Vreizh a zo ur gudenn vroadel, da lavarout eo ur stoum etre div vroadelezh, an hini vreizhat hag an hini c'hall. Displeget e vo polloc'h penaos n'eus ket tu da studiañ an traoù en un doare all, ha penaos eo ret kompren anezhi. Komzomp kentoc'h eus ar vroadelouriezh c'hall. Ur plig a vez an Emsav da vallozhiñ ar Stad c'hall hepken, kement ha ken bihan ma tisoñjer da zispligañ elfannoù ar vroadelouriezh a vez embannet ouzump gant ar stad-se. Emrouestlet konañ a vez pep studiadenn diwar-benn ur seurt kudenn, e meur a gefver. Evit darn, hag ar werin dre vras, ez eo ur wirionez natur n'heller ket displeget ez rosis. Hañ ober a vije diskr zoken. Gwell eo d'ar vamm-vro kas d'al lazhadeg miliadoù eus he bugale eget kaout diskred war an anadur-se. Er c'hontrol, evit darn all, ez eus un dremm spis-tre d'ar vroadelouriezh-mañ, met pep hini en deus e soñj, ar pezh a gas da golennadurezhioù diniver, hep menegiñ ar maskej a 'n em sil er gerioù implijet.

Evit barn ar vroadelouriezh c'hall, eo ret berrdresañ emdroeur ar mennoz-se, rak e vez kelennet ez eo ganet ar mennoz-se diwar Dispac'h Meur 1789. Ur c'heal nevez a-walc'h eo, en deus poaniet evit diflukañ an istor. En he raok, bez' a voe koaded ar C'hresianed, Impalaerozh Roma, unveliegezh ar Roued, 'lec'h ma'z a ar vroad da zont. Ret eo gortoz e gwirionez an XVIIIvet kantved he diogeladurioù ar filozofed diwar-benn frankiz mab-den evit notennañ he ganedigezh. An Dispac'h, goude dispennañ ar Roue, a zrailhas war un dro an arcuez a unvan ar Stad hag ar Vroad. Da vroad an amzer vremañ, eo ret kaout en deiz a hiziv ur stad ispisial ma fell dezhi bevañ. Adal neuze e voe digor an holl hentoù evit adsevel ar Stad hag he beli, pa ne gas ket ur seurt adnavidigezh d'an disomglev etre ar stad hag ar vroad wasket gant he beli. Aze emañ an dalc'h.

Diazezet e vez ar voli mañ, bezet war an hinienn, bezet war ar strollenn. Beli an hinienn ne dalv nemet gant ar youl dezhi nac'h unan, a voe startet gant an Disivoud meur, o tieubiñ an dud diouz dalc'h an iliz katolik. Berzh a reas ar froudenn se, e broioù an Hantornoz dreist-hall, met he levezon a c'heres dre holl, evit azañ an Demokratiezh. Pa voe torret ar chadennoù-se, e voe kompenn an dachann evit ar filozofed, ha Rousseau en o zouez, a ziazezas ar voli war youl an holleg. En holleg a 'n em fiz ar c'heodedour, en ur gadarnaat er c'hiz-se a frankiz-eñ. N'hall den dont da vestri war ar re all, ha gwarez youl an Holleg a vez kreteet dre gontrad etre izili ar gevredigezh hag ar stad. Goude 89, ez adkaver an div hentchidigezh-mañ : war an tu dehou ar frankizourien kapitalist harpet war ar voure'hizien, hag hollegouriezh ar jakobined war an tu kleiz, harpet war ur stad trehontel, vertuzus, a c'houarn dre ziktatouriezh ur bihaniver engroez ar geodedourien diverzek.

A-enep beli an hinienn, ez eus beli ar strollonn. Goude enep dispac'h d'ar stad an XIXvet kantved, a wel er broadoù lusk an istor etrezek Doue, e ro Hegel un ene d'ar stad. Sevenidigezh ur menoz trehontel, buhezegel, a vez dieubet mab-don dre e veizaf a zo ar stad. Skeudenn-vremañ er vroad a zo ar stad, hag a zo eta ar Spered Dreist treuzlekaet er wirionez ragvoudel. Dreist eo eta ar stad d'ar reizh, hag an nerzh eo an diskoulm nemetañ da stourm ar reizhoù dishafval. Ur bihanniver emskiantek eus emdroadur ar Spered a c'hell dougen karg ar veli. Klotaat e vo ar menoz-se gant Mazzini, diaugoner ar fachism, a wel er vroad ur c'hammad war zu kendivezh an Danalozh. Degas a ray ar Stad pe ar Strollad stad ar vroad betek ar poent diwezhañ-se. Pep broad, pa vez savet betek un derez uhel a-walc'h e meizaf ar spered, he deus neuze ar gwir d'en em ledañ ha da greskiñ, rak emañ ar gwir ganti. Frammadur ar fachism ez adkavomp aze.

E gwirionez e vez bopred anebet ar Vroad ouzh ar Stad hag ha beli. N'he deus ket ar vroadelezh nerzh ul lezenn. Ouzh al lezenn an em sav bopred er c'hontrol ar vroadelezh, pa ziwan er-maez eus stern ar stad. Hogen pa c'houl ur stumm nevez d'en em c'houarn, da lavarout eo ur stad dezhi hec'h-unan, ez n'eo adarre ouzh kudenn ar veli. Ur c'helc'h-ifern a hafval bezañ eta ar vroadelezh. Roue lovrantek hon amzervezh eo deut da vezañ.

Ret eo dilezel skeudennoù flimm flimm al levrioù istor pa venner studiañ da vat ar vroadelezh c'hall. Enno e vez mesket e-barzh stern ar baradoz pempgornek marc'h henaf an iliz, Janed Ark, Loeiz Pevarzek, Napoleon hag all. Ken aner all eo dielfennif ar vroadelezh-mañ e kostezennoù politikel, an tu dehou pe an tu kleiz, ar Roueourien pe ar Jakobined. Sellout a ra an diforc'h se ouzh ar stad, ha n'eo ket ouzh ar vroad e Bro-C'hall. A-hand-all, pegen souezhus e c'hell bezañ, n'eus ket a gemm don etre mennoz ar Jakobined hag hini ar roueourien diwar-benn ar vroad, nemet n'eo ket diazezet beli ar Republik war an hêrezh, ha c'hoazh ! A-dreñv "Diskleriadurazh gwirion mab-don" an "Douez Frankiz", an "Ingolded, ar Frankiz hag ar Vreurezh" ha elogenoù seurt mañ, ez omp degaset d'an heveladur. Setu perak an holl vugale republikat a c'hell deskiñ dre ar munud istor rouez Vro-C'hall, pa'z eo bet savet ar vroad unvan a-drugarez dezho. Dellezek eo kement den a enavez galloud an impalaerezh c'hall, ha ganet e vije e Tahiti, gant ma "stlap warnañ ar banniel", da vezañ keodedour gall. En tu kontrol, kement hini a zistaol ar vestroniezh se a vez "skoet gant an undellid broadel". Bez e voe traitourien ar Frañs dieub ha kenlabourerien Vichy. Ar gwashañ holl eo fallaenn ar stad, hag

eo ret grofe neuze krouiñ ur stad a "silvidigezh boutin" evit saveteiñ ar "vroad en arvar" dreist-holl pa zou ul lodenn estren eus ar vroad d'en em sevel ouzh gouarnamant ar vamm-vro, evel m'eo c'hoarvezet en Aljeria.

Barrès, a-rak Maurras, en deus livet ar vroad evel asentidigezh un tonkadur didorr. Teuzet a vez an hinienn e-kreiz ar vroad, dre hag pe dre vat. Ar vroad a zo ur wirionez emvoudel, emgenet diwar koun ar rummadoù tremenet, e karentez ar vamm douar, ha n'heller netra outi, p'emañ emgrevet er c'hig. Dre ar vamm-vro e touer da garout ar vroad c'hall. A dra sur en deus Barrès hetet evit Bro-Elzas an emzerezh, pa veze er mare se dindan dalc'h an Alamaned. Met arabat an em faltaziñ, o c'houlenn emzerezh Bro-Elzas, ne wal Barrès nemet an tu da dennañ ar vro-se diouzh levezon an Alamaned, a-benn difenn, gouez dezhañ, harzoù an uhelvannad latin. Daoust d'ar stumm trivliadel ha lennegel keneñ gwisket gant broadelouriezh Barrès, ez eo enet un dra : bez ez eus broadoù meur ha broadoù bihan (resisoc'h e vefe komz eus mamm-vro gant Barrès, dispis eo e c'heriadur), gwirioù ar broadoù meur, dishafval ha rekisoc'h eget re ar broadoù bihan, a dleer seveniñ da gantañ penn, ha daoust da bep tra.

Maurras a savo diwezhatoc'h e deorienn war an heveladur diazez. Ur wirionelezh natur eo ar vroad c'hall. N'he deus ket an hinienn ar gwir da zibab ha broad dre un asant personel. Dreist eo zoken ar stourm evit an "Hollvroadelouriezh" d'an hini a eneb klesoù ar gevredigezh. Renet e vez pep kevredigezh gant ur urzh bonnek, gwarezet gant ar Reizh. Diazezet a vo ar veli gant Maurras evel ur gudenn elfennoniezh : pa'z eus disingalderioù er gevredigezh n'heller ket kompezañ en abeg da natur an dud, eo ret eta kaout ur poent nemetañ, a zegas dezhañ an holl hentoù : ar roue eo, rener diwar hêrezh. Ur gevredigezh istorel eo eta ar vroad, a sent ouzh an hengoun hag an dalc'husted. Bez e c'hanoer diwar ur vroad. An unvaniezh ne c'hano ket diwar ur youl-bevañ stroll, hogen diwar ur bihanniver "engehantet" a c'hell meizaf youl ar rummadoù kent ha da zont. Un afer gall eo da skouer broadelezh Bro-Elzas, abalamour ma venn ar vroad c'hall an dra-se (da gsfveriañ ouzh "rak saurt-se eo va flijadur") anez e tou da vezañ neuze youl an Holleg dirak ar roue, a vez kendeuzet ennañ an hêrezh hag ar veli. Ne c'hall bezañ eta stourm ebet dre ar vroad hag ar stad. A-drugarez d'ar Roue, bez e c'heller neuze ankounac'haat an emskiant broadel evit lekaat an dud da sellout pelloc'h, hag e vo divezet war un dro an holl skailhoù a'n em sav outañ. Ar vroad n'eo evit Maurras nemet ur stad etre, gouest da unanif an holl C'hallaoued an-dro d'an tiegezh stur. Diskoulm an holl gudennoù e vo kavet gant ar Roue ar paoc'h gall, a vo ret astenn d'an hollved, hervez goue'hemann ar reizh. Distag diouzh trubuilhoù ar vroadelouriezh, e c'hell neuze Bro-C'hall kelenn d'an holl bobloù, sachet en defvalijenn, hec'h urzh hag he sevenadur meur.

Souezhus eo diskavout un enabiezh dinbarzh er vroadelouriezh c'hall. War un tu, emañ prest ar stad da aborzhiñ war acter ar vamm-vro holl nerzhioù ar geodedourien. War un tu all, e striv da vont dreist dezhi evit he lakaat da vezañ disofijet e-touez ar bobl, e-dreñv skeud-ennoù triliv. Rivinet o deus ar Roueed, e-doug o oberenn unvanidigezh, ar galloud politikel e penn ar rannvroioù. N'int ket deut a-benn avat da walc'hañ an ezhommoù ekonomikel ar broioù gounezet gant o beli. Ne oa nemet un tu evit pennaadurezhioù ar vro, da lavarout eo ar vourc'h-izelezh, da saveteiñ o interestoù dezho o-unan : adc'hounit ar galloud kreiz ha kas ar Roue d'an traoñ, pezh a raas an Dispac'h Meur. Renañ a raas bepred ar vroad dre ar gouarnamant kreizelour a raas dezhi peadra da zebriñ gant an arboellerezh, ha n'eus nemet ar gudenn vagañ-se a gement a dalv er vuhez vroadel hag a c'houarn e gwirionez e-dreñv tal-benn ar garantez vro. Anat eo ez eo bet ret neuze diazezañ an talbenn se war un unvennoz na asant dihentchadur abet, o vodañ an holl c'hall-oued dindan ur reolenn didorr. Gant se e tau da vezañ anar pep stourm politikel. Trawalc'h ez eus gant ur vuzokratiezh divent evit kas da benn al labour mererezh boutin. Ganet ez omp bet ur wech da viken "gallaouad o lodenn gloc" ha n'hon eus nemet da braderieñ da c'hounit hon tamm kreun ha netra ken, dindan darnijadennoù ar vroad tasmant.

Hejet eo bet ar mennoza kempredat gant froudoù meur, hag o deus bet muioù pe nebeutoù a varzh e Bro-C'hall. O studiañ a rimp ivez e-keñver ar vroadelouriezh.

Diwanet eo ar sokialouriezh diwar ar Republik, mouszh youl an Hoelleg. Etre ar vroadelezh, a hafval sevel harzoù etre micherourien ar bed hag ar sokialouriezh eviti da vezañ hollvedel, ez eus ereoù start a bep tu. Difenn a ra ar sokialouriezh, dre an tiegezh hag ar sindikad, frankiz an hinienn. N'eus ket tu avat, gouez d'an deorienn sokialel, da gavout ar sindikad pe an tiegezh un nerzh kreñv a-walc'h evit gwerezñ frankiz an hinienn war ar skeul etrevroadel. Ar vroad nemeti a c'hell eta gwarentiñ al labour dieub, hag ar sokialouriezh gant an hevelep tro. En tu enep, gwellañ difenner ar vroad e tle bezañ ar sokialouriezh, p'emañ kendeuzet enni an Demokratielezh. A-hend-all, talvoudegezhioù ar vroad, mammenn a beoc'h, a zo ivez re ar sokialouriezh. Bez e vez maget emskiant an hinienn gant an emskiant broadel. A-feur ma savo renk ar vicherourien, e yelo war grafvaat enno hep mer abet an emskiant broadel. En tu all d'ar vroad e sell koulskoude ar sokialouriezh. Ar vroad n'eo ket pal diwezhañ hac'h ober. En anv ar peoc'h, n'eus ket a sokialouriezh heptañ, e tle bezañ ar vroad benveg ar peoc'h se dre ar bed, ha n'eo ket un digarez a impalaerelouriezh. Un eil renk a zo eta

d'ar vroad e-berzh ar sokialouriezh. Bep tre ma vo ezhomm da grafvaat ar peoc'h, e c'hell bezañ aborzhet ar vroad diouzh ret. War herraet e yelo an emroadur so. Arakidigezh an demokratielezh a zo un nerzh evit ar sokialouriezh, ha n'eo ket evit ar vroadelezh. Un dsiz a vo, hervez ar sokialourien n'o devo ar broadoù talvoudegezh abet ken. O roll o devo c'hoarizet neuze, da lavarout eo gounit evit mab-den muioù a frankiz ha muioù a beoc'h, pazenn ret evit degouezhout er justis sokial hollvedel n'anavezno herz abet.

Enebiñ a c'heller pep emsav hollvedel ouzh pep emsav broadel. Kofdaonet a hafval bezañ avat ar broadelezhioù da zevañ en tangwall hollvedel enaouet gant ar gumunouriezh, evit kemmañ fas ar bed. Er c'hontrol d'ar sokialouriezh a fiz er peoc'h da gentañ penn, e fell d'ar gumunourien diazezañ war an taol, goude ur stourm dieubiñ diwezhañ, ur marevezh acour war er bed mab, a vo warnañ an dud holl vroadur dre an ingaldet gounezet gant o labour. En ur ger, ur bed nevez, kuit a bep amzer dremenet, e fell dezho adsevel. Klok e vo neuze ar reveulzi, pa ray ar stad sokialour en istor ganti hac'h-unan. E-lec'h an emsav evit dieubidigezh ur bobl, e vez lakaet er penn kentañ reveulzi ar vrizhicherourien evit mastroniañ ar galloud. Dreist e vez sevenidigezh ar gumunouriezh d'ar vroadelezh. Anavezout a reomp avat an harp degaset gant ar gumunourien da zieubidigezh ar broioù trevadennet. Natur eo evito ur seurt harp, rak e walont an emsavioù broadel ur strivadenn (hag an hini nemeti) evit an em zigraouiañ diouzh sujedigezh ar kapitalisted. Ur seurt emsav na c'hell eta degouezhout nemet er frankiz hag er bed sokialour savet dre stourm ar bobl. Kemmañ a ra avat ar genteliadurezh pa vez anv eus ar broadoù dieub, dezho ur stad paour-hraet. Distag e vez ar stad diouzh ar vroad. Na vez ket doareet an emrenerezh vroadel gant an emrenerezh stad. Hentchaf a ra ar stad an ekonomiezh, benveg pennañ ar gumunouriezh. Ur genteliadurezh strizh a ren an ekonomiezh, ha trevell ar strollad-kreiz eo diazezañ ha spisaat houmañ, ha n'eo ket hini ar stad. A-benn ar fin, eo ret ur vestroniezh strizh, ha na c'hellfed kavout evit renañ ur seurt oberenn nemet Bro-Rusia, kavell ar gumunouriezh, ha bro penn-araokañ an Dispac'h. An emrenerezh vroadel na c'hell treuzvevañ nemet gant doujañs ar c'hultur. N'eo talvoudus ar c'hultur avat nemet ma'z eo un araokadenn etrezek ar gumunouriezh, enez se e vo kondaonet evel dihentchadur e stourm ar vrizhicherourien. N'eo ken eta ar vroadelezh a vago ar c'hultur, hogen ar genteliadurezh diwar stad a vago ar c'hultur broadel. Eilpennet eo bet eta ar gudenn, evit gounit ar greizennidigezh hag ar stad mac'homus.

Memestra, goude bezañ ast ken pell diouti, bez' e tistroer daoust da bep tra d'ar vroad abred pe ziwezhat. War gozhañ ez a muioù-hui taer-dar stourm ar vrizhicherourien, pa n'eus ken ezhomm anezhañ er broioù tennet kuit diouzh dalc'h ar kapitalisted. Abarzh ar rumadoù bremañ a-raok

ar baradoz da zont na lak ket da zisofjal en un eurvad danvezel tostoc'h hag en ur "c'henveves peoc'hus" posubl. Deut eo ivez ur vurevkratiezh pounner da yenañ ha da dreuzlakaat berzder dispac'hel en toulladig renerien wechall. Meizet eo bet ivez na bleg ket an ekonomiozh dindan yev ar genteliadurezh hepken, met dreist-holl dindan ezhommoù natur pep korn bro. A-raok labourat evit silvidigezh ar gumunouriezh en hollved, e fall d'ar Soviedoù startaat da gentañ penn galloudegezh o bro-int hag ar bevañ met anni. Kudennoù ur vro n'int ket kudennoù ur vro all ha setu ma teu diemglev war docheñ ar genteliadurezh, evel n'eo c'hoarvezet gant Bro-Bolonia, Hungaria, ha Yougoslavia pe Sina, Uhelvad ar vroad a chom trec'h war rederioù ar stourm ha ret eo d'ar gumunouriezh mont dioutañ.

Distroomp eta d'ar vroadelezh, he d'ur stumm anezhi a anavezaz he barr gant ar spered germanek : ar Vroadskialouriezh pe Nazism, E-doug darvoudoù divoaz en deus diwanet hag en deus kresket an nazism, a anavezet dreist-holl en ur stad brezel, ar pezh a zisneuz kalz a draoù. A-sevel ene ur bobl e-barzh stern un hollveizañ eus ar bed a voe e bal lorc'hus er penn derou, ha n'eo ket ar ouennelouriezh pa lazhadeg ar yuzevien. Keflusker an nazism a zo ar ouenn, a dra sur, met n'eo ket ar ouenn^{gan} ur star bevoniell, hogen gant ur star buhezegel. An arouez buhezegel eus dreistelezh ur bobl a zo ar ouenn. Pep tra a vez talvoudus evit kadernaat an dreistelezh-mañ, hag a gas d'ar vroad. Digeriñ a ra ar bobl prenestr ar "Weltanschauung" pa sav betek skeul ar vroad, rak emañ ar vroad e tachad ar wirionez. Diseneuziet o dous ar frankizouriezh hag ar Verkelegezh dremm gwirion ar vroadelezh. Ret eo distrujañ ar stadoù modern, diazezet war an ekonomiezh, he n'eo ken war voizañ ene ar bobl. Ganto, eo dav neuze kas d'an traoñ kement tra a labour ouzh ar vroad hec'h-unan, ha dreist-holl an etrevroadelouriezh, aroueziet gant ar Yuzevien, gouenn hep broad emañ otre he daouarn beli espernel ar bed. Daseurc'hifañ a dleer ar stad a gumuniezh, evel ma veze intentet gant ar Grennamzer, da lavarout eo ur gumuniezh glok, a wad hag a spered n'hall ar stad netra outi. Sturiet e vo ar bobl gant ar "führer", an hini nemetañ o c'hell meizañ en he flas star hallek hec'h istor ha redigezh he flanedenn. Gant ur redigezh vuhezegel eo hon eus d'ober, ar pezh a eta evit ar bobl dibabet se, un dachenn vro a rank gant he zalvoudegezh, un tachad bevañ, rak staget don e vez buhez ur bobl ouzh he douar. Ar vroad alamen a vo ar vroad bennañ dre ar bed evit kas ar pobloù all d'ur seurt uhelvennad, dre hag diouzh ret.

Emañ bepred mab-den o klask o eurvad a vez digoret an nor anezhi

dre ar frankiz, Daoust hag anez e vefe e enklask ? Ya, ma'z eo aet da glask ar frankiz nemet da bal. Dre ar reveulzi e vez degaset adarre dindan ur stad bennak a strisha e frankiz. En tu kontrol, bez' e c'haller c'hoazh kavout broadoù divrud o buhez, ar pezh na islavar ket en diouer a boan, met asantedigezh ur giriegezh vroadel wirion. En abeg da se, en deus anavezet mennoz ar vroadelezh ar gwañhañ diskaroù hag an seunañ trec'hadegoù. Poent eo bremañ en em dreiñ war du hor bro, goude kentelioù meur an estrenvroioù. Betek re eo bet desket dimp sellout ouzh hor vroadelezh evel ur vrez hag un dizenor evit ma vo lorc'h ganimp o studiañ aketus al lorgnez-mañ a chom peget ouzhip daoust da bep tra.

o
o
o

2

A-viskoazh ez eo en em savet ouzh ar politikerezh a greizennidigezh sevenet gant Bro-C'hall, enebadenn ar strollenn vreizhat evit difenn ar pezh a dieomp enval he vroadelezh. Spisaet en deus ar c'helenner Ar fur ur wech da vat, hag en un doare direndael, kuit a wadre hag a lentegezh, broad vreizh :

"Pegoulz e c'heller komz eus isnivereñ vroadel pe eus vroadelezh ? Bez e vez disklêriet tri seurt anezho harvez faurioù-emglev an isnivereñnoù: an isnivereñnoù dre ar ouenn, dre ar yezh, ha dre ar relijion. Lezomp a gostez hini ar ouenn hag a zo an hini vreaetaetañ, hag evit gwir, an hini vrasañ da zisfiziout diouti...met e chom ar yezh hag ar relijion; sevel a

reont an div vrasañ pennabeg a zibarelezh, a c'heller ouzhpennañ dezho un nebeut re all : doareoù an douaroniezh, an istor, interestoù an ar-boallerezh, a engehent o bodadeg hengounioù kevreet a c'houl an hevelep stumm-hevañ ha buhezgezh, ha dreist da bep tra, ar youl-bevañ-stroll a gensav personelezh skisaf ar broadelezhioù.

An holl zibarderioù-se, o c'henstrollañ a ze Breizh d'un derez uhel... "

Gwelout a reomp n'eus ket tu e gwirionez da glozañ ar vroadelouriezh vreizhat e-barzh stern strizh ur gelennadurezh bennak. N'eus ket tu da ziskrivañ he diazez gant an hevelep termenoù hag hini ar vroadelouriezh c'hell. Dreist da bep tra, ez eus ur youl-bevañ-stroll hon eus gwelet uheloc'h. Evit kompren hor broadelouriezh, eo ret eta he c'hompren en he c'hlokted. Neuz dibar ar glokted mañ, er c'hontrol d'ar pezh hon eus studiet betek-hen, n'hell ket kas d'ur gelennadurezh trehontal a ya diouzh an nerzh evit trac'hiañ. Evit hor servij e talvezo houmañ, ha n'eo ket ni a yelo da vevelian war o daoulin dirak o benveg. Gwelloc'h eget ur benveg, ez eo hor broadelouriezh hon alc'houez dimp-ni evit diskoulmañ an enebiezh a zisrann an hinienn hag ar strollenn. N'eus ket tu da vevañ war an douar mañ hep ur c'hempouez etra an daou nerzh bras se. Goude bezañ kavet ur pent-etre, e chom c'hoazh da vevañ. Bevañ penaos ? Gant tachenn an ober emañ bremañ degouezhet.

A-drugarez da skeudenn displeberet, ha brudet eivazh, ar C'helt hufvraer, lefver, hag emrenus betek un hiniennelezh dinerzh, e soñj d'an dud speredek, gant reizh pe get, n'eus ken a blas evit hor sevenadur, pe ar relegoù o chom war a lerc'h, e bad-bremañ ar stadoù sklerijennet gant trehontelezh ar sevenadur latin pe "klasol". Evelse, e hafval pep tra en em sevel ouzhip; ha pep tra e gas da zispleberadur goapaus hon talvoudegezhioù-ni, pa na vez ket lakaet ar vuhezgezh da eskumunigañ hon uhelvennad "barbar". Tra na vo ket eilpennet ar rak-varnadennoù se sanket don e spered ar werin, n'hellimp ket mont war reok. Bez'ez eus skoilhoù diniver eta war hon hent. Hoaladur ur "ouennelouriezh speredel", hoaladur un neptuegezh aohik, hoaladur an euzhvil "Ekonomiezh" a vo kement a hentoù dall da ziwall diouto. Ma ompentomp Breizh, pe ur vro geltiek all, evel ur chapel gouestlet da azeulidigezh ar geltelezh, evel ur repu ouzh ar gwallzarvoudoù, evel ur vro gant tud leun o c'hoef, e vo distrujet Breizh ken buan all. Prederouriezh ebet na ziskoueze dimp hep mar ebet an hent da heuliañ. E nerzhoniezh a gavo ar gwir ziskoulm e kreiz pep hini, muioc'h hervez realennoù ur vuhezoniezh natur dimp ni eget hervez poellatadennoù divuhez. Met a-rak respont d'ur seurt goulenn, goulenn grofs ar vroad hon eus klevet ni hall d'un oad pe oad eus hor buhez, o klaskimp resisaat ar pezh a ouzomp eus ar sevenadur a vo respont hor gouzudadou.

Droukhalet a c'heller bezañ o liveañ ar sevenadur keltiek gant skeudennoù giz-kozh, ha n'eo ket youl vat ur Gorsez bennak a zaskore dimp e anien, beuzet ma'z omp abaoe hor bugaleaj prim e keolioù ar skol c'hallek. Kalz muioc'h eget bravigoù La Tène, an arer gelist pe ar roue Arzhur e daol grenn a gavomp er sevenadur keltiek a chom bev c'hoazh o levezon e spered Europa, pemp kantved goude e dramenvan.

Ur souezh eo gwelout e voe ar Grennamzer, digoun eus Roma, kompred gant bleuvidigezh an holl vroadoù keltiek. Advevañ a reas al lusk mañ a-hend-all war an dachenn lennegel gant Romantelezh ar c'hantved diwezhañ. Eneptezonn ar spered latin e voe e gwirionez hor sevenadur en Europa, ha n'eus bet nemet an Iliz o stagañ etrezomp hag ar c'hreisteiz ul liamm bras a-wec'h. Ne oa ket meskoj e-barzh ar stad keltiek, daoust da rekredenn an istorourien untuak o deus brasstudiet he stumm. Ur gevredigezh vuhezoniell e oa. Sentif a ra euzh grofsadennoù speredel, mammenn a zoverioù, ha n'eo ket ouzh al lezennoù, mammenn a wirioù. Pa en em savo outi mac'hon-ezezh ha kreizennelidigezh ar stad hollek, oc'h aloubif penn koznog Europa, e yelo ar maout gant an nerzh. Na vez savet netra dre an nerzh, rak na vez dezhañ chom hep sevel un dra bennak : emañ an amzer da zont an e zalc'h. Bez' e oa hor sevenadur-ni er c'hontrol da vevañ en amzer vremañ, hafval ouzh lennegezh dro gomz ar varzhed n'anavezet kaulz loaret ger anezhi, rak e oa ret dezhi merzel pa varve ar gevredigezh a c'hane anezhi. E gwirionez e voe ar sevenadur keltiek un nepster, un desfae marteze evit an Denelezh, ker d'an desfae all, ar vroad.

Alese e teu m'eo deut da vezañ divreizus hor sevenadur d'ar speredoù o vevañ ez-voas en un aergalc'h latin a wel annañ un abeg da c'hoarzhin pe ur c'hann-kultur da lazhañ, evel ma c'hoarvez e Bro-C'hall en amzer vremañ. N'hon eus ket arnodet da startaat da viken tonkadur mab-den hag an hollved evel mennad ar vureokratiezh roman. Kinnig a reomp d'an dud, n'eo ket esurentez ul leve mat e fin o buhez, hogen binvioù emvoudel evit gwarezif personelezh ha frankiz an hinienn. Er c'hontrol d'ar Romaned, pe d'ar Jakobined, a fiz al lezenn evit difenn gwirioù ar c'heodedour, ar Gelted o deus ankorfaet o buhezoniezh. N'eus ket a lezenn evit difenn ar vroad. Setu perak, evel m'her gwelimp pelloc'h, pa zeuio ar feodaliezh, ha gwashoc'h ar vourc'hizelezh da zistroadañ ar gevredigezh keltiek, oc'h en em silañ enni, ne oa nemet al lezenn gouest da herzel outo d'ober o reuzioù, ul lezenn a lazhe hor broad. Rak ar vroad a vag al lezenn, ha komzoù goullio eo ar c'hontrol.

Darnvuiañ an istorourien c'hall a nac'h kredif en ur marevezh aour ha deus bevet ar Geltelezh, o kadarnaat o frouadenn dreist-holl gant o untuegezh. Kenistor ar broioù keltiek a chom c'hoazh da ober, hag ar-maez

eus ar storn hollek se, n'heller ket kompren e emdroadur. Trawalc'h e vo dimp berrdaolennañ emzalc'h ar gevredigezh keltiek direk ar c'hudennoù bras o deus taget anezhi. E pep bro keltiek ez eo c'hoarvezet darvoudoù damhafvel hogozik d'an hevelep pred. Buz ha buhez ur gevredigezh hepken hor bo da studiañ. Daoust hag e sono ivez d'an hevelep eur o dihun, goude ar goanag he deus tragernet goude adsavidigezh Eire ?

o
o o

Distro diouzh an douar-bras, he deus savet an enezenn c'hlas un dachenn gloz, a darzhas enni an un doare didruet an dispac'h hag ar waskedigezh, abaoe emgann Brian Boru ouzh Daniz betek hini ar Sinn Féin ouzh ar Saozon. N'eo ket souezhus eta e treuzvevas an Iwerzhon ur spered vroadel didorr, daoust d'an aloubadegoù a bep seurt e-pad pemp kantved. Tennañ a reas Haniwerzhon d'ur gumuniozh war ar maez, hep k'bríoù bras, a voze he diazeaz an "tuath" ur seurt a is-stad klok gant ur vodadeg-bobl hag hini ar re henañ, dindan mestronezh ar roue. N'eo nemet war dro 430 e voe tizhet Iwerzhon gant ar Gristenolezh degaset gant Sant Padrig, a savas un iliz Vroadel a reas ul lafe nevez da vuhez ar vro. Ur roll bras a vo c'hoariet diwezhatoc'h ganti a-hend-all evit antañ an emskiant broadel ouzh argadennoù an diavaez.

Goude donedigezh Daniz a lakaas o annez e Dulenn hepken, prenestr digor war-du Bro-Saoz, e oa siriusoc'h aloubadeg an Normaned, a lakaas da zont e-barzh Iwerzhon ar feodaliozh, un doare kevredigezh a-enep krenn d'an hini geltiek, a anavezse da skouer ar gwir d'ar serv da vezañ un den dieub, mestr war e zouar. En aner e strivas renerien evel Rory O'Connor, Brian O'Neill herzel ouzh al lanv. Abred e touas ar vro da vezañ lodennet betek ar C'honnac'ht etre an uhelidi norman. E 1297 e c'helle an uhelidi-mañ an em vodañ an ur Parlament, a savas diwezhatoc'h un nerzh etre pobl Iwerzhon hag ar Saozon. E 1366 e start-eas "Statudoù Kilkenny" an urzh feodaliek, tra ma teo da vezañ gwashoc'h-gwashañ dalc'h ar Saozon war an enezenn a-bezh, o rediañ ar bobl da

zivroañ, anez mervel war blas, hag o skrapañ diganti hec'h holl zouaroù dre ar "Plantadurioù".

Adal 1537 e voe poulzadenn an Disivoud Meur, deut mat gant an uhel-eghez estren d'ar vro. E 1606 e lakaas Herri VIII dre an "Act of Suprematy" relijion an iliz saoz da relijion a-berzh stad, gant ar spi da gendeuziñ penn-kil-ha-troad Iwerzhon ha Bro-Saoz. Ne oa e gwirionez nemet teurel eoul war an tan hag e tarzhas an "Dispac'h Meur" en e benn Hugh O'Neill hag O'Donnell ar Ruz. En e varr e voe ar brezel a zieubidigezh vroadel ha relijiel dindan bienierezh Owen Roe O'Neill a savas ur gwir Republik a-raok an eur gant "Kevredelouriezh Kilkenny" e 1642. Er gwad e voe bezzet siwaz an holl strivadennoù se gant Cromwell, hag embannidigezh al "lezennoù torfedel" a waskas pep c'hoant a c'nebiezh a-touez ar bobl, reuziet dija gant naonagezhioù spontus. C'hwitañ a ray an arnod diwezhañ an emgann ar Boyne e 1690.

Ur repu a gavo an enebiozh e-barzh ar Parlament, ha renet adal neuze gant ar Brotestantourien, a hote ur stad a beoc'h evit lakaat o arboollerezh da vleuniañ. Evit gwir ur c'hwitadenn nevez e vo ivez politikerezh ar Parlament Grattam evitañ d'en em harpañ war nerzh ar "Volonterien armezet". En ur glask kenaozañ an interestoù iwerzhonat ha saoz, ne deuas diskoulm ebet da guden an douar. Unanidigezh Iwerzhon ouzh Bro-Saoz na oufe ket termal, daoust d'an dispac'her Wolf Tone hag e "Iwerzhoniz Unanet". Moushiet e voe eta e 1800 etre an Iwerzhon peour ruzh, goullonderet diouzh ha finvidigezh hag he zud, hag ur Vro-Saoz e barr he galloud.

Desket o doa Iwerzhoniz da gevout ur vroadelezh a vefe he dazont diouzh ar pezh a rafent o-unan. O gwad o deus roet evit se, mat n'eo ket diskoulm pep kudenn evit keloù se. Da vevañ er frankiz o deus bremañ, hag ez eo marteze ar pep diaesañ. Kudennoù ekonomikel, kudennoù an Ulster, ar C'hultur, a vo ret dezho diskoulmañ ma fell dezho mirout ar pezh an deus graet o meurded.

o
o o

Ma kemeras ar stourm broadel an Iwerzhon ar perc'hennañ ur plas eus ar c'hentañ, ez eo ar stourm relijiel a vevaa da gentañ penn stourm Skosiz ouzh an anebour boutin. Da ziskavout o unded broadel o deus poaniet Skosiz, rannet evel m'emañ Bro-Skos en ur gouezelva rik, an Uhelvro, tra ma c'hoari levezonioù estren liesseurt war harzoù ar vro, an Izelvro, lodenn binvidikañ ar vro a-hend-all. Na voe ket ergerzhed kalz Bro-Skos gant

legionarioù roman Agrikola e 79. E diwezh ar IVvet kantved, e voe degaset diouzh Iwerzhon ar gristenalezh hag e voe treuzfurmnet kreizenn an drouizet Iona e pennvanati an iliz skosat. Enebiñ a reas Iona betek 700 ouzh beli Roma, hag er bloavezh se e voe degaset e Dunkield, en Izelvro dindan zalc'h an iliz saoz.

Evel en Iwerzhon, e spurmantas ar feodaliezh gant Gwilhelm an Alouber, e zeuas mestr war ar vro e 1072, o trec'hif Malkolm III, roue diwezhañ rouantelezh Alba, na c'hellas ket mirout hêrezh ar roue meur Kenneth Mac Alpine. Er c'hontrol da Iwerzhon, e chomas en Izelvro, hag e voe miret framm ar gevredigezh keltiek en Uhelvro dilezet gant ar vistri nevez. Sevel a reas ar re-se ur Parlament e 1300 a voe berveg ar galloud saoz. Koulskoude ne oa ket marv-mik pep spered vroadel, ha goude emsavadeg an haroz brudet Wallace, e kemeras Robert Bruce penn an dispac'h. Sakret e voe roue e 1306 ha feur-skrid Southampton e 1328 a anavezse an emrenerezh skosat.

Disentidigezh an uhelidi a aesaas donedigezh ar Brotestantouriezh a savas ur iliz nevez, ar c'h-Kirk. Eilpennet e voe memestra ar gudenn pa droas ar c'h-Kirk da iliz broadel, pa drec'has Elizabed war Varia Stuart, war droun Bro-Saoz e 1561. Goude dimeziñ ar gristenalezh gant ar vroadelezh, e teue d'en em unaniñ ouzh an hevelep kaoz ar relijion nevez, ar bresbiteriezh, a ziwanas koulskoude diwar enebiezh ar C'hirk ouzh ar roue skosat. War grefvaat ez eas emskiant an emrenerezh pa savas houmañ ur "Vodadeg veur" ha pa voe kendeuzet e 1603 tron Bro-Saoz gant hini Bro-Skos, goude kurunidigezh Jakez IV, mat da Varia Stuart, e penn Bro-Saoz.

Ken krefv all e oa chomet healdur ar vroad e kalon Skosiz daoust da bep tra. Gwelet e voe zoken Charlez III, roue Bro-Saoz, treif tu d'e chupenn, goude bezañ trec'het gant Skosiz e 1650, ha dont en-dro da gemer, en anez, penn ar stourm ouzh Cromwell, e-touez ar renkadoù skosat. N'helle tra avat ouzh nerzh an hini krefvañ : dindan ar gourdrouz a wasterozh ekonomikel ha dindan poulzadenn bourc'hizion an Izelvro, e teuas a-benn Gwilhelm Ozañjez, gant ma vo anavezet gwirioù ar C'hirk, da varc'hata an Unanidigezh ha da ziskar ar Parlemant e 1707. O iliz o doa miret Skosiz, met o frankiz o doa kollet, dre ziouer e nerzh politikel gwirion. Anatoc'h e voe ar c'hwitadenn gant emgannoù ha trec'hadegoù diwezhañ Sheriffmuir e 1715 ha Culloden tregont vloaz pellac'h. N'o doa ket komprenet an uhelidi, digor war holl levezonioù an diavaez, ken politikel, ken relijiel, ne oa ket nerzh ur vroad o chom e nerzh he renerien, hogen e-barzh ar bobl, ha n'eo ket evit difenn dreist-gwirioù, hogen evit difenn gwirioù ar strollenn. Ar pezh na vo ket komprenet gant an uhelidi na voe maizet kennebeut gant ar vouc'hizelezh. O beli a dalvezas dezho da reizh evit kondaoniñ hor sevenadur.

o
o o

Tostoc'h ouzhimp dre hec'h emdroadur, e kinnig deomp istor Bro-Gembre hevelep taolenn ur c'h-lask hir goude he broadelezh. Ret eo ober un diforc'h koulskoude, pa venner studiañ hec'h istor, diouzh buhez ar broioù keltiek all. Merket hon eus dija e veze galvet Iwerzhon d'ur vroad dizalc'h diouzh alouberien an anezenn, n'o devoa gwir ebet war an douer gounezet ganto dre an nerzh. Evit abegoù damheñvel, distro diouzh froudoù meur an aloubadegoù, e c'hellas Bro-Skos chom dizalc'h diouzh ar galladegerzhioù estren ha bevañ, evit lodenn vrasañ ar vro, war hêrezh sevenadur ar Golted kozh. Stumm ur stad relijiel a gemeras, met hon eus gwelet e voe kollet gant aberzh ar vali denvezel e gounid ur vali trehontel evel an iliz. Kemmañ a re avat an daolenn gant Bro-Gembre.

Ranket o deus Kembreiz, a-raok pap tra, deskiñ bezañ ur vroad, ha se, daoust d'an diforc'h bras a gornioù-bro hag a veuriadoù o rannañ o bro e kombodoù diniver. Er c'hontrol da Vreizh, e voe savet a-ziwer divroadeg ur boblañs an he fezh, an harlu oc'h enaouiñ an emskiant vroadel, e voe dev da Vro-Gembre bodañ tud disheñvel en he c'hreiz, dre heg alies a-walc'h. Bretonek a veze en amzer wechall lodenn vrasañ Breizh-Veur. Na veze ket enni a vroad ispisial, nemet ur boultronn a rouantelezhioù bihan amrouestlet kenañ o istor. N'eo nemet gant trec'hadeg Deorham gounezet e 577 gant ar Saozon e voe trec'het Bro-Gembre diouzh Kernev-Veur. A-hend-all, pa voe resisaet harzoù Bro-Gembre a vevenne astennidigezh an aloubadegoù, da stourm he deus bet evit tastaat Kreisteiz ar vro (an Deheubarth) ouzh an Hanternoz (ar Gwynedd). Evel an izelvro e Bro-Skos, e voe an Deheubarth an nor digor war al levezonioù estren, al levezon ouezalek ha normanek dreist-holl, a zouge enni preñv ar marv evit tonkadur ar gevredigezh kembreat.

Gouzañv a reas Bro-Gembre aloubadegoù a bep seurt, met e savas bepred ur roue-mañ-roue evit dorc'hel gant ar stourm broadel. Kroget e 58 araok H.S. gant Kaezar ha kendalc'het gant Klaodius e 43 goude H.S., e voe dilezet kronn an aloubadeg roman war-dro 420, gant diskar an Impalaeriezh. War-lerc'h e teuas Skosiz er IVvet kantved, Iwerzhoniz, hag ar Saozon adal 450 betek 600, hep dont a-benn da zisneuziañ neuz kozh ar vro, nemet a voe spisnet he harzoù (dre sav-maen ar roue Saoz Offa da skouer, a heda harz ar Reter). Etre 850 ha 1063, na vir ket reuziadoù Daniz ouzh buhez ar vro da vluaniañ dindan beli roueed vrudet evel Cunedda, diazour rouantelezh ar Gwynedd, Maelgwn, Rhodri Mawr, Hywel Dda (+ 950) Gruffydd Llywelyn (+ 1060) war-dro gant lusk an arzoù (Taliessin, Aneurin hag ar varzhed veur). An hevelep degemer a voe graet d'an degasadennoù nevez hag er broioù keltiek all, ha

dreist-holl d'ar gristenalezh a lakaas e derou ar XV^{vet} kantved da advefañ ar vro holl rumadoù ar vuhez, ken lennegel, ken speredel, dindan kentsal-iaouezh mistri brudet evel Gweltaz, Dervi.

En arvar e voe da vat ar vro pa zegouezhas adal 1093 an Normaned o doa gounezet peurrest Breizh-Veur. N'eo ken war he nerzhioù dezhi hec'h-unan, met war emskiant he broadelezh e voe ret da Vro-Gembre kontañ. Chom a reas hanternoz ar vro e-kichen ar reveulzi. Beuzet avat e voe an Deheubarth gant an Normaned a'n em ziazezas dre an nerzh evit tizhout aesoc'h goude se Iwerzhon. Daoust da galon ha sked ar roueed diwezhañ o ren war ar Gwynedd, evel Owen ap Gruffydd, Llywelyn ap Gruffydd (+ 1282) hag em-savadeg an hini diwezhañ hag an hini iskisañ holl war un dro, Dwen Glyndwr (+ 1414) a strivas bodañ en-dro dezho nerzhioù ar vro, e oa re ziwezhat. Breinet lodenn izelañ ar vro gant ar feodaliezh, n'helle tra ar Gwynedd meneziek ha gouez ouzh impalaerelezh Lunden. Gant re a zale e tiskavas ar gumuniez e oa ar vroadelezh an nerzh nemetañ evit derc'hel penn ha diwezhatoc'h, en em zigabestraf. Ur wech adarre e voe kadarnaet ar gredenn mañ : bez ez eus broadoù dreist d'ar re all, ha na dreuzvev nemet ar re grefvaf anezho.

o
o o

Pa zivroas ar Vretoned diouzh o mamm-vro, da lavarout eo Bro-Gembre ha Kernev-Veur, ne zegasent netra ganto, ha pep tra a oa da sevel war an douar estren a lakaent o annez warnañ. Deraouañ a ra amañ hon istor-ni. En ur vro Arvorig digenvez koulz lavaret, ez en em ziazezas ur sevenadur keltiek bev, ha bevaet war c'houde gant an darempredoù start a liammaas Kelted tizmor a-dreuz mor Breizh gant an divroidi e-pad kantvedoù. Ret e oa bevañ war an douar dianav, hag a-se, sevel ur stad a c'hellfe derc'hel penn ouzh nerzh un amezeg a rukuna hor c'havredigezh.

Goude trec'h Ballon (845) e krogas Nevenoe gant ul labour n'en doa ket sojfet ennañ hep mar ebet e vestr kentañ, Karlez Voal. Hep treuz-

alan toravel

feurmiañ don emfram ar gevredigezh, e strivas kendrec'hiañ Breizhiz war e veli dre etreadur an Iliz a lakaas dindan zalc'h arc'heskopti Dol. A-hend-all ne voe ket kemmet an is-galloud, a veze rannet e kombodoù pe gontelezhioù ar c'hont en o fenn, o vodañ ar plouioù hag an trevioù renet gant ar mac'htiern ha diazezet war an tiegezh.

An holl labour unvaniañ se a voe dispennet gant aloubadeg an Normaned goude merv Alan Veur e derou an XV^{vet} kantved. Da get ez eas an emfram sokial dre waskerzh ar bobl hag harlu ar veleien hag an dierned. Skubet ar vro, e voe prest da zegemer neuze ar feodaliezh war zismañtroù ar savadurioù kozh. Pa erruas Alan Varvek distro diouzh Bro-Saoz evit adkemer penn ar vro e 939, e oa dija diazezet ar feodaliezh. Adal neuze e voe kontammet istor Breizh gant stourm an aotrouniezhioù ouzh beli an dug, skoazellet ma'z oant gant levezon hollc'halloudek ar stadoù bras evel Bro-Saoz pe Bro-C'hall. Emdroadur ar feodaliezh, war dachenn ar perc'hennañ douar da skouer (tachennad kofje, kevaz) dieubidigezh abred ar sklaved e 1112 gant Alan Ferjant a ziskouez koulskoude na dreuzvevas spered ar vestroniezh nemet war an dachenn bolitikel. Gwell e veze d'an uhelidi en em fiziañ war un harp estr eget ur bobl izel ha dianav dezho.

Dont a reas e 1166 gant Herri II ar Blantagened mistri war ar vro, hag evel e Breizh-Veur e fallas dezho kenlabourañ an aotrouniezhioù e-barzh ur Parlament tost ouzh beli an Dug. Startaas a reas Per Dreux hag e warlerc'hidi betek Yann III (1341) an emdroadur se. An diskoulm nemetañ a harvale bezañ, o kenezoañ nerzh an Dugalezh gant hini ar vestroniezh. Etre 1341 ha 1364 e voe reuziet ar vro gant brezel an Hêrezh. Ma anavezas ar vro e-pad ur pennad trec'h Yann Vonfoz saozger war Charles Bleiz gallgar, ha goude se pa voe krefvaet galloud Yann IV, ne 'z ae ar maout na gant ar Gall na gant ar Saoz. Gant Breizh ne lavaran ket. Digoret e oa an hent evit renadurezh klodus Yann Bemp (1399-1442) a boursachus savedigezh ar gevredigezh keltiek en ur stad vroadel a skedas war Europa a-bezh.

Ur stad demokratel mesket gant aristokratelezh, setu penaos e vez livet deomp an Dugalezh Rous. Ur c'hempouez a veze etre frankiz an hinienn hag uhelvad ar vroad. En he fenn e kavomp ar blienier, an Dug, kelt'hiet gant e ministred, pe "ofisourien veur" bodet en ur "Guzul Stad" dindan renerezh ar "C'hansellour"; a-is d'ar galloud uhel, hag evit harzañ e ober, e kavomp an div gembr, ar "Stadoù" hag ar "Braujoù" a chomas a-pad pell amzer kendeuziet. Aergelc'h an "Hennoazaz" a awene ar galloud-se. Ret-mat eo dimp anvav koulskoude e voe rouantelezh Yann Bemp kanenn an Alarc'h, hag e teraos diouzhtu goude e varv tramenvan hor bro. Abegoù pouezus ha niverus o deus c'hoariet evit displegañ kouezhadenn brim ur stad a vent etrevroadel.

alan toravel

Bez e voe da gentañ penn an nerzh a drec'has war holl arguzoù ar politikerezh hag an diplomatarezh. Mont a reas Charlez VIII da lakaat ar seziz dindan Roazhon evit sachañ un asant digant annez Vreizh. Bez e oa ivez abegoù o tont eus an diabarzh. Emsalc'h an uhelidi a c'hoarias ur roll a-bouez evel m'hon eus gwalet e gwanidigezh beli an dug. Dreist-holl e voe savidigezh ar vourc'hizelezh, gant kreskidigezh ar c'hêrioù bras, a c'hellas lakaat hec'h emell en galloud politikel dre hent ar Parlamant evit difenn un arboallerezh na veze ket diouzh un enebiezh etre Breizh ha Bro-C'hall ha diouzh ar brezel a enebe an div vro. Torret e voe tamm ha tamm an daou rumm-se diouzh peurrest ar werin, o chom hep meizañ hec'h interestoù hag re ar vro a chome anni.

Mar deo bet ret ar pennabegoù mañ, daoust hag e oa trawalc'h ? Hep mar abet e vije bet ret d'ar stad vreizhat ouzhpenn daou gantved evit kadarnaat ur gendeuzenn ken brek hag a vleunias en un endro etrevroadel trubuilhet kenañ o kemmañ digemmañ dizehan. Marteze ne vije ket bet ur seurt kudenn gant an amezg hag un enebour estreget roue Bro-C'hall. E gwirionez e voe ur stourm, n'eo ket hepken etre div stad krefvoc'h pe grefvaf, hogen etre div vroadelezh dishefvel ganet diwar ar c'heal gall hag ar c'heal breizhat. Ne c'helle ket ar c'heal diwezhañ bezañ diouzh un uhelidigezh hag ur vourc'hizelezh estren en o mamm-vro, evel en holl vroioù keltiek all. Pa voe staget e 1532 an eil bro ouzh aben, e kredas marteze d'ar Vretoned 'zo e karg e oa posubl da Vreizh treuzvefañ dindan beli Bro-C'hall. Ur fazi a raent gant ur seurt jedadenn siwazh, dre dreuzvernañ gwir diazez ar vroadelezh c'hall.

Ar fazi a oa bet graet abretoc'h koulskoude ha n'eus forzh penaos e oa re ziwizhat cheñch penn d'ar vazh. An diskoùm degaset gant Duged Vreizh, hag i estrenion d'ar vro, daoust d'o c'harantez ha d'o emouastlañ d'o broad nevez, da gudann ar gumuniezh e-barzh stern ur stad, daoust ha poellek e voe ? O kemer dibab ar vro, an uhelidi, pennadurezhioù an iliz, ar vourc'hizion da dredeogiezh etre ar bobl hag an dug, e voe savet ar c'hontrol ur c'hleuz etre gwirizienn ar vroad ha pennrenerozh ar vro. Diougenel e meur a gaver e oa enfram ar stad brezhonek evit ar pezh a sell ouzh diazezañ ar veli. N'he deus ket dalc'het kont an enfram se avat eus hanvoud ar strollenn geltiek. Eoas a vezer dre vras en Emsav da ganmeulif oberenn Yann V hag hini duged Vreizh. Eus o gwellañ o deus graet, a zo sur, evit derc'hel Breizh en he sav. Met siwazh dezho, ne oant ket Breizhiz, hag ez eus talvoudegezhioù hag abegoù na c'haller ket kompren na ne vezer ket genidik. Dafjerus eo dougen kiriegezh ur vro e-barzh seurt divizoù.

Eveljust ne varvas ket trumm pep speread a enebiezh e Breizh goude

an Unvaniezh, evel an holl her goar. Mercoeur, gouarnour Breizh, a gemeras penn an emsav katolik e Bro-Gernev e-pad ar brezelioù relijion (1589-1600). En em sevel a reas dizehan ar Stadoù hag ar Breujoù ouzh galloud ar roue gall hag en abeg da se a voe harluet e Gwened e 1650. Hejet e voe ar vro a-bezh gant dispac'h ar Bonedoù Ruz hag ar Papaz Timbr e 1675, dindan renadur Ar Balp. Pontkallag hag e "Vreudeur Vreizhat" e 1719, ar Chalotez gant kostez ar Bastion, hag erfin ar Rouerie e 1788 a zalc'has bev klemm pobl Vreizh ouzh gwaskerzh ar stad c'hall. Anez e teuas an holl strivoù se gant taol skub an Dispac'h Meur e 1789 a zispennas pep tra en anv ar Frankiz hag an Demokratelezh. E-barzh tachenn an direizhded e teuas ar vroadelezh vreizhat d'an 20 a viz Meurzh 1789 gant klemmadeg diwezhañ ar Breujoù ouzh lamedigozh hor frankizioù embannet, en despet d'ar gwir, e-pad nozvezh foll ar 4 a viz Eost. Gant ar chouantelezh e strivas ar bobl evit mirout stad kozh an traoù, ar roue marteze, met ivez war un dro gwirioù Breizh kretaet gant feur-emglev 1532. E emsavidigozh a voe torret krenn avat gant ar jeneral "mat" Hoche a deuzias hag a wiskas ar bobl tra ma c'hellas. Adal vremañ, ne oa netra ken evit lakaat an dud da zerc'hel koun eus Breizh, par n'eus ken a blas eviti e Bro-C'hall unan ha distannus. Gallouedomp ni holl bremañ, ganet e Bro-C'hall, o reiñ hor poan, hor gwad hag hon arc'hant eviti. N'eus ken a Vreizhiz.

o
o o

Planedenn ar vro a vo diazezet bremañ war zivskoaz an hiniennoù bodet en Emsav breizhat. E penn derou e strivas an Emsav da zerc'hel bev, pe da zasc'hif diouzh ret, ar pezh a oa anavezet pe a veve e Breizh, daoust d'al labour unstummañ sevenet gant Bro-C'hall. Ar yezh da gentañ holl, merk anatañ ar vroad, a voe soñjet evel ur wir yezh unanet, par d'ar yezhoù all, gant tud evel Ar Gonideg pe Kervarker. An istor a voe studiet ivez, er-maez eus kelennadurezh ofisiel ar Skol-Veur, gant hor broadelour daoust dezhañ, La Borderie. E 1898 e voe savet erfin "Kevredigezh Vroadel Breizh" gant Markiz an Estourbeillon, a chomas staget d'ur rannvroalezh fur, evit hec'h anv da vezañ taer. Ar galon an deus bet da embann evit pep

pobl "avel dreist ha digemm ar gwirioù a vez dalc'het anno o kadarnaat da viken o frankizioù pennañ". Da grediañ ez eus avat e oa dreist-holl hiraezh an amzer dremenet a zassone e seurt komzoù, e-lec'h ar mennout da adsevel ur bobl nevez en amzer da zont.

D'an 29 a viz Here 1911 e tarzhas diskleriadurezh c'harv hag entanet "Strollad Broadel Breizh", a c'heller kavout enni e berr gomzoù ar pep retañ eus ar pezh a aweno ar vroadelourien da zont. E miz Gwengolo 1918 e voe savet "Strollad Rannvroel Breizh" a voe bremañk e gelaouenn "Breiz Atao" hag e 1919 "Unvaniezh Yaouankiz Breizh". E 1927 e c'han e Rosporden ar "Strollad Emrenerel Breizhat" a stardaas en emvod Kastellin bloaz goude e gelaouadurezh, o c'houlenn ur stad emrenerel evit Breizh e-barzh stern ar Stad c'hall o c'hortoz ur statud kevredadell en Europa da zont. Ar randaal a savas koulskoude e 1930 hag a rogas ar strollad e-pad meur a vloavezh eo gwir adskeud ar gudenn a zisrann bremañ c'hoazh an emseverien. E kroc'h an hentoù e oa douget an Emsav : pe ober eus Breizh ur vroad, pe gat. E 1931 e vez embannet ur varrdaolenn eus ar gelaouadurezh na resiza ket ar gudenn, o lakaat da anet koulskoude : Breizh da gentañ, Ul lañs nevez a voe roet d'an Emsav gant tarzhadenn ar 7 a viz Eost 1932 hag a yelo war herreat e gresk endra ma teñvala ar bed en-dro da Breizh. Keal ar stad vreizhat e c'hounez muioc'h-mui a dachenn er speredoù, e-drugarez d'ur gelaouenn evel Stur a zeuas er-maez e 1934. A-hend-all e vez dihunet ar werin gant ober Gwenn ha Du hag ar bruderezh a vez graet en-dro d'an Emsav. Un arouez eo sevidigezh un talbenn breizhat e 1936. Tamm ha tamm an dud na soñjont ken e-barzh stern un departamant, lod eus Bro-C'hall, met e-barzh an hini breizhat. Erfin heskinerezh ar justis hag ar polis a wesk an Emseverien ne c'hall nemet atizañ enno an tech da vont betek ar penn pellañ an abretañ ar gwellañ.

D'an 3 a viz Gouhere 1940, d'ur mare na gred den en adsavidigezh Bro-C'hall hag e-kreiz ar meskaj a zeuas warlerc'h trec'hadegoù an Alamanned ez eas izili ar P.N.B. dreist d'ar pont diwezhañ a chome dezho da dreuziñ, "o tiskleriañ ur stad vreizhat en ur stumm broadel". Evel m'hen lavar reklavar an diskleriadurezh gant ar C'huzul Broadel : "Breizh a zo bet dilezet gant ar gouarnement gall d'ar sujedigezh alaman, o tinac'hañ "ipso facto" da renañ war hor bro... Abalemour da ee, da bobl Breizh nemeti eo da zibab he zonkadur, ha n'eo ken da Vro-C'hall, hiziv an deiz hep galloud, na da Vro Alamagn galloudegezh o tarc'hal bro hepken" hag a kendalc'h er bomm 1 : "Diskleriañ a re Kuzul Broadel Breizh, en anv pobl Breizh, e kement degouezh a ve, ne c'hell ket bezañ stad Breizh goude ar brezel ar pezh a oa gwechall. An enframmadur a gondaone Breizh a zo distrujet da viken, hag an holl zivizoù a 'n em ziazeze warno a zo bet kaset d'an traon."

Hervez an diskleriadurezh ee, hag hervez ar pezh hon eus gwalet an a-raok, m'o doa anzavet krenn ar vroadelourien da Breizh personelzh ur vroad, evit tremen eus tachenn ar praderiañ da hini an ober, e oa ret derc'hel kont bepred eus ar stern gall evit he c'has da benn. Savet e oa ar gloued diwezhañ war hent ar strollad broadel pa hañvalas Bro-C'hall bezañ aet da get goude an aloubadeg alaman. Ha koulskoude, ma fell deomp adsevel broad Breizh evel ma welimp diwezhatoc'h, ne vern ha ve Bro-C'hall en he barr pe war he zremen-ven, e vo adsavet Breizh er-maez eus stern ar vroad c'hall ha n'en devo netra da emellout ennañ.

Goude c'hwitadenn ar P.N.B. ha dispartit e renerien bennañ, krouidigezh ar gelaouenn "La Bretagne" a ziskoueze ervat, war a hañvale, gant ar berzh a reas o oa ar rektres kevredadell a c'helle lakaat da genveañ Breizh gant ur bersonelzh dezhi hac'h-unan gant ar stad gall. Siwazh ne voe ket hir a-walc'h an taol arnod dudius mañ, ret eo hen anzav, evit e varn d'e wir dalvoudegezh. Diwanidigezh ur bern savadurioù, ken war an dachenn savadurel (unanidigezh ar yezh, ar Framm Keltiek, B.A.S.) ken war hini ar c'helaouenniañ (Heure Bretagne - Bretagne - Radio Rennes Bretagne - Arvor) ken war hini ar yaouankiz (Olle - Urzh Goanag Breizh) ken war an hini politikel gant ar C'h-Komite Consultatif de Bretagne, a ziskouez ez en em astennas a-dreuz ar vro elfennoù kentañ ur vuhez vroadel breizius.

Degouezhet omp bremañ e lodenn diwezhañ hon hent a-dreuz ar vroadelezh. Quzhpenn dek vloaz a lakaas an Emsav evit parañ eus gloaz-iod an Dieubidigezh a gasas pep tra d'an trañ. Adarre ez en em vodas ar re henañ, skoazellet ha gwallgaset a-wechoù gant ar rumad yaouank emañ o sevel e Breizh abaoe un nebeut bloavezhioù. Siwazh e voe diouzh-tu implijet an nerzhioù adc'hounezet gant poan evit en em regañ etrezomp. Bez e voe ar re a chome leal ha didorr o c'hredennoù kent, hag ar re all a gavas gwell dezho reiñ ur gwisk nevez d'o mennozioù. Kalz o deus bet d'ober ar re se, n'eus forzh penaos evit en em zifann diouzh tagadennoù ha diskred ar strolladoù all hag ar stad. Ret eo anavez n'ouzur ket re vat da balec'h ez a ez resis ar re o deus kredet kavout er mennoz Europa remed holl gleñvedoù Breizh, e goudor pep disfiziañs. He stourm evit an Ekonomiezh hepken n'an deus ket espernet dezhi kerseennoù niverus. N'eo ket souezhus. Tra ma nac'ho an dud (dre son) da welout e Breizh ur gudenn vroadel, n'anavezint namet c'hwervoni an doganed.

Aze emañ an dalc'h e gwirionez. E-harz ar voger, n'eus ket tu da zaleañ ha da widreal. Evit ar pezh a sell ouzh an Emsav bremañ, ez eo diases levarout eo dispourballet o daoulagad d'an holl, trellet ma vezont gant kamm weladurioù an ekonomiezh, ar yezh-bobl pe ar folklor a sked dirazo. Deiz pe zeiz ez arrou e rendadoù c'hoazh kelennerien gozh an Emsav dirak bankoù digenvez, e-kreiz ur gouelec'h. Ma 'z eus bet tu da virout e Breizh stummoù kozh ar vuhez gevredigezhel a-drugarez da stabilded an darvoudoù, bennez en em glouz an diforc'h etre warlerc'h-idigezh hor bro hag arakadenn ar bed modern. Ar skouer an hini aroueziusañ eo hini ar yezh, a glask tud 'zo skañv o fenn derc'hel, daoust da bep tra, er stad a drefodach m'eo deut da vezañ komzet, war zigerez brezhoneg bev, gantañ c'hwec'h flaerius ar c'hagn. Tonket e vez hor yezh da vorvel gant ur seurt sav-gwel, zoken na vez kelennet (hag emañ e teuomp e-barzh domani an hufvros) un deiz benniget bennek er skol war un dro gant ar galleg, hervez, war c'houlenn ar Vretoned, gant aotredigezh hegerat ar Skol-Vour.

Tud'zo o deus komprenet an Emsav e oa aner fiziañs er brezhoneg gant seurt divizoù. Aviz a-walc'h o vije ganto ma heulhjent an hevelep dic'hoanag evit ar paurrest ha ma 'z ajent da gousket. Nann, gwell eo dezho en em dreñf war du un dremmel sauroc'h, an Ekonomiezh da skouer, ur pal furoc'h a gomzo da gof an dud. Evit sioulaat pep disfiziañs, e vez arguzet : en ur binvidikaat Breizh e vo pinvidikaat Bro-C'hall war un dro. Un douelladenn hag un dreuzvarnadenn eus ar c'hentañ a ra koulskoude an dud se, ha na reont ket mistri Bariz. Degas ar c'hrogad war en dechenn ekonomikel e Breizh ez eo heñvel dra ha degas ar c'hrogad mañ

war dachenn an ekonomiezh c'hall, war hini ar stad, ha gwashoc'h c'hoazh war hini ar vroad c'hall.

Ar rannvro n'eo ket ur pal. Ar pal eo uhelvad Bro-C'hall p'eneomp holl koadedourien c'hall. Evit meizañ pinvidikadigezh ar rannvro eo ret eta pennaouañ ar gudenn a-ziwar kreizenn ar vro, hec'h ens, Pariz, 'lec'h ma oar ar stad, mirour ha kannad ar vroad, meizañ uhelvad Bro-C'hall. Evel se e vez meizet holl ekonomiezh Bro-C'hall. Setu perak o deus soñjet Breizhiz 'zo a oa tu dre hanterouriezh ar Berlamentourien da zegas ur wellaenn da stad reuzoudik hor bro. Gouzout a oar an holl re vet frouezh ur seurt politikerezh. A dra sur eo bet laosket dimp ha dreist-holl d'ar rannvroioù all ar pezh a anver an digreizennadur hag a zo e gwirionez nemet un difetisadur pellsturiel diouzh Pariz hervez he grad vat. Talvezout a re dreist-holl an askorn mañ treut e gig da implijout lebourerien varc'hatmat evit lakeat da frouezhiñ arc'hant Pariz. Resisoc'h e vije neuze spisaat hon eus afer d'un drevadenn. N'eus ket aon da gaout a-hend-all rek emarok-adenn ar rannvro. Rannet a vez da gentañ e departementoù a dorr dezhi pep nerzh. An arc'hant ret d'ur seurt lusk na c'hellfe ket pourvezet gant hec'h annezidi, hogen gant tiez-bank Pariz hepken. Erfin n'eus ket tu d'an hinionez da stourm ouzh skoilhoù a bep seurt a vez savet dirazañ gant arboall-erezh Bro-C'hall, ken war an dachenn diabarzh, ken war an hini etrevroadel.

Pa na oa ket tu da vont dreist d'ar skoilhoù mañ, e soñjas eta em-saverien 'zo mont a-bioù dezhañ, bapred gant an hevelep mennoz-stur : p'o devo an dud da zebrif, e c'hellor ober war-dro ar magañ spered da c'houde. O kemer harp war an emdroadur europat, e fell dezho diskoulm ar gudenn hep poan na garm, o tiframmañ starn kreizennelour Bro-C'hall hag oc'h adsevel anezhañ war an urzh kevredadelour. Roet e vefe da bep rannvro ar frankiz evit en em hentchañ drezi hec'h-unan. Sturiel e vefe an ekonomiezh, n'eo ken a-ziwar ar greizenn, hogen a-ziwar ar c'hreizennoù. Na heñvel ket e vije ar gouarnamant gwall herr warnañ evit mont da heul ur seurt mennoz, ha komprenabl ! Sturiañ an ekonomiezh a-ziwar ar rannvro ez eo anavezout un dizalc'hidigezh diouzh ar greizenn, hag aberzañ uhelvad ar vroad war eoter ezhommoù disheñvel ar rannvro. Kas da get evit gwir, ha dan na grad hen diskleriañ, kas da get keal ar vroad unan ha disrannus. Ur gudenn a vroadelezh eo hini an ekonomiezh etre Breizh ha Bro-C'hall. En abag da se, ez en em led ar vroad c'hall adal Dunkerque betek Tamarassat.

E gwirionez, soñj donañ ar Gevredadelourien eo ivez diskoulmañ kudenn ar vroad ken hegasus, oc'h enval anezhi pe get. Eilpennet o deus ar gudenn hag arnodet he diskoulmañ a-ziwar ar fedoù ekonomikel. Ret e vo dezho avat anavezout petra fell dezho kevrediañ a-benn ar fin, ha gant pesour simant e vo savet ar strollennoù da gevrediañ. Santout e reont mat-tre n'heller

ket havelebeakaet Breizh ouzh proviñsoù evel Ile de France pe Anjou. Dafjevus eo ur seurt sav-gwel, rak e nac'her anzavout ez eus broadoù, zoken ar vroad c'hall, pa gomzer eus Europa a lakfe an harzoù da gouezhañ. Ne fell ket dezho meizañ neuze, dre aon rak ar wirionez marteze, e kas o hent d'an islonk... pe d'ar vroadelezh. Oc'h hetañ eurvad ekonomikel Breizh, ez hetont war un dro, hep gouzout dezho, hac'h eurvad politikel. Startaat e vez a-hand-all an emdroadur se gant ar pezh a c'hoarvez bremañ en Emsav : o mennoziou stur, a sell hepken d'an ekonomiezh, e emdro buan a-walc'h e-touez ar re yaouank da vennoziou politikel, ar pezh a anver gant kalz a sevended "an disemglev etre skiantprenet ar re henañ ha ferved ar re yaouank". E gwirionez, furchal a ra skiant tud 'zo, prenet e priz ur barn reuziadoù, ret hen anzav, abaoe follentez o yaouankiz, dirak ar rezeulzi a vo ret d'ober evit lakaat o mennoziou da drec'hiñ, e Breizh da gentañ, ha gwashoc'h c'hoazh hervez o lorc'hentez, e Bro-C'hall hag en Europa.

Studiañ ar gudenn en ur seurt doare a vo forañ poan hag amzer. Kaoz ez eus hepken eus broad Vreizh, ar gudenn nemeti a dalv ar boan da vrezeliant eviti e meskañ an amzar-vremañ. E 1940 e kredas d'ar vroadelourien vreizhat e oa dav sevel ur stad daomp-ni pa ne chome nemet bruz-unoù da enebañ ouzh hor broad. N'eo ket a-walc'h koulskoude distagañ ar pezh a voe erret gant an Unanidigezh. Ret eo kas d'an traoñ ivez mennoziou faos an Dispac'h Gall a c'hoelias ur vroad nevez dre vodañ tammoù dishefvel strezo, en o zouez Breizh. Met daoust ha n'eo ket bet lavaret, huchet, e oa Aljeria lod eus ar vroad c'hall ivez ? Gweledigezh ar gudenn se hon eus da gaout bemdez dirazomp. N'hon eus ket da gaout dament rak an euzhvil a'n em guzh dindan dremmo plastr skornet Marianna. Ur vroad hon eus da sevel, ha den na c'hell lavarout dimp daoust hag emañ ar gwir pe ar faos ganeomp : na vez ket randalet un devar.

() ()

Gw. Ar Menn

S A V E T E M E U S V A M O U E Z H

Sed amañ un tamm skrid savet d'an daoulamm ruz. E-pad un hir re amzer ez on chomet dilavar, met hiziv n'on ket evit mirout palloc'h war ar rann-galon a grog ennon pa sellan ouzh stad truezus an Emsav. Ur barrad kounner 'zo ennon abaoe emvod diwezhañ ar MOB. Setu amañ pezañ :

P'am eus degemeret ur c'helc'hlizher skrivet warnañ : "Emvod MOB, danvez : ar brezhoneg" (e galleg e oa eveljust) ez on bet dadannet ha setu me o vont da glevout un tamm kaoz a-zivout hor yezh. Ar brezegenn graet gant an Actrou Tamar a oa plijus. Istor difennidigezh hor yezh. Evel m'emañ ar c'hiz ez eus bet ur gador-dabulal goude-se. Savet em eus va mouezh evit anzav e oan bet displejet en ur glevout komz a dud "spécialisés en langue bretonne". Diskleriet em eus ne oa ket ar brezhoneg danvez-studi lod eus ar Vretoned hepken. En em zereadskaat a c'heller ouzh an Istor, ouzh an Ouaroniezh, ouzh an Arboellerezh, h.a... met ar brezhoneg ne dle ket bezañ lakaet hefvel ouzh ar seurt danveziou. Ar brezhoneg a zo yezh vev hor bro ha pep brogarour a dle brezhonegañ. Ar brezhoneg n'eo ket miret evit un darn ac'hanomp...

Diæs eo kounañ dre ar munut ar pezh em eus lavaret ha klevet e-pad an emvod-se. Dont a ra da goun din avat eus un nebeut frazennoù souezhus a ziskouez fraezh stad truezus an Emsav.

Er sal e oa war-dro daou-ugent den, an holl brogarourien d'am soñj. Ur fazi (!) em eus graet an ur lavarout :

"Ar Vretoned a zo a-du gant ar brezhoneg o taurel ar bec'h war ar gouarnamant, fallakr evel pap hini a oar, a voug hor yezh; met n'eo ket stank ar Vretoned oc'h implijout ar brezhoneg en o buhez. Da betra e talv ur yezh ma n'eo ket da vazañ komzet. Direizhpoell ha touallus eo ar re a glemm, o c'houlenn ar brezhoneg er skol ha ne zeskont ket anezhañ. Kriz e vefen ma c'houlennfen piv an hon touez a vrezhoneg bemdez !..."

Va frezeg a lakaas yen kalon ar re a oa eno. Soñjit 'ta ! Un den yaouank o taurel ar brall war ur bodad brogarourien, broadelourien deut d'en oad hag a-zoare !

Setu ar pezh a zo bet lavaret din : "N'eus ket tu d'ober eus ar brezhoneg yezh an tiegezh". P'am eus anataet ez eus tiegezhioù o deus desket ar brezhoneg hag a laka anezhañ da dalvezout bemdez em eus paket un dizarbenn dichek : selaouit kentoc'h : "Ret eo bezañ sperdek-tre. An tiegezhioù-se a zo un direol." Gwashoc'h em eus klevet : "Un den a zesk dre al levrioù n'eo ket gouest da gomz gant an dud diwar ar maez" !

Satordallik ! Klevout broadelourien oc'h en em zidamall evelse a zo mantrus. N'on ket brezhoneger a-vihanik, n'on ket dreistsperedek, daoust da se em eus komzet gant kouerien ! Ur respont all a zo bet graet din : "Breizh a zo divyezhek. Bez ez eus brezhonegerien ha galleg-erien". Raneal eo kement-se. D'ar vrogarourien a Vreizh-Izel e vefe ret gouzout ar brezhoneg hag ar galleg ! Tud Breizh-Uhel avat n'o defe ket ezhomm deskiañ ar brezhoneg !

Seurt digarezioù a zo didalvez. Sklaer eo : an Emsav ez eus un islonk etre ar mennout hag an ober. Ur c'hleaved spontus eo ! An Emsav-er a zo o sevel ur bed e Park an Hufvire. Marteze e vefe bet furc'h din mont da liorzhañ ha lezel anezho gant ar bed o deus krouet evit o filjadur, met re e verv va gwad em gwazhied pa welan broadelourien o tigeriñ o c'hlapez evit distripañ seurt sotonioù.

Ya va zud ! ret eo sankeñ don ennoc'h eo fall an hent ma kerzh kalz broadelourien warnañ.

Ne daly ntre goulen ar brezhoneg er skol rak n'eo ket er skol a salvo ar brezhoneg met ar Vretoned a fell dezho implijout anezhañ bemdez-Doue-pad. Skouer Bro-Iwerzhon a zo kelennus a-walc'h d'am soñj... Ur bern Bretoned o deus menoziou dreist, met d'ar re all da fetisaat anezho ! "Bevet ar brezhoneg" a c'hellont yudal met arabet goulen outo

deskiañ hag implijout anezhañ. N'eo ket gwirion an dud a gomz evelse. D'er re a fell dezho sevel ar brezhoneg an dra gentañ da ober eo en em vrezhonekaat int o-unan, evelse hepken e c'hellint bezañ gwirion ha leal en o c'hefver hag e kefver ar brezhoneg. Anaout a ran kalz a vrezhonegerien ne implijont nemet ar galleg en o ziez. E-touez ar re a zo ganin o teskiñ ar brezhoneg ez eus un toulladig o deus kerent brezhonegerien a-gavell. Lener, c'hwil hag a lunn ar pennad-mañ daoust hag oc'h implijit ar brezhoneg bemdez ? Nann ! Neuze ez oc'h abostol ur gelenadurezh ha ne rit ket ganti. Direizhpoell eo goulen digant an dud heuliañ reiennoù-stur ma ne sentit ket outo.

En emvod ar MOB em eus klevet e oa ret lakaat ar vrezhonegerien d'ober gant o yezh. Ober bruderezh evit hor yezh, mat tre ! It war ar maez ha lavarit din petra a c'hoarvezo ma ya ur galleg ar c'h ober brud evit ar brezhoneg da chom mut ma vez komzet outañ ar yezh-se !

Alies ne weler ket an emsaverien o lakant o oberiantiz da glotañ gant ar menoziou a ennavont. Ne fell ket din tamall ar re a striv hag a laka o foan da zeskiñ ar yezh hep dont a-benn d'hen ober en un doare dreist, pell ac'hano, met kredif a ran en deus pap den a youl vat a-walc'h a c'halloud da zeskiñ ar brezhoneg ma fell dezhañ hen ober.

Petra soñjal ivez eus ar brezhoneger a lavar : "Me a zo skuizh o prezeg brezhoneg evelse hep paouez, n'on ket kustum a se, deuomp e galleg bremañ."

Bewech e klevan e Ker-Vreizh brezhonegerien o chaokat galleg kenstruzo ez on digelonekaet evel ma vefen touellet ganta. Setu tud o c'houlenn ar brezhoneg er skol ha petra a reont... Marteze avito n'eo mat ar brezhoneg nemet da gas ar saout er-maez !

Tabut 'zo a-zivout an doare-skrivañ ! Setu traoù em eus gwelet ha klevet : Ur paotr o tifenn un doare-skrivañ gant taerdex dirak un nebeut tud. Kroget em eus da vrezhonegañ gentañ. Ne ouis tamm ebet ar brezhoneg ! Feuket eo bet p'am eus lavaret dezhañ e oa troid leus en e votoù !

Anavezout a ran un den o vont e droug bewech ma wel ur ZH; met pa skriv e ra ur bern faziou en e zoare-skrivañ.

Alies a-walc'h em eus gwelet brezhonegerien o klask reiñ lamm da zoare skrivañ egile ha se a galleg !

Seurt traoù n'int ket evit reiñ fiziañs d'ar Vretoned yaouank m'hel lavare daoc'h ! Alies e resevan lizhiri digont paotred ha maez'had o tiluzel pep tra rak kerse e kavont. A-wechoù eo kelennus o lizhiri. Setu troidigezh lod eus ul lizher kaset din gant ur paotr en deus kerent broadelourien ha brezhonegerien ha ne oar tamm brezhoneg ebet ! "Anavezout a ran un niver mat a dud o tisklêriañ bezañ Breizhad (ne ziskredan ket anezho daoust ma n'int ket atav leal en o c'hefver) ha ne welont en "Emsav" nemet ur c'helc'h bihan avito

da skeif annañ ha kemerout ul lec'h a-bouez ar pezh ne c'hellont ket ober war ar memes tachenn met en un doare hollvedel. Niverusoc'h int eget a kredent ! Ha se n'eo ket evit en em dedennañ."

Tud 'zo o c'hortoz da saveteñ Breizh n'ouzon pesourt degouezh burzhodus. Aze eo ret diwall ouzh un dra : marteze Breizh a zeuio a-benn d'en em sevel 'benn warc'hoazh hep an Emsav ! Breizh a vo neuze ur c'horn bro marteze ur gouarnamant dezhañ met gallek e yezh hag e spered. Gout 'ouzon ez eus e-touez tud ar MOB hiniennoù ha ne labouront nemet war an dachenn arboellal ha politikel evito Breizh da vezañ ur vro da adsevel war an dachenn-se hepken. Ret eo teurel azezh war an dra-se. Ret eo gouzout ar pezh a fell deomp. Gwelout Breizh da vezañ ur vro binvidik a zo e soñj pep hini. Met daoust hag en devo ar vro-se ur c'hultur breizhat pe nann ? Amañ emañ ar gudenn. Ha petra a chomo eus hor c'hultur na lazomp ar brezhoneg ? Alies em eus klevet: Breizh a chomo Breizh memes ma'z e vefe divrezhonekaet. Lavarout an dra-se a zo digerif un nor evit kilañ rak ar re a lavar kement-se a gav evelse un digarez da chom hep deskif hor yezh. Broadalourien 'zo ! Ar Vreizhiz avat n'int ket stank ! Tud o yudal eo Breizh ur Vroad, eo ret reif dezhi ur gouarnamant, h.a...ne vankont ket. Ken aus eo goulenn evit kaout. Met tud o klask bezañ a ra diouer ha ret eo anzav: an Emsav a fell dezhañ KAOUT hep BEZAN.

Ronan Huon a skriv en e varzhoneg "Bez ez eus" :
"Bez ez eus ar re a labour evit ar yezh
hag ar re a labour war ar yezh."

E-pad pell amzer e gaven disi ar frazenn-mañ. Bremañ avat e kav din n'eo ket klok. Ret e vefe skrivañ :
Bez ez eus ar re a labour evit ar yezh
hag ar re a labour war ar yezh
hag ar re a zo ar yezh.

Ar re a labour evit ar yezh. Da skouer an hini a sav goulennoù doujus o klask lakaat ar brezhoneg da gemer er skol al lec'h a zero outañ, ar re-mañ o deus fiziñs e vo graet un dra bennak war-bouez goulenn derañ ha displegañ brav an traoù ! Ar re a labour evit ar yezh a zo ar re a re arc'hant eviti en ur bremañ kelaouennoù n'int ket lannet ganto, ar re a brezeg evit ar brezhoneg met a c'hallego bemdez, h.a.

Ar re a labour war ar yezh a zo ar re a sav pennadoù-studi war hor yezh evel ma'z e vefe ur yezh marv, ul labour brav a re e-keñvez ar yezhoniezh un den evel an Aotrou Falc'hun met perak ne

skriv nemet e galleg, perak p'am eus klevet anezhañ evit ar wech kentañ e Bleun-Brug Pont 'n Abad e oa e brezegenn e galleg da gentañ hag e brezhoneg goude-se ? Er Bleun-Brug-se ez on bet souezhet ivez o welout beilhadeg ar sadorn diouzh an noz displeget e galleg !

Bez ez eus erfin ar re "a zo" ar brezhoneg en ur ober gentañ. En o zouez ez eus nevez-vrezhonegerien. Tamallet e vez dezho komz ur brezhoneg "chimik" gant tud o c'houzout mat brezhoneg ar bobl ! Ma'z eo fall ar brezhoneg gant brezhonegerien 'zo, kiriek eo ar re a oar ha na reont netra. Brezhoneg warc'hoazh a vo an hini implijet hiziv. Ma n'eus nemet tud deut nevez 'zo d'ar brezhoneg d'ober gentañ gwazh a se. Met ar re kablus a vo ar re a oar ar brezhoneg. Enno n'eus ket a-walc'h a gredenn d'am soñj. Arabat ankounac'haat n'eo ket graet nerzh an Emsav gant niver e harperien hepken met gant nerzh ar re-mañ. Ha siwazh ! e vez kavet an Emsav re a vermoused gallekast. Distagallet mat eo o zaod pa vez ret dibunañ ur gaoz war stad truezus hor bro met tud gwak int o soñj eo graet al labour evit ar re all ! Setu aze danvez salverien !! An unvaniezh a zo d'ober enno da gentañ. E pobl Breizh a sav bremañ war c'horre evezh war hor bro. D'an Emsav da zis-kouez an hent ! Didalvez ha koll amzer eo deskif ar vad hep hen ober... Gout 'ouzon eo yaouank an deiz ganin ha diseven eo marteze en em dagañ ouzh tud an Emsav; met n'eus ket tu evidon chom mut pa welan tud oc'h en em douellañ pa o touellañ ar re all. Ret eo lavarout din, ha se a c'houllennan ouzh tud an Emsav, ouzh an dud a zo o lenn ar pennad-mañ :

"Ar menazioù brudet geneoc'h a zo evit bezañ fetisaet pe n'eo nemet ur c'hoari evit dudi ar spered ? Bemdez e labouran evit gwellaat ar brezhoneg ha tud yaouank all a zo ganin : hol labour a zo talvoudus pe n'eo ket ? Touellet omp gant an Emsav pe nann ? M'hal lavar daoc'h eo va soñj ez eo seier gevier an holl re a anavezan a zo oc'h embann un doare-bevañ hep heuliañ anezhi. Ha va soñj eo n'eus nemet un doare da adsevel hor c'hultur eo bevañ hervez e reolennoù. Tud 'zo a rebecho din bezañ direzon. Na re foultr kaer din ! Va soñj a zo : pe e kredit er pezh a lavarit ha neuze grit evel a lavarit, pe ne gredit ket er pezh a lavarit, neuze chomit mut, arabat touellañ ar re all.

Ar pezh a skrivan a zo marteze ur roched pe un hiviz yen evit tud'zo. Reoù a vo marteze feuket. N'eo ket va fal, a zo goulenn ouzoc'h bezañ leal ha gwelout hag-efi e vevit hervez ho kredennoù.

Perak ar gurun em eus graet an tamm skrid-mañ ? Gant ar spi e lakañ unan bennak da brederiañ un tamm ha d'ober hervez e gredennoù. N'em aus pal ebet nemetañ.

((((

Gourlann

A R V E L E I E N H A B R E I Z H

Ar veleien o deus dilezet o yezh. Evit kompren an diheñchadur-se ez eo ret gwelout al liamm a skoulm ar yezh hag ar vroad kenetrezo. Ar yezh a zo un doare da zisplegañ pinvidigezhioù ar vroad hag ar sin eus ar garantez a zouger en he c'heñver. Bez' ez eo ur merk eus ar garantez-vro, ul liamm gant an amzer dremenet, ur c'hroñvlec'h ma c'heller sevel warnañ an Dazont. Ur bobl yac'h a spered, barrek da bledañ gant ul labour kalet ha kriz ha da lakaat war e choug hordennoù ar ponnerañ a rank bezañ gwriziennet don en he bro hag ar gwellañ kevre eo ar yezh.

N'eo ket neuze hep abeg, - ur wech m'eo annt da hep hini ez eo ret derc'hel d'ar yezh evel da ibil e lagad pe asantiñ d'an dismantr, - e sav fulor e kalon meur a vrogarour o welout diseblanted ar veleien e-keñver tenzorioù leun a gizidigezh hag a spered, fiziet enno evit bezañ gwarezet evel bokedoù bleuñv blizidik ha tener, pa welont anezho en enep o mougañ hag o dismegañsiñ.

Ha koulskoude daoust hag-eñ n'o deus ket resevet Sakramant an Urzh, da lavarout eo ur sakramant a c'halv anezho da ziazezañ pep tra e Jezuz-Krist (instaurare omnia in Christo, a lavar Sant-Paul), da adlakaat ar bed en urzh, d'hen adaozañ en e gaerder hag e vadelezh kentañ, d'hen adkrouiñ e glander hag e kensoniezh e orin ? N'hon eus nemet digeriñ ar Ritual a zo dastumadenn ofisiel an Iliz a-zivout al lidoù hag ar bennozhioù evit gwelout peseurt doujañs a desteni d'an traoù an disterañ. Diskouez a ra karantez ar vamm e-keñver kensourted berrbadus hon ergerzh war an douar. Al liderezh n'ankounac'h netra. Bennigañ a ra an ti, ar bara, ar vioù, ar frouezh. Koun en deus eus ar feunteunioù, al listri, ar staolioù, ar parkeier, al loened klañv. Santelaat a ra an dour, ar goulou, an tan, an ezañs. Gant kengarantez ha tenerded e tegemer an Iliz pep tra war he c'halon. Ne fell ket din astenn muioc'h war ar gudenn-se met lavarout er berr penaos kement talvoudegezh a zo er bed, ha dreist-holl talvoudegezhioù uhelañ ar spered evel m'eo ar c'hultur, an arz, ar yezh, ar sonerezh, a dle bezañ dasprenet ha santelaet. Ar beleg a zo karget da adunvaniñ an traoù krouet, n'en deus gwir ebet d'o disprizout na d'o diskar.

Penaos neuze meizañ an dra. Krediñ a ran ez eo kenstag an trubarderezh-se ouzh an diouiziegezh hag an digarantez e-keñver o broad. Dilezet o deus o yezh vroadel peogwir e nac'hont outi bezañ ur vroad.

Hag e gwirionez perak bezañ saouzanet ? Gant kalz a ampartiz hag a finesa ar C'hallaoued a zo deuet a-benn da unstummañ ar speredoù adalek an Hanternoz betek ar C'hreisteiz hag ar Reter betek ar C'hornog. An holl vroioù a oa dindan o dalc'h o deus resevet ur vadeziant nevez, ne deo ket hini an tan hag ar Spered Santel, ne deo ket ar vadeziant a engehent mibien da Zoue met servijerien sentus ha feal d'ar Republik. Hor mistri o deus lakaet da dalvezout an holl benvegoù a oa etre o daouarn, ar skingomz, ar skinwel, ar skol a bep derez da ober anezho Gallaoued.

Abaoe kantvedoù o deus lonket ar Vretoned ar boued kontammet-se. Rak-se n'heller ket o zamall evel merourien ha ministred ar Stad a zo sklerijennet muioc'h egeto war al labour a reont peogwir o deus bet ar gefridi da zifenn ar sevenadur gall ha da astenn anezhañ. N'eo ket an hevelep tra evit ar veleien. M'emaint o lazhañ ar yezh ne deo ket en abeg ma fell dezho harpañ trec'h sevenadurel gouarnamant Paris, met kentoc'h dre m'o deus ankounac'haet o bro-i. Breizh o vezañ evito ur rannvro ne chom ken nemet tennañ ar c'hlozadurioù. Neuze ar brezhoneg a zo ur yezh a izel renk hep na veritfe bezañ skoazellet. Hag e kinnigont digarezhioù. Kemeromp ur skouer e-touez ar re voutinañ.

"Da betra e talvez dimp, emezo, studi ar yezh, peogwir ar bobl a zilez anezhi. Tonket eo da vervel n'eus forzh penaos, peogwir ez eo dianzavet gant ar bobl, ha piv a c'hellfe herzel ouzh an emroadur. Perak gouestlañ amzer ken priziuz evit salvidigezh an eneoù da aozañ ur c'hultur breizhat?"

Ar seurt arguzenn e rin daou c'houlen war he divout : 1.- Peseurt talvoudegezh he deus enni hec'h-unan ? Peseurt talvoudegezh he deus evit ar re a ra ganti ?

1.- G. Thibon a skriv un tu bennak : "Neveziñ na deo ket ur c'hendalc'h a zo ul laz." Ma ne fell ket d'ur boblad 'zo tennañ boued eus ar pezh a zlefe ober he magadur hag he lore'h, o nac'hañ kemer harp war talvoudegezhioù speredel resevet a-berzh he gourdadoù, ez eo barnet d'an dismantra ha d'ar sklavelezh.

Ar fumez wirion a zo saveteiñ buhez ha yaouankiz an hengounioù hervez pezh a zere enno ouzh ezhommoù retañ hon anien. N'anavezan d'ersouenn diharz ebet nemet ar marv hag ar pec'hed e vefe, pep tra all a zo resevet, ne deo ket krouet.

Neveziñ a zo kendalc'h. Na sklaer eo ar menoz ma teurvezzer sellout ouzh Breizh gant lagad ar galon n'eus nemetañ o welout a-dreuz d'an divaezioù stad mantrus ar vro vreset. Poblad Breizh, bazhyevet dindan veli ar C'hallaoued, dallet ivez ganto, he

deus graet fae war he c'hultur o soñjal ganti e oa houmañ ur skoilh dezhi da gaout frankiz ha noblder. Gwelout a reer ar frouezh. Hentennoù a seurt-se ne reont ket personelezhioù kreñv, tud gwan ne lavaran ket, tud gwan ha klañv dre ma tianzavont perzhioù mat o broad, frouezh talvoudus an istor, a glote ouzh o ene.

Rak-se beleien Vreizh a zle diorren o zud, nann o heuilh. An dever o deus da ziframmañ o c'henvroiz diouzh o diheñchadur ha da gas anezho etrezek pinvidigezhioù ha teñorioù o bro a zo ar stumm gwellañ da gas anezho war-du enno o-unan. Aze hepken ez adkavfent nerzh-kalon, energiezh, trec'h war o c'hemplezhioù, ar yac'husted a spered hag a galon (hep ankounac'haat ez eo ar gwellañ stumm d'o heñchañ etrezek Doue. Tud a-raok bezañ kristenien).

An den ar muiañ stag ouzh an tremened (komz a ran eus al liamm bev gant an tremened bev) a zo ivez gwellañ frammataer an Dazont. Ret eo derc'hel soñj evit rakwelout. Ar wrizienn ha korzenn ar wezenn a heuilh roudoù enep, ha koulskoude donder ar wrizienn eo a vent emlusk ar gorzenn ha kaerder ar bleunioù ha saour ar frouezh. En enep, terriñ al liammoù buhezeg a lak an den da nac'h an tremened a lak anezhañ ivez da spontañ dirak an Dazont. Merzout ar vro a zo kentelius war ar poent-se.

- 2.-Bremañ petra sinifi an arguzenn-se evit ar veleien a ra ganti ? Peogwir n'o deus ket gwelet o bro wirion war he zremenvan n'en em aozont ket evit ar stumm. Hag e-lec'h dougen bri da herezh o gourdadoù ha klask souten adsavidigezh ar c'hultur breizhek e tegemeront ar soñjezonoù an touellusañ; ar brasañ diotachoù. Asantiñ a reont d'ar seurt touelladurioù peogwir ne verzont ken o bro. O emzalc'h e-keñver Breizh a gav aze e ziazez : n'anavezont ken o bro distummet, displeberet dindan stern ar C'hallaoued. Pa vez komprenet kement-se e weler ivez penaos n'eo ket hepken o distmegañs war ar yezh a gement a zo sklaret, met pep tra en o c'hellenadurezh, en o doareoù a abostolerezh: diazezañ a reont pep tra hep derc'hel kont eus ezhommoù

fetis an dud a zo dindano, met hervez o gweledigezh c'hall eus ar bed. Kinnig a reont eta ar memes magadurezh d'ar Vreizhiz ha d'ar Barizianed ha muioù'h-mui e vez implijet an hevelep doareoù hep derc'hel kont eus an disheñvelderioù hag eus ar perzhioù (kv. misionoù Breizh-Izel 1960-61, dreist-holl e Bro-Gerne, an Obererezh Katolik er bodadennoù, hag all...) Ha perak se ? peogwir ez eo anat evito ez int Gallaoued. Anat eo evito, met daoust hag-eñ he deus pep anadurezh an hevelep talvoudegezh ? Da gentañ ez eo ret gwelout darempredoù a zo etre an anaoudegezh hag ar boud. Ma'z eo an anaoudegezh bezañ ar genskiant d'ar boud, ez eo ivez bezañ ar boud d'ar genskiant. Ar vezañs-se a hennarouez an anadurezh. Met bezañ ar boud d'ar genskiant n'eo ket dalc'hmat diazezet en un taol, hep diacsterioù. A-wechoù e vez tizhet er stumm-se met peurliesañ ne dalvez kement-se nemet evit an anadurezhioù an displijusañ, ar boutinañ hag e tle ar prederour evel an den a skiant tremen dirazo, rak gouest e vefent da vorzañ ar spered pe d'her reterañ etrezek palioù fall. Dre vras eta ne vez tizhet an hanvoud a vezer o klask nemet goude bezañ strivet, tastornet, ad-troc'het, implijet hentennoù liesdoare, keñveriet an dasoc'hioù kenetrezo. A-benn ar fin e tegouezher dirak an hanvoud e kig hag eskern, rediet ma vez d'en em ziskuilhañ evel m'emañ : originaliter. Evit pezh a sell ar veleien, o vezañ ma n'o deus ket pleustret kalz war ar gudenn, e soñj ganin ne deus ket ar boud en em ziskleriet dezho.

Met daoust hag-eñ ne vefe ket aze un tamall ouzhpenn a-enep dezho ? O vezañ ma n'o deus ket pleustret war ar gudenn. Rankout a reer bezañ evezhiek pa vezer o klask ar wirionez; koulskoude en em atersan hag-eñ ne deo ket kevreet dallentez o spered ouzh dibab ar youl. Ar fazi ne vefe ket hepken e-keñver ar meizreizherezh, met dreist-holl e-keñver youlreizherezh. Ha galloudus a-walc'h ez eo bet ensavadurioù ar C'hallaoued evit herzel ouzh beleien Vreizh da glevout talmerezh kalon Breizh pe neuze ha kablus ez int eus o gwir-zibab ?

Evel-just un dra diaes-tre eo da ziluziañ pa n'hon eus ket ar galloud da ziraeziñ kreizon an den. Rak-se ne fell ket din diogeliñ ar pezh n'on ket sur anezhañ met hepken sevel ar gudenn. Setu holl.

Evit mont etrezek ar rouestlad-se ez eo ret kompren stad meiz an den a zo evit komz gant ar brederourien a-vremañ ur meiz enkorfet, "kevrin pennañ hor boud" a lavar Gabriel Marcel. Spered un den a zo lec'hiet en ec'honder hag en amzer, gwriziennet en ur genskiant enkorfet, anezhi kenskiant ur gour (pe ur person), da lavarout eo un den hiniennel digenlodennus. Kement tra a ran anv anezhañ a vefe da studiañ ez resis dre ma levezonont holl meiz an den. Rak-se ez eo ret bezañ dalc'hmat leun a zamant ouzh an den, bevennet evel m'eo gallusted e anaoudegezh. Ne lavaran ket e harz an holl bevennadurioù am eus meneget ouzh an den da dizhout ar boud met ez int degouezhioù erret ouzh e stad denel ha skoilhioù evitañ en e imboure'hadennoù.

Marteze e c'heller mont donoc'h, o stagañ diaesterioù ar meiz ouzh an torr e danveziou kuzh ar spered, oc'h eren dallentez ar meiz ouzh dislealded ar youl. Da zisplegañ kement-se n'naveczan netra gwelloc'h eget pennadoù tennet eus Aviel Sant Yann. Zoken ma lakaer ar menoz-se war an dachenn brederouriel hep en em atersiñ ha gwir eo pe faos hervez an istor, e kaver aze ur wirionez talvoudus-tre : un digensoniezh, un torradur e kreizon an den. E pennad 5 e levr, Sant Yann a zanevell pare den seizet Bedzata. Ar paour kaezh den-se a oa klañv abaoe pell amzer ha Jezuz o welout e stad mantrus a gemeras truez outañ hag e bareas e deiz ar Sabad. "Hag ar Yuzevien a lavaras d'an hini a oa bet pareet : ar Sabad eo, n'ac'h eus ket droed da zougen da wle" hag e wallgasent Jezuz en askont m'en devoa graet kement-se un devezh Sabad. Ouzh hen gwelout Jezuz a abeg anezho en un doare taer : "Bez' am eus un testeni brasoc'h eget hini Yann, rak an oberoù en deus va zad roet din da ober, an oberoù a ran a ro testeni diwar va fenn ez eo an Tad en deus va c'haset" 5, 36. Ul logik ez eus aze. Va zad a ro deoc'h testeni

ez on kaset gantañ; an testeni-se : an oberoù, int eo a ziskouez e nature doueel, ha gwolet int gant an holl kerkoulz gant ar Farizianed ha gant ar bobl. Ha koulskoude e chomont dall rak ar burzhudoù-se. Perak se ? "Ne fell ket deoc'h dont davedon evit kaout ar vuhez", 5, 40. An nac'h sanket en o askre a gemm o meizerezh eus ar pezh a zo rak o daoulagad. Un hevellep tra a c'hoarvez e-kerz dasorc'hidigezh Lazar, 11, 45 hag all : e-lec'h en em zistreiñ etrezek Jezuz o paouez dasorc'hidi Lazar e kavont abeg en dra evit komz evel-hen : "Petra raimp ? rak an den-se a ra kalz a vurzhuoù. Mar hen lezomp evel-se, e kredio an holl ennañ hag e tevio ar Romaned hag e tismantrint hor bro, douar ha tud". Zoken ma ne welfed an dra-se nemet evel un arouez, e vefe kentelius-tre evit kompren stad gwirion an den : ar youl diarroudennet a laka war ar meiz un talgenn a vir outañ da welout splannder ar boud. Hor gwelidigezh anezhañ a c'hell bezañ kemmet gant droukarantezioù ar galon hag e zilennoù. An neb ne fell ket dezhañ dont eus an deñvalijenn d'ar goulou hep en em rediañ da reizhañ e c'hoantegezhioù ouzh sklerijenn ar poell a zo e-tailh da vezañ dallaet ganto. Chadennet e vo gant e fromadennoù. Marteze e van e goueled ar galon un aters, un emc'houlenn, hag un enkreiz hanter-ziemskiant, met ne vezont ket kreñv a-walc'h evit diframmañ an den diouzh e fallaenn.

Daoust ha ne vefe ket tizhet aze abeg diwezhañ disfealded beleien Vreizh e-keñver o broad ? Kement-se a zo sevel kudenn o c'hiriagezh. Marteze emañ aze alc'houez o dallentez.

ooooooooo
ooo
o

Abanna

A LOUBEREZH, KILSTOURM, DISPAC'H

Pa gefveriomp stourm Breizh gant stourm broioù 'zo e teu anet so chomet betek-hen hon Emsav war lez froud an tonkadur, - evel ma chome kenkoulz all hon danvez-broad war lez ar vroad c'hall. Haverkañ arouez ar seurt sujedigezh e voe emichañs ar gablusted a sammas keit amzer an askreoù war-lerc'h heskinerezh ar bloavezhioù 45. Arouezioù all koulskoude, - pa lavaran se n'on lodek e tra kuzh ebet, met ra welo an neb en deus daoulagad - a zicugan a-walc'h ne vo ket ar stummoù-se evit padout atav; ha kent pell, buanoc'h eget na greder moarvat, e vimp taolet da greiz ar stêr, e-lec'h ma'z eus kas war an dour ha tu ebet da zont war gill; e-lec'h ma rankimp nauñ pe veuziñ, dioueriñ kement sikour omp kustum da c'hedal digant an ereoù diwallus hor bro diframmet da vat a-benn neuze: aet e vo e-biou mare proviñsel an Emsav ha digoret mare ar vroadelezh wirion, gant e very hag e vesk, amzer an argoll hag ar giriegezh.

Krog emañ Breizh emsavet da dennañ selloù ar bed. Poent bras eo damantañ d'an dremm a ziskouezo hor bro d'ar broioù all; poent resizañ hon emanaoudagezh e-keñver reolioù-gwelout bed an 20vet kantved emamp oc'h antren anañ. Tra ma pouez hon divrec'h war an nor o tigeriñ, ra baro daoulagad hor preder war ar vroad yaouank e vezimp en tu all dezhi. E komzoù all, ober hon dispac'h a zo da gentañ ober spered hon dispac'h. Skouerioù anavezet, Iwerzhon, a zo dimp da gentañ ne dalvez mann dispac'h an armoù hep dispac'h an emzalc'hioù, hag emañ bepred stourm broadel ur bobl isdispleget war sin treiñ e kilstourm. Neb a venn ren brezel an dieubidigezh vroadel a rank bezañ, ouzhpenn ur brezeliad, ur meizour gouest da lenn dibun an darvoudoù ha da vont hep koll meiz a vonedigezh.

Tri gwahanfod pob byw gwrtharall:
Awen; Cof; a chanfod. (Barddes)

Va mennozh eo studiañ amañ, diouzh hentennou un enklask gwriziennel bet lakaet da dalvezout c'hoazh (1), ur c'hraf resis : meizad an hevelepted, e koulz ha ma'z eo ur maen-touch etre emzalc'hioù disheñvel an alouber, an den aloubet, ar c'hilsturmer hag an dispac'her.

- 1.- An damant d'an hevelepted a gaver da lusk gant kement embregerezh lakaet war anv Breizh adalek koshañ amzerioù hor pobl. Hogen abaoe Dispac'h 1789 ne reas ken lemmaat emskiant an damant-se, broudet gant an anadurezh emañ Breizh o tisleberañ, o tischevelebiñ buan-ha-buan dindan gwask ramzel ur gwallerezh-ene soutil ha peururzhiat. Eñ eo a stign unded istor hon Emsav amliv, eus bourc'hizien damc'hallekaet ar vroadelouriezh en he mailhurioù betek ar soudarded a oa miret dezho ar boulc'h eus chivousted ar varnerien c'hall, an toullou-bac'h hag an duilhadoù-lazhañ. Derc'hel hec'h ene da Vreizh, sed ar mennozh-nerzh a lak muioc'h-mui a Vrezhonez da sevel hiziv, ha pa vefe dindan liv an teknikelañ arboellerezh, a-enep d'un alouber mennet da welout hepken ennomp ur berc'henniezh da c'honid.

Amsteriek eo avat, - evel an holl vennozhioù sanket don er vuhez, - keal an hevelepted; talvezout a ra ar boan prederiañ war e zivout.

Pa lavaran ez on an hevelep den da dregont vloaz ha ma oan da ugent, e weler dicuzhtu eo gwir ha diwir war un dro va lavar, hag e c'houlenn bezañ spisaet. Kemmet va neuz-korf ha va boazioù-buhez, ez on manet koulskoude atav an hevelep hinienn. An hevelepted hiniennel neoazh, ha hi

treamzerel, - emañ, ur wezh bet, e-maez dalc'h an amzer, - n'eo ket anezhi ez eus anv pa gomzomp eus hon hevelepted a Vreizhiz. Breizh, - hor breizhad-elezh, - a c'hell steuziañ hep d'hon hevelepted a hiniennoù kemmañ un disterañ. Klask taolennañ neuze hevelepted Breizh dre hent an damheñvelaat di-war meizad an hevelepted hiniennel a ziskouez bezañ arvarus; ar riskl a zo d'ober eus Breizh un dreist-personded, lakaet warni perzhioù mat ar ouenn moarvat, un idolenn koulskoude, dezhi da framm un hollekadur difetis, ur skeudenn a brezeg ha gwirvoud ebet. Fazi ar C'hallaoued eo, da skouer, pa veizont o bro evel un hinienn-stroll, o prestañ dezhi holl arouezennoù an hiniennoù fetis; pa glevont ez-vevoniell al liammoù a suj ul lodenn, un ezel eus ar vro d'ar penn anezhi hag e toujont o zroc'hañ evel ur muturniadur, un torfed enep anterinded he c'horf; pa gavont reol en em vevfe o lonkañ pobloù, hag, oc'h implijout keal an dreamzerelezh stag ouzh an hevelepted hiniennel, pa ginnigont da beurbadel ur "France Eternelle", h.a. Ar seurt fazi end-ocenn, - astenn meizad an hevelepted hiniennel fetis d'an hevelepted vroadel, - a verk un dihentadur eus ar spered o herzel outañ a welout ur mod all a hevelepted; homañ, hevelepted an den en e reized hini ur marzhvoud, eo a fell din studiañ, rak an anaoudegezh anezhi a daol ur sklerijenn dibar war ster-diazez hor stourm broadel. Met, da gentañ, eo dav dimp imboure'hiñ perveshoc'h doareoù ar meizad a hevelepted.

Hevelepted an traoù divev, ma reer anv anezhi a-wezhioù, ez eo bepred ez-difetis, pe dre stagded ouzh un tonkad denel : difetis, seurtel eo hevelepted ar bazalt, hag hevelepted hiniennel Lia Fail a zeu dezhañ eus Istor Bro-Skos. Gant ar bev n'eo ken e gwirionez e krog domani an hevelepted hiniennel fetis diouti hec'h-unan : ar c'hi-mañ-'r-c'hi a zo dezhañ e hevelepted, hag eñ doñv pe gouez. Koulskoude e c'heller lavarout eus hevelepted al loened hag ar plant ar pezh a lavare Hegel eus spered an natur : un hevelepted, n'eo ket eviti hec'h-unan,

met evit ar spered hec'h anavez; kenkoulz-all, en he rez, ar vuhez a zo ar beved (1) hepken, hag ar verb bevañ ur verb gwan. Da verkez spis hec'h anien da venegañ ivez n'eus gant an traoù divev nemet un hevelepted deveret, e ran eus an hevelepted hiniennel fetis diouti hec'h-unan an hevelepted vevedel. Padal, an hevelepted en he bleuñv, diouti hag eviti hec'h-unan, a zo lod mab-den. Al loened hag ar plant n'o deus nag istor na sevenadur, n'eus en o ser tonkad ebet, ur ster kloz he deus o buhez ha n'emañ ket en o hiniennoù an andoù anezhañ; er c'hontrol, an den-hinienn a zo emañ andon ster e vuhez; ur reiñ-ster orinel eo e vuhez, da lavarout eo un awen. En ur ger, hevelepted an den a zo er bezañ andon a hevelepted. Setu perak e c'heller ober anezhi un emhevelepted, pe an hevelepted awenel. En enep d'an hevelepted vevedel hag a vez tonket ha didec'hus, e vez an hevelepted awenel tonkus, hag emdonkus : drezi en deus an den un tonkad; tra ma lavarer azivout plant ha loened "bevañ a reont", "bev ez int", hep mont en tu all d'ur verb gwan ha d'un anv gwan, e vez verb ar vuhez gant an den ur verb tre : bevañ e vuhez, buhezañ e vuhez a ra an den. "Va buhez zo me", setu al lavarenn oc'h ardamezañ an hevelepted awenel, an emhevelepted, emzalc'h gwriziennel mab-den en e reized.

Eus anien an hevelepted awenel avat e tinaou ur perzh all, he breskted : bez'e c'hell an den paouez a vuhezañ ez-krefiv ha bevañ hepken diouzh ster gwan ar verb; neuze displeberañ, disheveleberañ a ra an awen, steuziañ a ra an den evel hevelepted awenel, hag al lavarenn "va buhez zo me" a ya e-maez a ster evitañ. Adkavout a raimp pelloc'h ar seurt degouezh.

(1) Kembraeg bywyd. War-lerc'h Youenn OLIER e kavan talvoudus degemerout ar ger-se da venegañ ar vuhez diouzh savboent strishaet ar vevoniezh.

2.- Diwar ar selledoù berr-se klaskomp bremañ taolennañ spisoc'h keal hon hevelepted a Vreizhiz.

N'eus ket anezhi en ur strobard stuzioù, boazioù, kredennoù daspugnet o danvez a-hed an tremened dre zegouezh an darvoudoù, ha miret a rumm da rumm e-giz ul laes treamzerel hor bije da ziwall d'hon tro diouzh froudoù gwastus hor remzi. Tamallet ez eus bet meur a wezh d'hon em-sav bezañ ul "luskad a gilstourm", "un mouvement réactionnaire"; tamall dellezet, pa stourm lod eus an emsaverien enep steuzidigezh perc'henti-ezhioù tonket da dremen evel kement perc'henti-ezh 'zo, pe danvezel pe speredel e ve. Hon hevelepted n'emañ ket en traoù hon eus.

Anien hon emsav, fellout a ra din lavarout ar spered en deus e lusket adalek an derou ha kaset war-raok da gefiver kement araokadenn, n'eo ket anien ar c'hilstourm, n'eo ket ur spered kilstourmer ez eo. Ma stourmomp, n'eo ket evit ar pezh hon eus, met evit ar pezh ez omp. Emgann reizet Breizh a zo emgann hor reizet; pa'z eomp war-raok, ez eo Breizh a ya war-raok; e gwirionez pep hini ac'hanomp a c'hell lavarout : "Breizh zo me". Breizh ne vez ket dimp, evel ma vez ar Stad vac'homer d'he sujidi, un hinienn-stroll ma vefemp ar c'helligoù brizhevoniell, strobet ha seizet, anezhi; er c'hontrol, Breizh, da bep hini ac'hanomp, ez eo bezañ e awen a zen en e reizet.

Me oar, goap ne ra ken ar speredoù mac'homer eus keal an awen e-keñver stadrenerezh. Tra sirius ren ur stad, e-skoaz sorc'hemoù an awen, emezont. Ganto emañ ar fazi avat, ha setu eñ : ober a reont eus ar Stad un hollad yael, lakaat a reont d'ar stadrenerezh e bal ennañ e-unan; uhelañ stuz mabden a reont gant an homo politicus, dezhañ un hevelepted vevedel hepken, ha dic'houzvez e chomont eus an homo spiritualis (1) hag an hevelepted

(1) Lakaat a ran war ar ger e ster gwirziennel ma kej drezañ gant ster gwirziennel hor ger awen. Seurt kemezarur na lak ket er-maez a-hend-all ster boss ar ger spiritualis.

awenel a verk anezhañ. Anien ar beved eo an alouberezh; dre-se, er Stadoù alouber ne c'hell ar Spered bezañ nemet er-maez hag a-enep; emframmoù kloz ha stabil ez int ha n'eus plas ebet dezhañ enno; d'un dreistezhomm ez a, atav mui pe vui a ziskred warnañ, rak son e vouezh hepmaiken a vez testeni a-walc'h enep an direizhder o ren. Amjestr-kenañ e vez alies a-hend-all ober war an dachenn an disparti etre an awen wirion ha stummoù awenel ar beved : evel un evn-preizh e blu kenedus e vourr an alouber a wiskañ poure'hioù flamm ar spered. Sellet teñzoriet an Arz, lore'h ar standur, braventez an anezhoù hag ar merc'hed o splannañ e kêrbennoù ar bed..., tra ma enker amañ hag ahont rummadoù a-bezh a "gilvezidi", a "intelektualed", testoù emskiantek an awen hag ar reizet, da devel pe da veveliat.

Ouzh pe arouez neuze anavezout ur Stad reizh? Ar stad reizh ne vez un finvez e nep doare : un elfenn nac'hel ret eus ar vroad ez eo. Etre ar Stad a gompren an hiniennoù e kement ha ma'z int heveleptedoù bevedel : hep bezañ un hinienn fetis, evel m'hen laka ar C'hallaoued da vezañ, he deus ar Stad un anien bevedel; dre-se e vez un urzh vut evel ar beved e-unan (1). an awen an hini eo a zo gwir vout an den, mouezh an awen e vouezh wirion. Ar stad renerezh a zo ur veveliezh, evel m'hen diskouez ster kentañ ar gerioù minister, mavdiern; gouarn a ra ar vinistred, gant an awen avat e chom an aotronezh. Na deor ket da gredañ e vennan amañ menegiñ evel skouer a renadur ur

(1) Ur skouer a roin da zisplegañ ster ar ger mut el lavarenn : "mut e vez ar beved". Pa gomzan, e tiwan va mouezh em garloc'henn, dindan stur va empenn, e kenober gant va zeod, h.a. Me eo an hini a gomz avat ha n'eo ket va garloc'henn, va empenn, va zeod... Ar ra-mañ ne vez o labour nemet an arvez bevedel eus va c'homz : un emell mut o devez enta.

velegveliezh pe ur brofedveliezh bennak (1). Pep den a vez diforc'h diouzh ar re all dre e awen dibar, n'eus aze gwirdreist ebet e sell eus ar stadrenezh; ouzhpenn-se, an dibarelezh, merk pennañ an Awen, end-eeun a ra ne c'heller ket stigmañ keñverioù hollek a priorri etre doareoù an Awen ha furn ar Stad (2).

Heñveldra, n'eus a vroad reizh nemet e rez ar vuhez awenel e ve. Hufvneel e hañvalfe bezañ seurt lavarenn d'hor meiz hirbleustret gant ar skolioù gall, ma ne verkfemp ket an disrann pouezus a zo etre meizadoù ar vroad hag ar Stad. Breizh ne vez ket ur framm kozh pe arnevez dimp da enkañ hor buhez e-barzh; er c'hontrol, ez eo Breizh a zo stigmañ gant framm hor buhez; hor buhez, peurzigor, peurziharzoù, peurzieub a bep prevezelezh, eo a zo Breizh. Stad-Vreizh avat, p'hen savimp un deiz, a vo anezhi

(1) Ar pezh a vefe da gentañ treuzintant spered an hentenn a implijan : taolennañ a ran gwirvoudoù a c'hell an holl gwiriañ anezho. Er skeud-se e kredan pouezañ emañ war unan eus pennañ diaesterioù an anadennoñiezh : ster ar gerioù e chom digor, d'al lenner d'hen sammañ war-lerc'h an aozer ha d'hen gwiriañ e-unan; kefridi an aozer eo hepken plantañ postoù arroud-enner. Da lavaret eo e nac'her termenañ ur ger diwar un all, ar pezh e gas da sevel ur sistem, hogen goulenn a reer digant al lenner ergerzhout gwelva e vuhez davit ar gwirvoud menegat gant ar ger-mañ-ger, dizoloadur ar gwirvoud n'eo ken o reif e ster gwirion d'ar ger. Da skouer ar ger awen a implijan er pennad-mañ, ur fazi bras e vije plakañ warnañ ur wezh da vat ster ar galleg "inspiration".

(2) Da skouer dibar, an Dispac'h Gall en deus kemeret an hent mat war-du ur furn reizh a Stad, nemet eo chomet hanter-hent. Goude bezañ nac'het ar gwirioù-dreist hiniennel, ez eo chomet diglok e gelennadur a-zivout gwir pep den da zont d'e vout awenel. N'en deus ket anavezet e teu ar reizh d'an den gant kresk e vout awenel, ha ne c'hell ket bazañ roet gant ur Stad ken frankizoù e va : rak ar Stad n'en devez d'ober nemet gant hiniennoù bevedel, hag ar beved, mat ha sujet dre natur, n'an deus netra d'ober gant ar reizh. E-se n'eo ket diaes gwelout ne dalc'h en o sav ar Stadoù genet eus spered an Dispac'h Gall nemet diwar-bouez amsteriegezhioù diniver; diluziet ar re-mañ e teuy anat an anepster ez int hag e tisac'hint raktal. Koulskoude, o c'houlenn evit pep den ar gwir da vevañ en e reizh, oberourien Diskleriadur Gwirioù Mab-den o deus toullet un hent na baouezo nepred a vezañ mat.

un emframm start, - ha hi da vezañ da gentañ ur chanter ramzel a adsavidigezh, - ha kalet-dir moarvat he renerezh : ar reizh n'eus ket anezhi er beved laosket en e roll, - pe neuze e vije Koadeier Divoulc'h Afrika pimpatrom ar reizh, - met en awen pep den sellet evel e wir vuhez. N'eo ket kaleter urzh ur Stad a zo enep d'ar reizher, met he diannaoudegezh eus gwirvoud awenel mab-den.

3.- Ardamezet an hent, ez omp gouest bremañ da verriadañ-ennañ ar pevar emzalc'h a sell ouzh keal an hevel-epet vroadel.

An alouber, - merzhomp e vez implijet an anv-mañ aliesoc'h da zoareañ ar Stad eget an den-hinienn, - a zo amsteriek e emzalc'h. Diouzh un tu ez eus ar vroad, eunwelet evel un hinienn fetis, ha graet ar Stad anezhi (disec'hus e vez kemmeskañ meizad ar Stad, bevedel hec'h anien reizh, ha meizad ar vroad lakaet dezhi e gaou un hevelepted vevedel). Diouzh an tu all, an den, hinienn fetis gwirion, a vez war un dro kellig vrizhvevoniell ar vroad, ha lodok er berc'henniezh he deus an hevelep vroad-Stad war he glad, tud ha broioù sujet. Ar seurt daouegezh, diouerieñ e vuhez d'ar Stad vroadel : "va buhez zo da'm bro", aloubiñ dre ar Stad vroadel broadoù all : "notre Bretagne, Algérie Française", a zo merk keodedad ar Stadoù alouber, haroz ha mac'homer war un dro. Evezhiomp diouzhtu n'eus eno daouegezh nemet evit ur gwel : an drao lusk-emzalc'h enebus-se, - emberzh, mac'herezh, - a vez diazezet heñvel war un emzalc'h gwirziennel arouezennet gant ar verb "bezañ da". Ar vuhez, buhez ar c'heodedad alouber, buhez ar pobloù aloubet, a baouez bout ur verb da vout renadenn mui pe vui displetaet ar verb placuañ.

Heñvel a-walc'h e vez emzalc'h an den aloubet ha pleget d'e donkadur. Aet perc'henniezh e vuhez gant an alouber, e teu ha sellout e zere evel reol e sklavelezh evel ret. Ne gredfe ket en em sevel

forzh-penaos, rak aon da goll c'hoazh war an dister a vuhez a zo bet lezet gantañ. En em lakaat a ra laouen pa dizh bevañ; e-se n'emañ ket gantañ ar verb bevañ muioe'h eget ur verb gwan; chatalaet ar pobloù drevadennet ne chom ken ganto nemet damant ar chatal d'ar bevañs. O madoù sunet, o buhezioù foranet gant Bro-C'hall, e soñj Breizhiz trevadennet : "Penaos e c'hellfe hor bro bevañ hep Bro-C'hall ?

Evit gwir, alouber hag aloubet a ya d'ober war an dachenn ur sistem kempouez, o tennañ d'an hevelep emzalc'h gwriziennel frammet war ar verb bezañ da : "va buhez zo din" eme marzhvoud ar Stad alouber, "va buhez zo dezhañ" eme an den aloubet. Luskellat a ra ar sistem e pep diogelded, zoken pa dro e penn an aloubidi saveteiñ o glad dibar; ar pep pellañ ma c'hellfent da vont eo kemer d'o zro an emzalc'h : "va buhez zo din", da lavarout eo kilstourm. "Gallekaomp Breizh", eme an alouber "peogwir ez eus anezhi ul lod eus Gall", "Gallekaomp hor bugale", eme an aloubet, pa vo gall o bara", "Saveteomp Breizh" eme ar c'hilstourmer "glad Bro-C'hall ez eo-hi ha ni Gallaoued vat". Ur c'helc'h peurgloz a ra an triad alouber-aloubet-kilstourmer, kenemharp e deir elfenn a-dreuz d'un enebadur dialektikel moarvat, hogen kenemframmet divrall war diazezh an hevelep emzalc'h ardamezet gant ar verb "bezañ da" hag an dianacoudegezh eus mab-den evel boud awenel.

Ken gwir all, n'eus nemet un trummgemm evel a weler en héroniezh a c'hell terriñ ar seurt kelc'h: an trummgemm eus an emzalc'h "va buhez zo din (da'm broad, da'm mistri) d'am emzalc'h "va buhez zo me". An trummgemm-se, hag eñ nemetañ, a zo dellezek eus an anv a Zispac'h. An dispac'her n'en deus netra da saveteiñ nemet e groc'hen e ve, hogen e groc'hen a zo Breizh, koun Breizh, yezh Breizh... ha kement tra a fell da re all saveteiñ hep lakaat o buhez e-barzh. Tonkad an dispac'her ne vez erret ouzh perc'h-enniezh ebet, setu perak e oar n'eo ket e donkad bezañ gwasket da viken. Ar mac'homerezh ne vez nemet un degouezh, ur gwallzarvoud n'eus ennañ netra anienel,

netra ret. M'en deus kasoni ouzh e enebourien a-vremañ ez asant dezhi o c'houzout ez eo un darvoud stag ouzh ar gwaskerezh, na bado ket pelloc'h egetañ, gantañ kement a vall bezañ disamm et eus an eil hag egile. Ma'z eo dare d'ar brezel, ez eo pa wel en tu all dezhañ un dazont ken diogel ha dazont ar vuhez hec'h-unan.

Maen ar Ya, Nevez-Amzer 1961

oooooooo
ooo
o

Bodmael

S T A N K E T E O A N H E N T , A O T R O U !

- "Daoust ha tu a zo da dremen ?
- N'eus ket.
- Persk ? emezon
- Gwelout a rit, aotrou, stanket eo an hent."

Gwelout mat a raen, eveljust, e oa stanket an hent gant stlejerzed, kestell-eost, rastellerezed hag a bep seurt binvioù da labourat-douar. War ar mekanikoù-se e oa tud a vil-vern, darn en o sav, darn en o c'hoazez, gwazed stumm al labour warno, gant o dilhad d'ar pendeiz e-giz ma lavarer du-mañ, gant o dilhad labour e gwirionez. Koulskoude ne oant ket o labourat : war ar wrimenn e pep tu d'an hent e oa gouzvezet ur c'hant bennak a baotred o c'hortoz. O selloù a oa sioul, mat ne oa ket tu d'o dizhout; an holl a oa difiñv, dilavar, ha zoken dic'hoarzh, pezh a zo rouez gant an dud diwar ar maez pa 'n em gavont a-gevret : ne oa ket memes ar farsadennoù boaz : o c'hortoz e oant. Hemañ a skoe meinigoù gant e viz, evel kanetennoù, atrezek un tamm toull, ur metrad dirazañ e kreiz an hent. Hannezh a floure kein e zorn kleiz gant ur geotenn-skrilh a lakae da dreif-distreif etre bizied e zorn dehou : o c'hortoz. Den ne lavaras din netra, daoust ma anavezan ul lodenn anezho.

D'am zro e oan krog ivez da c'hortoz ma vefe digoret din an hent, pa veizis ne oa ket bugale da heul al labourerion-douar.

Ar gwraez a oa chomet er gêr, pezh n'eo na souezhus na rouez, met ar vugale ne oant ket bet lezet da zont kennebeut. Ne oa nag ar baotredigoù seder nag ar plac'hedigoù koant a gever peurliesañ o redek ar parkoù pe o vont d'ar marc'had da heul o zad : bez'z eus traoù ha n'eo ket ret d'ar vugale gwelout.

Lennet em boa en deizioù kent, war ar c'hazetannoù, petora strafuilh a oa bet a Montroulez da heul an torfed-meur sevenet gant un troc'her-buzug aet da azezañ war gador an isprefed. Plijus-kenañ e oa bet ar rentañ-kontoù embannet war "Ouest-france". Ar Vretoned o tifenn o bara n'o doa ket ankounac'haet farsal; ret e oa bet d'an isprefed ha d'e itronig diblouzañ ken abred ha goulou-deiz. Ho pet soñj en doa skampet an isprefedig-se "direk an enebour", hep un taol-dorn na zoken ur vountadenn, o 'n em lakaet war ar marc'had e riskl da goll e galoñsoù evel komplic. Al labourerion-douar o doa kavet a bep seurt paperoù war vuzav hon Aotrou... met bez 'z eus paperoù n'eo ket dereat d'ar vugale o gwelout, n'eo ket 'ta ? Lakaet a zo bet warno un toullad sielloù a zoare.

Ma ! Skrivet e oa bremañ du war wenn, war ar c'helaouennoù : "Klask a raer an Den-bet-azezet-war-gador-an-isprefed, evit ma vo barnet".
Ya ! Plijadur ha levenez em boa bet, eus a-bell.
Amañ avat e kouezhis trumm war glac'har ha poan-galon ur bobl o c'houzañv kalet ha sioul.

Dont a ris e-maez va c'harr-tan. An den yaouank en doa respontet ac'hanoñ a oa chomet atav en e sav war greiz an hent. E anavezout a ris raktal : bet e oa Jakez em c'hilas un dek vloaz bennak a zo. Kuitaat en doa ar skol evit mont da skoazellañ o vamm chomet intañvez gant teir blac'hig hag ur paotrig da sevel. Ar vamm he doa gwerzhzet ar c'hezeg ha prenet ur stlejerer farman, pezh n'en doa biskoazh asantet he fried ober. "Evel-se, emezi, hemañ da vihanañ ne vo ket brevet gant al labour, evel e dad."

Met ar paotr a felle dezhañ, stlejerer pe get, diframmañ douar. E leveret an doa din sklaer a-raok kuitaat ar skol. E-touez ar re wellañ e oa, ha deskif a ra evel ma karo, hogen e benn a oa gant kezeg, saout lart, parkadoù gwiniz melen pe tachannadoù avaloù-douar. E galon ne oa ket gant Montesquieu nag Horatius Flaccus, met gant un amezegez yaouank

eveltañ, Marc'harid, chomet er gêr da sikour he zad da zerc'hel ar goumanant peogwir ne gaver ken e zvezhourion. D'ar sul ez ae Jakez da skoazellañ anezhi da reiñ boued d'ar saout ha d'ar c'honikled : goude ez aent da vale ar parkoù pe da weladenniñ an amezegion, ha setu....

" Setu an abardaer, an heol o vont da guzh,
'Tiskenn a-dreñv d'ar roz, hag ef ken ruz ken ruz.
Tomm vo adarre warc'hozh. Krazat a ray ar foenn,
Hafviñ a ray an ed, n'eus ket a goulenn".

E gensiled a c'houlenne digant Jakez pegoulz e vefe an eured, met koulou a oa. Amañ ivez e oa ret gortoz ma vefe gwelloc'h an traoù, gortoz ma vefe savet ar breur hag ar c'hoarezed bihan, gortoz ma c'hellfe unan eus ar gerant lezel e goumanant gant ar re yaouank, gortoz ma vefe peadra da veveñ, gortoz atav...

Plantet war greiz an hent, e zaouarn en e c'hodelloù, Jakez a reas ur vrizh'hoarzhadenn drist. An douar a oa en e zaoulagad. Gortoz a raes ma lavarfen un dra bennak :
"Met a rit o stourm, emezon, hep prederiañ re, rak a-hand-all ne blede ket ar gouarnamant gant al labourat-douar".
Jakez a stardas e zaouarn un tammig. E zremm ne ken trist, met reut. Goude ruziañ un tammig e troas war ar melen.
Feuket don em boa ar paotr, hep gouzout din.

Un den war dro dek vloaz ha tri-ugent, harpet ouzh rod ur stlejerer a reas ur gammed war-raok. Tud ar wrimenn a astennas ur skouarn, hep mui.

"Komprenit ac'hanomp, aotrou, eme Jakez, ni ne blij ket daomp ar vicher-mañ. N'eo ket hon micher stankeñ an hentoù na diskar postoù ar pell-gomz, p'emañ ar foenn o krazañ er pradoù. Ne c'houlennomp nemet un dra : kaout peoc'h da labourat ha da veveñ evel ar re all. Amañ n'eus nemet paotred, aotrou, ac'hanta, ma komprenit un dra bennak, selaouit : ni a zo skuih o kaout mezh o welout hon bugale e truilhoù, o welout hon gwraez pe hor mammoù o labourat evel sklavourezed, o welout hon tiez dirapar e-kichen kenkizid an douristed, o veveñ e-pad hon buhez dinden dle, kaer hon eus labourat.
Ar c'helaouennoù a seblant bezañ a-du geneomp, aotrou, met evit goapaat pe reiñ deomp alioù diot. Hag e kav deoc'h ne bled ket ar gouarnamant gant al labourat-douar ? Ar c'hontrol eo, aotrou, plediñ a ra, met kalz re, d'hor gred, hag evit hon diskar.

Ni a oar emomp er sac'h evit ar mare, ha setu perak e klaskomp dont er-maez.

"Ar gouarnamant a zo a-enep deomp, hen lavaret en deus meur a wech : fellout a ra dezhañ kas ac'hanomp d'ar c'hreisteiz, peogwir tud ar c'hreisteiz n'int ket padet eno. Hag e kav deoc'h e padfomp ni du-hont ? N'omp ket zoken e renk al loened, aotrou, rak al loened ne vezont ket kaset war an tachennoù peuret betek ar vein. Ni a fell deomp chom amañ, ha chom a refomp.

"Kinniget e vez deomp sevel skolioù labourat-douar. "Emeur o vont da ober" a lavarer dalc'hmat, hogen, ne vez ket graet. Er broioù all ez eus ijinourion ar maezioù evit kentelias ar re yaouank. Er vro-mañ ez eus skolaerion, skuizh oc'h aozaf ar sertifikad, o c'haloupat eus an eil kumun d'eben; n'anavezont ket al labourat-douar, ha ne reont kalz forzh eus al labourer.

"Gremañ n'eus kaoz dre-holl nemet eus ar C'henvarc'had Europat, eus an emglev frank-alamant ha me oar... Pa vez brezel, ar Vretoned da gentañ, aotrou, pa vez graet ar peoc'h, ar Vretoned d'ar gêr ha ra vefont sioul. Setu amañ August Lagadeg : bet eo e Verdun, ha tennet eo bet digantaf e bafsion. N'eus lezet gentañ nemet e vedalenn."

August a reas ur weadenn d'e c'henou :

"Ma vefe bet e chokolad da vihanañ, emezañ, am befe debret anezhi pell 'zo."

An holl a 'n em lakaas da c'hoarzhin evit ar wech kentaf, met Jakez ne reas ket.

"Pa vo echu en Aljeria e vo kemmat ar gouarnamant, ha tamallet deomp bezañ aet du-hont, daoust ma oa dre forzh."

N'anavezen ken va skoliad a wechall, ken abaf ha ken sioul. Eus a belec'h e ouie kement-all a draoù ? Desket am boa dezhañ un draig bennak diwar-benn istor Breizh, met n'eo ket er skol sur-mat en doa klevet komz eus ar C'henvarc'had Europat. Mezha a savas ennon : kilet am boa alies dirak ar rener skol hag an enseller, tavet am boa war ar wirionez ; ur ger hepken, gwech ha gwech, hep riskl, setu petra am boa graet.

Hag ar paotr mañ, war greiz an hent, sammet gant al labour, an dienezh, gant dispriiz ha gwaskerezh ar vistri, en doa divizet enebif gant nerzh, hag en em lakaat en arvar zoken da goll e frankiz.

D'am zro e dan fromet.

Hogen, ne gradis ken chom da c'hortoz ma vefe distanket din an hent. Ober a ris d'am c'harr kilaf ha treiñ. Treemen a ris goustad Kroaz-hent ar Big-Sec'h, rak ne ouien ken dres' etrezek pelec'h mont. Stanket eo an hent, Aotrou, ya, stanket eo an hent.

24.6.1961

badmael

Y. Olier

O P I O M A N E M S A V

1. - Emsav koshañ Breizh eo an emsav sevenadurel. Mat e vefe eta, da gentañ, termenif anezhañ. Bez ez eo an emsav sevenadurel an emsav a asur e c'heller saveteif ar pep pennañ eus broadelezh Vreizh hag he yezh peur-getket hep ober politikerezh, da vihanañ hep ober ur politikerezh breizhat, o tiouerif stad breizhat hag emrenezh, pe ma karit, e c'heller saveteif ar yezh dre ar yezh end-eeun.

N'eus ket bet nemet rannvroelourion oc'h harpañ ar menoz-se, daoust maz eo an holl rannvroelourion gweitibun a-du gant un emsav sevenadurel nemetken. Abaoe derou ar c'hantved-mañ ez eus bet strolladoù e-giz re an Drouizez, renet gant Taldir, ar Blaun-Brug, renet gant Yann-Vari Perrot, Breuriezh ar brezhoneg bev, e Gwened, renet gant Loiz Herriau, ar Brezhoneg er Skol, diazezet gant Yann Fouere, ar Falz, bleniet gant Yann Schier, Ober renet gant Marc'harid Gourlaouen, Breuriezh ar Brezhoneg er Skolioù savet gant R. Delaporte, Brezhoneg ar Vugale ha Kannadig Gwalarn diazezet gant Roparz Hemon, strolladoù hag a oa ambilhet gant broadelourion. Goude an eil brazel o deus ar vroadelourion diazezet "Kuzul ar Brezhoneg" hogen dishefvel eo marteze spered ar c'hevredad-se, a gredan : ar bagadoù a zo ennañ a zo lennegel pe skiantel ha ne asuront ket moarvat e saveteint ar yezh war-eeun gant o labour ha n'eo nemet al labour-prientif. Ne roont

youenn olier

d'ar beilhadegoù peurlvuañ, nemet talvoudegezh ar bruderezh, ha da Skol Sant Erwan hini un arnod-studi e sell da dermeniñ an doareoù-kelenn ar yezh ar re wellañ. Ar rannvroelourion avat, bodet e-barzh Englev Breizh (Kendalc'h Mokaer, Ar Falz Keravel, Bleun-Brug Seite) a gendalc'h gant an ervenn gozh penn-da-benn, hag a assur e saveteint ar yezh dre ul labour sevenadurel rik.

Dres, resisomp adarre termenadur an emsav sevenadurel. Petra eo eta e vennad ? Ar re-mañ ez int : saveteiñ ar yezh hag ar sevenadur dre ober ez-eeun war o zro, lakaat pobl Vreizh da virout he yezh er-maez a bep speread broadel zoken. An doare-ober implijet eo deskiñ da bobl Vreizh lenn he yezh, reiñ d'ar werin ul lennegezh dre gomz pe dre skrid. Ur wach ma oufe pobl Vreizh lenn ar brezhoneg e talc'hfe dezhañ da viken. En ur ger, diazezet eo emsav sevenadurel Breizh war gozh sorc'henn Jullian : Ur yezh dizesket a zo ur yezh barnet d'ar marv.

Ac'han ar strivadennoù da sevel ur c'hoariva brezhonek : hini ar Bayon e Gwened, hini ar Bleun-Brug e KLT; ac'han ivez ar bodadegoù brezhonegerien gant kanaouennoù ha displegadennoù a bep seurt, gouiziek ha dilorc'h, e Breizh-Izel koulz hag e Breizh-Uhel pe er-maez a Vreizh, festoù-noz, beilhadegoù hag emvodoù.

Ac'han ivez ar stourmadennoù da lakaat kelenn ar brezhoneg er skolioù arak ha goude ar brezel.

2. - Roparz Hemon e-unan a zo bet lodek ar c'hredennoù-se. Oberoù 'zo e-giz "Brezhoneg ar vugale", "Kannadig Gwalarn", ar stourmadenn "Unan da zeskif da unan", ar "Brezhoneg eeun" e-unan evit darn, a gav o gwizienn er memes rakvazn: Bez e c'hell ur yezh bevañ pa vez lennet hep-miken(1). Moarvat e ouie arvat R. Hemon hag eñ spiswel evel bepred e kelle e amzer hag a-wachou e arc'hant; n'hoc'h eus nemet lenn "Pirc'hirin ar Mor". Gouest e oa ivez da erbediñ doareoù-ober nevez: adlennit "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh". Hogen bouc'het en deus R. Hemon e labour dres war-lerc'h marevezh romantel an emsav ha diaes e oa dezhañ mont a-enep d'ur froud a gese war-raok an holl stourmerion evit ar yezh neuze : safjit pebezh sakrilej asurif oa didalvez kreann deskiñ da bobl Vreizh lenn ar brezhoneg evit saveteiñ anezhañ ! Digareziñ Roparz Hemon a c'heller en abeg d'un dra all ivez : krefav a-walc'h e oa c'hoazh ar yezh poblek d'ar mare m'en deus kroget da stourm. Eus ur fed all a ranker derc'hel kont : pismiget eo bet kalz Roparz Hemon gant dalc'herion ar "brezhoneg bay" dre ma strive, da gentañ, da ziazezañ ar brezhoneg uhel. Na pet gwech em eus

(1) Niver ar skridoù lennet en ur yezh a c'hell diskouez ez eo yac'h pe glañv ur yezh, n'he deus avat talvoudegezh all ebet. Ma kerit, e-giz ur e gav dezho eo a-walc'h plantañ ar gwrezverker e fofa ar c'hleñvour, gant resped deoc'h, evit pareañ anezhañ.

klevet e-pad ar brezel "brezhonegerion a-vihanik" an "native speakers" na petra 'ta, o tamall da Roparz Hemon bezañ lazhet ar yezh (sic) dre chom hep skrivañ evit ar bobl pe dre skrivañ ur brezhoneg re ouiziek eviti. Ret e oa da Roparz Hemon, siwazh, teurel perzh ouzh an dud-se, ha plegañ d'o brizh-kredennoù. E-pad ar brezel zoken e kendalc'has Roparz Hemon da ober e-giz p'en defe kredet e c'helle un emsav dibol-tikel rik hag eñ dic'hall dougen frouezh war dachenn ar yezh hag ar sevenadur. Speread Arvor, da skouer, ne oa ket ken broadel hag hini SAV evitañ da vezañ taer war dachenn ar yezh end-eeun. Forzh penaos, d'ar mare-se c'hoazh e krede Roparz Hemon e c'helle al labour sevenadurel kaout ul levezon ez-eeun war vuhez ha tonkadur ar yezh.

3. - N'eo ket tenn merzout gwizienn ar fazi o deus graet an holl stourmerion-se. Eval m'em eus merket dije, kredif a raent bepred bevañ en XIXvet kantved hag e oa Breizh-Izeliz atav ur poblañs unyezhek. Neuze ne oa nemet heuliañ skouer ar pobloù bihan all unyezhek o doa saveteit o yezh en XIXvet kantved. Ar wirionez eo a oa divyezhek ar vrezhonegerion adal 1920 : hogen ne dalv da netra deskiñ lenn he yezh d'ur bobl divyezhek, a zo gwashoc'h, d'ur bobl a oar muioc'h ha gwelloc'h bemdez ar yezh estren eget ar yezh vroadel. Da lavarout eo, n'eus ket a blas e Breizh er mare-mañ d'un emsav a engroez evit ar yezh, pezh a gredar dalc'hmet peurlvuañ. Tud zo a zo touellet dre ma kavont Bretoned c'hoazh e Breizh etre 65-80 vloaz a oar komz gwelloc'h brezhoneg eget galleg. Hogen ar re-se zoken a oar lenn paot gwell ar galleg a zo bet desket dezho evel ur yezh unvan eget ar brezhoneg ha n'anavezont nemet ur rannyezh gwall baour ha gwall zistreset anezhañ. Lakaomp, zoken, o defe ar re-se desket lenn brezhoneg. E-leizh mui a zanvez a gavint e galleg eget e brezhoneg. N'eus nemet ur yezh-stad a c'hell stourm ouzh ur yezh-stad. Savomp da gentañ ar stad ha goude-se o strivomp da adsevel ar yezh e-touez ar werin. Ober e-giz-all a zo koll amzer ha forañañ hon narzh en un emgann tonket da c'hwitañ.
4. - Un dra koulskoude en defe dleet lakaat ar stourmerion gozh evit ar yezh da zisfiziout. Tro-wenn o deus graet an emsavioù sevenadurel en holl vroioù keltiek. E Breizh da gentañ. Lennet eo bet kalz ar brezhoneg ergentaou ha n'eo ket bet diogelst dezont ar yezh evit se. Ur studiadenn a vefe da ober diwar-benn an embannerzh brezhonek etre 1850 ha 1914. Merzet e vefe ez eus bet skignet er rannvro a anver Breizh-Izel miliadoù

ha miliadoù a levrioù brezhonek, darn anezho lennet stank evel Buhez ar Sent. Ha padal ar yezh n'he deus paouezet nepred a gilañ. Soñj am eus bezañ kavet e grignol presbital ur barrez war vevenn ar yezh, hanter hent etre Gwened ha genou ar Wilen, degadoù a levrioù brezhonek, a veze prestet a gent d'ar barrezianiz, levrioù a zevesion, na petra 'ta ! Hiziv an doiz ez a ar yezh da get eno evel ar parrezioù tro-dro e-lec'h n'eus bet lennet tamm brezhoneg ebet.

Un enklask all a c'hellfed ober a-zivout ar re o deus bet tro da zeskiñ lenn brezhoneg ar skolioù pe da vezañ koumanantet d'ur gelaouenn vrezhonek poblek bennak, Dihunamb(1) pe Faiz ha Breizh, diwar-benn ar re o deus darempredet bodadegoù ar Bleun-Brug, o deus konstrivet e sell da ouelioù ar strollad-se, o deus lennet "Arvor", levrioù ar vugale, selaouet ar radio brezhonek ha ma 'oar-me. Daoust ha kavet e vo e-touez an holl re-se unan en defe komzet brezhoneg ouzh e vugale a c'houdevezh en arbenn a gement-se ? Me 'lavar deoc'h ne vo ket kavet. Lennet gantañ al levr pe ar gelaouenn, deut en-dro eus ar vodadeg, serrret gantañ ar skingomzer en em gavo ar brezhoneger direk kudennoù peurbadus ar stourm evit bevañ. Nemet broadelour e ve hag e kradfe e talvouddegezh ar vroadelazh, e klasiko frank-aat evit e vugale an hent d'ober berzh er vuhez. Ha ret mat eo anvez : deskif brezhoneg d'ar vugale ne ra nemet strobañ paotr ar werin a zo skoilhet a-walc'h e-hend-all gent ar baourentez hag an divrud. Ar brezhoneger hanter desket ha di-amskiant-se a ray eta dres evel ma reer tro-dro dezhañ ha bezañ desket lenn brezhoneg dezhañ a vo bet un anez a-grenn peogwir ne vo ket gouestoc'h eget re all da legadif ar yezh d'e ziskennidi.

5. - Sellomp ouzh un degouezh all, hini Iwerzhon. Lennet em eus en iwerzhoneg un nebeut bloavezhioù zo, efvorennoù an Craobhin, rener kentañ ar ch"Connradh", ar "Gaelic League" na raes hamañ enno istor an emsav-se. ("Mise agus an Chonnradh" eo talbenn al levr-se a zo dudius da lenn hag e erbedan d'ar re a zo barrek war an iwerzhoneg). Pal ar "Gaelic League", sañset, e oa evel hini an emsav sevenadurel e Breizh : saveteif ar yezh dre ar yezh hac'h-unan. En enob d'ar pezh a zo c'hoarvezet e Breizh avat, eo kresket ar "Gaelic League" d'un emsav meur a lakaes kelenn ar yezh a-zevri e kantadoù a skolioù. Pebezh disoc'h a zo bet d' al labour ramzel-se evit miridigezh ar yezh end-eeun ? Dister, evit lavarout ar wirionez, dihwel, netra koulz levarret : al lanv saoznek en deus kendalc'het da zirollañ war ar vro. Da vihanañ n'eo ket bet didalvez kreenn ar "Gaelic League" war un dachenn all pouzusoc'h evit an amzer-da-zont : skignañ ar vroadelouriezh ouezelek. Oiskleriañ a ra ar skrivagner penaos e oa ar "Gaelic League" ur minic'hi evit ar vroadelourion na c'hallent ket kemer perzh en

emsvioù politikel en abeg d'o micher. Labour pennañ ar "Gaelic League" araok an dieubidigezh eta eo bet magañ ar spered broadel gouezelek. Talvoudus eo ar skouer-mañ peogwir e tiskouez ne c'hell bezañ un emsav sevenadurel en ur vro hualet netra nemet un emsav a vruderezh broadel. Setu ar gentel o deus ar Vretoned da denañ diouzh degouezh Iwerzhon(1), da lavarout eo ne c'hell kelenn yezh hag istor ar vro bezañ netra estroget un tu da adsevel ar spered bro e saveteo yezh ha sevenadur a c'houdevezh.

6. - Skouer Kembre a zo ken talvoudus all. Daoust m'eo dek gwech krañvoc'h marteze an emsav sevenadurel kembraek eget an hini brezhonek, daoust m'eo kelennet a-zevri ar c'hembraeg en holl skolioù izel hag en holl skolioù-stra, daoust ma talc'h ar yezh ul lec'h a-bouez ar werin. Peseurt abeg d'an drouzivezh-se ? Kembreiz spiswal a-walc'h a zo krog d'hen merzout : an divyezhegezh a laz ar yezh vroadel dre ma'z eo an emgav arboallerezhel a-du gant ar saoznek, an divyezhegezh a laz ar yezh vroadel dre ma laz ar spered broadel. Moarvat eo stank-tre niver al lenneion kembraek : hogen dont a ra nerzh ar c'hembraeg muic'h eus hengoun ar rullijon eget eus ur skol a zo etav e dalc'h ar Saizon hag ar saoznegarion, daoust d'an divyezhegezh. E-pad pevar c'hantved eo bet emsav ar yezh e Kembre un emsav diazezet war vuhez wirion ar vro a oa relijiel d'an ampoent : bez e oa anezhañ eta ur blantenn yac'h a greske dindan an amzer ha n'eo ket plantann vrask ti-gwer hon emsav sevenadurel. Un doare all eus emsav ar yezh e Kembre eo arabat ankounac'haat : n'eo ket ken kreizennet an deskadurezh a-hont hag en tu-mañ eus Mor Breizh. Ma lennit ar studiadonn embannet nevez 'zo gant an Ao. Kalvez e-barzh "Skol" e vezret o deus ar pennadurezhioù lec'hel ur roll a-bouez e kenurzhadur ar skolioù e Kembre. Kement-mañ a verken evit diskouez hepken eo arabat d'ar Vretoned traou-intent ar c'hantelioù a c'hallont kavout ar broioù arall, ha kredif a tiskoulmint o c'hudennoù dres evel m'eo deus broioù all diskoulmet o re. Kembreiz a c'hell gortoz muic'h egedomp, bez e c'hallont marteze kontañ muic'h war an amzer, doareoù kufavoc'h egedomp a c'hallont implijout marteze dre m'eo diogalet evit ur pennad amzer dazont ar yezh lennegel e-touez un nebeut miliadoù a dud. E Breizh, n'eus ket havelep kont ganoemp.

(1) Anavezet em eus un tiegezh en Arradon e-tal Gwened. An tad a oa koumanantet da Zihunamb; n'en deus ket desket ar yezh evit se d'e vugale. Ha pet a skouerioù all a c'hellfed kavout !

(1) Pa vez savet ar stad broadel avat e c'hell un emsav sevenadurel harpañ a-zevri ur politikerezh advroadelañ ma krou ar stad divizoù arboallerezhel a-du gant ar yezh.

7. - Dont a ran en-dro da gudenn ar skol en drevell adsevel ar yezh. En em gavout a reomp dirak div dro-soñjal. Diouzh un tu eo douget Roparz Hemon da gredif evel Mervin Mordiern e vo ar gwellañ astenn war ar vro ur rouedad skolioù prevez a gelennfe ar yezh gant ur spered broadel. Reizh eo ar soñj-se : rak anez eo kelenn ar yezh hep deskiñ war un dro ar garantez vro d'ar yezherion. Hogen amañ, siwazh, emañ en ur c'helc'h : n'eo ket gwirhefvel e ve plas ar vro-mañ a zo kollet ganti hec'h emskiant-bro d'an ampoent, evit ur skol vreizhat etre ar skol gristan hag ar skol lik. Sevel un nebeudig skolioù ne ziskoulmfe ket ar gudenn. En dagouzh gwellañ e c'hellfe kontañ "Skol Sant Erwan" war ur politikerezh nevez a-berzh an eskoptioù breizhat a vefe a-du a-zevri gant ar yezh. Sur mat, Skol Sant Erwan na zileuri ket tamm ebet ar skol vroadel vreizhat a fell deomp sevel en amzer da zont : an divyezhegezh anezhi n'eo da vozañ degemeret nemet evel un diskoulm da c'hortoz e stern ar gouarnerezh gall a-vremañ. Hogen un dra a-bouez a zo bet diskouezet dres gant "Skol Sant Erwan" : Tu a zo da zeskiñ ar yezh madik a-walc'h d'ar vugale e Breizh hep kemm ar programmoù gallek; bez e c'heller zoken deskiñ ar yezh d'ar c'hallagerion en ur ober daou pe dri bloez. Hogen diwar zaou ziviz e c'hall ar pal-se bezañ tizhet : ober eus ar brezhoneg evelato benveg an darempredoù boutin etre skoleerion ha skolidi, da gentañ; ha d'an eil, eveljust, kelenn ar yezh gant ur spered broadel. Daoust hag asantif e rey pennadurozhioù an iliz da vrezhonekaat ar skolioù kristen betek an derez-se ? Ya, an deiz ma vo krefav a-walc'h ar menoz broadel e Breizh ken e vo dav darc'hel kont anezhañ. N'eo ket dic'hallus e welfe ar veleion neuze oz vroadelouriezh vreizhat pezh a c'hellfe bout talvoudus evit an iliz, an amzer-da-zont.

8. - Paot diaesoc'h e vo ober kemend-all ar skolioù a-berzh-stad peogwir int war-eeun dinden renerzh Ministr an Deskadurezh e Paris. N'ouzon ket petra en deus gallet seveniñ Andrev Merser en e skol e-sall kelenn ar brezhoneg. Ne vezn penaos, lakaomp e vije evit gouestlañ keit e amzer d'ar brezhoneg ha Skol Sant Erwan e chomfe daou c'houlenn da respont dezho evit gouzout hag-añ e c'hall dougen frouezh e labour : daoust hag ar brezhoneg a zo ingal benveg an darempredoù etre ar mastr hag ar skolidi ? daoust hag aotreet e vo ar mastr d'ober bruderezh a-zevri evit ar yezh ? Anez d'ar respontoù d'an daou c'houlenn-se bezañ mat, e vo anez labour ar skolaer. Hogen lakaomp zoken e rafe Andrev Merser evit ar gwellañ en e skol, daoust hag ar skouer a zo a vo heuliet gant e genvredeur ? Emaomp atav dirak ar memes kudenn diziskoulm. Ne dalv ket ar boen lakaat mouszhiañ lezennoù di-spir, ne vezn penaos, e Paris, hervez politikerezh Keravel hag ar Falz, ma n'eur ket harpet gant menoz an

dud e Breizh, ha dreist-holl ma n'eur ket skoret gant menoz ar skoleerion end-eeun. Sur-mat en deus klasket Keravel priantif menoz ar skoleerion da zegemer kelennadurezh ar brezhoneg er skolioù dre e skolioù-hef. Hogen, distar eo chomet e levezon, ha diouzh un tu all n'en deus ket gallet, pe kentoc'h, n'en deus ket kredet diskouez d'an dud en doa dam'hounnez d'ar brezhoneg kudenn ar yezh en he c'hriañ : saveteif ar yezh e c'houlenn e gwirionez ur gwir zispac'h a eilpennefe ar vro penn-da-benn. An holl Vretoned a zo bodet en-dro dezhañ a zo lusket o faltezi gant hufvre c'hwek al lezenn vuzhodus votet e Paris a adsevo hep mank ar brezhoneg. A-boan ma kredont e vo ret stourm a-zevri evit ar yezh. Lavaret e vo n'eur ket tu d'ober muic'h e-touez ar skoleerion a-berzh-stad e zo paest gant ar stad gall evit ar poent - ha moarvat keit ha ma pado ar gouarnerezh gall e Breizh - evit kelenn, difenn ha skignañ ar galleg, ha n'eo ket evit kelenn, difenn ha skignañ ar brezhoneg, pezh a zo ret koulskoude evit saveteif anezhañ. Perak neuze kemar kement a boan evit un emgann na zoug frouezh da-vat ebet, ha dihenchañ danvezioù stourmerion a c'hellfe bezañ implijet gant muic'h a frouezh war un dachenn emgann all ?

9. - Ma pouezan war emsav ar Falz e ran dre ma'z eo hemañ e penn an emsav sevenadurel e Breizh abaoe diwez ar brezel; hep ren anezhañ a c'houez d'an holl en deus bras-stummet e bolitikerezh. Intrudu al lezennoù diwar-benn ar brezhoneg a zo bet kemeret gant kannaded komunour diwar c'houlenn ar Falz. Ma vije bet kemeret an intrudu-se gant ur spered gwir vroadel a vije bet un intrudu talvoudus. Hogen n'emañ ket kont er mod-se. Darempredoù ar Falz gant ar gomunourion a-hand-all a zo diazezet war un treuz-emglev. Prest a-walc'h eo moarvat ar kannaded komunour da vouezhiañ a-du gant ur yezh poblek en arbenn d'ar sentimentalerezh gwerinel a zo diouzh ar c'hiz ganto. Hogen evel an holl gomunourion e Breizh ez int izili ur strollad estren, ar "Parti communiste français" hag a zo gall, na petra 'ta, hag a-du gant ar c'hreizennerezh hervez hengoun kleiziz Vro-C'hall. Gwiziennet eo hengoun ar strollad-se a-hand-all e Paris hag an Hantarnoz Bro-C'hall, e-touez micherourion an ijinerezh bras, divarrek eta da gompren kudennoù ur bobl a gouerion hag a vourc'hizion vihan e-giz hini Breizh, e-lec'h ez eo ar gleizelezh anep-ilizel kentoc'h eget kevredigezhel-rik. Hanval eo avat e c'hortoz ar Falz silvidigezh ar yezh - hag ar vro, piv oar - digant trec'h arvarleun en dagouzhennoù a-vremañ ur strollad m'eo an izili anezhañ e Breizh zoken diseblant pe zoken enebet ouzh monnadoù pannañ an emsav; ra gounor piv a zeuss da drubuilhañ bodadeg ar MOB e Brest bloez zo. N'eo ket dic'hallus e kemfe ar P.C.F. e bolitikerezh en deiz ma vo

deut an emsav un nerzh e Breizh. Hogen moarvat n'eo ket eñ a astenno levezon an emsav a c'hell kevezañ outañ e doare pe zoare, stourm outañ ar muiañ ma c'hellio ne lavarn ket. D'ar c'houlz-se, en em c'houlennan dre 'n arbenn a betra e rankfed gortoz silvidigezh ar yezh digant tud na reont ket kalz a van anezhi ?

Poent eo da stourmerion ar Falz gouzout hag-eñ int Bretoned pe gomunourion c'hell. E gwirionez, zoken pa goulabouront gant kostezennoù pe strolladoù breizhat all n'en em gemmes ket paotred ar Falz ganto penn-da-benn. Eus gouenn ar re zilennet a zle nevezif an douar a-bezh ez int. Bevañ a reont gant soñj en darvoudoù marzhus a seveno o uhelvennadoù. Kredapl a-walc'h eo ez eus e-barzh empenn ar brezhonegour-komunour ur c'hornig kuzh ma tamvev ennañ mojenn ar soudard ruz kadarn a zieubo Breizh pe a saveteo ar brezhoneg. A bep eil e kemer Bretoned 'zo Hitler, Stalin pe Kroutchov evit ar Mabig Jezuz - pe c'hoazh an ao. Falc'hun evit ar "Pèrs Noël". Gouzout a zlejant koulskoude ne vo profet netra da Vreizh hag e rankimp gounit pep tra d'hor bro diwar c'hwezenn hon tal hag a laz-h-korf.

Evel-se e wallefont al labour gwirion nemetañ a denn da grouiñ e Breizh, dre n'eus forzh peseurt tu, ar spered bro na c'hell bro ebet bevañ na trec'hif hepti. Hag ar spered bro ne ziwano ket diwar gelenn ar brezhoneg pe rondoniñ anv Breizh hep paouez, diwar ur bruderezh spis a lakay anat e rank hor bro bezañ emren anez mervel, ne lavarn ket.

10. - O loc'haf diouzh ar savboent-se n'on ket evit degemer nemeur kenlabour paotred ar Falz gant stourmerion ar yezh en Okitania. N'eo ket fur, war va mano, stagañ kelennadurezh hor yezh ouzh hini yezhoù ha n'int ket unvan mat, nag ezen tonkadur Breizh gant hini broioù ha n'int ket tost da gaout ur spered bro, peogwir ne gaver enno zoken un dibab mennet start da gas o fobloù war-du an trec'h. Enket e vo Breizh etre daou benn-anez : pe kenstrivañ gant rannvroioù gwirion, latin, ha na c'hellint biken bezañ distag mat diouzh Bro-C'hall, koll eta he spered bro a-benn ar fin; pe neuze lakaat ar stad c'hall muic'h war ziwall c'hoazh o tanzen an diempradur klok anezhañ. Forzh penaos, luziañ ar gudenn hep nemeur a c'hounid ne raer ken.

Daoust d'ar pezh a c'hell darn kredif, n'eo ket stag planedenn Vreizh ouzh gwanidigezh ar stad gall end-eeun, nag ouzh an digreizennadur pe an diempradur anezhañ. Gwell eo dilezel Okitania d'he zonkadur : ne ray nemet hor strobañ ha mirout ouzhip a gonlabourzet gant ar broioù nemeto omp kar

dezh, ar broioù keltiek; hon degas a ray ivez da ober eus kudenn Vreizh ur gudenn diabarzh eus ar stad gall. Politikeloc'h e vefe c'hoazh reif d'ar stad gall degal un digoll e Wallonia pe ur vro c'hallek all evit koll Breizh eget meskañ kudenn hor bro gant hini broioù diforc'h mat digouti ha n'hon eus ket da bledif ganto.

11. - Istor ar Bleun-Brug goude ar brezel diwezhañ a zo mentrus ha digalonekaus a-walc'h. Setu un emsav en deus aczet nouspet goul pobl, en deus urzhiat nouspet bodad-studi, en deus prientat ur skol dre lizher dispar ha pleustret stank war a lavar ar renerion anezhi, en deus danzeet kenstrivadegoù evit bugale ar skolioù - na petra 'ta - ha peseurt frouezh a zo d'an holl oberiantiz-se ? Nabauc'h eget netra. E-lac'h krekiñ ez eo aet niver lennerion "Bleun-Brug" war vihantaat bemdez ! Daoust avat na ne oa ket ar gelaouenn-se da vezañ kelaouenn bobl vras Vreizh Izel a-giz "Arvor" a ziagent ? Moarvat eo bet kiriek da se dizudi ar gelaouenn, gouest da lakaat da gousket spered al lenner dihunañ; ha kiriek eo bet ivez skritur ken skiantel ha ken sklaer an ao. chaloni falc'hun. Hogen abegoù all a zo bet ivez : an diouer a feiz wirion a-barzh ar renerion. Ne c'heller ket kompren e va graet pep tra e gallez e kenstrivadegoù bugale ar skolioù nemet ar "varzhoneg" pe an tamm skrid bennak a zo da zibunañ gant ar bugel hag a zistag e-giz pa vije savet en ur yezh varv, hep kompren ervat pezh a lavar. It en ur genstrivadeg evit ar skolioù : an holl ziskleriadurioù a zo merket e galleg. Selaouit ouzh an arnodennet : ne gomz nemet galleg. En dro-mañ c'hoazh ne oa nemet un tu da dennañ frouezh eus ul labour a zeu da vezañ diboañ a-benn ar fin : c'hwezhañ ar vrogarouriezh e spered ar skolidi, o heñchañ war-du an emsav lennegel broadel, en defe o lakaat da garout ha da baurzeskiñ o yezh hag a-se d'ho mirout, evel ma ra "Skol Ober".

Hogen ar c'hontrol a zo bet graet : pe zianeout an emsav broadel, pe e gaaat zoken. Na souzomp ket goude-se avat ma koazh ha ma'z a da get un emsav ha n'en deus gwirizian start ebet.

An disoc'hoù a zo aze, deoc'h da vein : En ur ober pemzek vloaz bennak Bleun-Brug n'en deus ket gallet moulañ ouzhpenn 500-700 skouerenn a niverennoù 16 pajenn bep miz, evit ur milion - gontar dimp - a vrezhonegerion. Lev'r ebet. Gwasoc'h 'zo : abaoe daou vloaz bennak - splannet trec'h - en deus ranket Bleun-Brug mont da gelaouenn divyezhek, da lavarout eo ne vout ken nemet 8 pajennad vrezhonek bep miz. Goude c'hwitadenn An Had

hag Ereoù e Gwened, daoust hag ez eus ezhomm ur brouenn anatoc'h da ziskouez pegen ener eo pep emsav sevenadurel ha na gas ket ober eus ar vrezhonegerion yezhourion glok, gouest da dennañ eus ar brezhoneg an implij a denner eus ar galleg, brogerourion emskiantek a venn e ve trec'h o yezh ?

12. - E gwirionez n'eur ket evit gortoz kalz tra digant un emsav hag a zo ganet eus un treuzvarc'had. Meizet eo bet er penn-kentañ evel un tu da lakeat ar yezh hag ar vroadelezh vreizhat e servij an iliz d'ur c'houlz m'o doa un diazez poblek start a-walc'h. An dra-se a oa gwir a-raok ar brezel kentañ pa oa bac'h etre ar stad gall hag an iliz. Goude ar brezel kentañ e klaskas an ao. Perrot, en ur stumm bennak, implijout an iliz d'he zro evit saveteiñ ar yezh hag ar vroadelezh vreizhat. Harzet e voe outañ dre ma oa al lañs neuze gant kenlabourat gant ar stad gall war-lerc'h ar brezel. Diouzh savboent rik med berbad an iliz e oa tu da zidmallañ an difenn graet ouzh an ao. Perrot. Hogen didec'hus e oa ivez an heuliad a zeuas war-lerc'h an difenn-se : ober pilpouzion eus an dud a iliz a bade da asurif e felle dezho saveteiñ yezh ha broadelezh Vreizh hep tagañ ar stad gall kreizenner. Anavezout a ran divizadurioù an ao. Duparc e-du gant yezh hag istor Breizh. Gouzout a rae hemañ kerkoulz ha ne vern piv n'oant ket evit bezañ lakeat da dalvezout keit ha ma vije an tu krefv gant ar mezerezh gall e Breizh ha na vije ket adsavet amañ ur spered bro en doa difennet ouzh Yann-Vari Perrot skignañ. Kement a rae pennadurezhioù a iliz zo a-du gant ar yezh hag ar vroadelezh er vro-mañ, sañset, ne raent eta nemet evit disammañ ha sioulaat o c'houstiañs-int, ha n'eo ket evit kes da benn mennadoù ha n'oant ket uz anat evit seveniñ gant an doareoù-ober a erbedent; rak gouzout mat a raent e oa bet barnet ar yezh d'ar marz gant ar gouarnamant gall a nac'he ouzhipp pep stumm a emrenerzh, ha doujus evit Kezar e-giz boaz e kemerant e prosez hor broadelezh emzalc'h Pofe Pilot a ziveule an torfad hogen a chome distourm outañ. Hag e tegouezhed an diwazh d'ar pezh-c'hoari heugus-mañ : klask diskouez er brezegenn-garv distaget da gefver obidoù an ao. Perrot, e oa hemañ ur brogerour gall.

Daoust hag sotreat eo bout ken divezh o c'hoapaat ur merzher e-barzh e vez, ma c'houlenn ouzhoc'h ?

13. - Ar re o deus nac'het ouzh emsav sevenadurel Yann-Vari Perrot dont da vezañ un emsav politikel o deus sammet war o choug ur giriegezh gwall bounner. Hep meskañ war-eeun an iliz en un afer na selle ket dres outi e tleent reiñ

d'an ao. Perrot ar gwir da zifenn e vro evel Breizhad ha katolig peogwir e oa se e c'halvedigezh ivez. Daoust ha n'eo ket sotreat da velenion 'zo bezañ kelannerion, skolnerion, skiantourion, micherourion ha politikerion ? Daoust ha nevez 'zo n'eo ket aet ur beleg a eskopti Gwened da zanvez kannad ? Ma vije bet lezet Yann-Vari Perrot da sevel ur gostezenn vreizhat krefv na vije ket emdroet an emsav politikel breizhat evel m'en deus graet a-raok hag e-pad ar brezel ha marvat ne vefe ket bet dic'hoanaget a-walc'h stourmerion vreizhat 'zo evit kredif n'oa silvidigezh ebet da Vreizh nemet er brezel. Daoust ha fellout a ra adarre da dud an iliz 'zo barzhañ ouzh an emsav pep spi a gresk hag a drec'h politikel evit e enkañ ur wech ouzhpenn a-benn ar fin da zibab an hent nemetañ a chome digor d'ar re a fell dezho bezañ estreget pilpouzion e zispleg pezh-c'hoari ar stourm evit ar vro, hent an nerzh, a vennañ lavarout. Daoust ha gouzout a raont petra a zo o kelliñ e spered ar rumad yaouank a ziwan hiziv er bed trubuilhat-mañ ? Salv na vint ket berboell ha dall a-walc'h evit kredif e varvo Breizh didrouz kenañ pa e treistvevo hep ma koustfe dezho an disterañ poan. Forzh penaos n'eo ket o tec'hout a-zirak o c'hiriagezh a Vreizhiz hag a grist-enion e tiskoulmint evit bresañ mad an iliz ur gudenn a rank bezañ diskoulmet hag a vo diskoulmet hep mank dez pe zeiz.

14. - Deomp da zisklariañ adarre perak al labour sevenadurel rik, hini ar gelaouenn "Brd" koulz hag hini ar festoù-noz pe ar beilhadegoù ne c'hell ket ober berzh evit saveteiñ ar yezh. Un abeg splann a zo : emañ er-maez eus ar vuhez wirion ha sirius, peogwir n'eo ket gouest ha ne glask ket a-zevri ar stourmerion evit ar yezh lakeat ar vrezhonegerion da gompren e tle ar brezhoneg bezañ benveg-soñjal ur bobl kenurzhiet, pobl Vreizh. Anat deoc'h, ne zeu an dud d'ar festoù-noz ha d'ar beilhadegoù nemet evit kaout diduamant. Goude ma teufe holl Vreizh-Izeliz d'ar bodadegoù-se - ha pell emamp diouzh ar gont - n'en defe ar pleustrerezh-se levezon ebet war o emzoug pemdeziek, ne c'hellfe ket dreist-holl ar pleustrerezh-se herzel ouzh lenv ar gallekaat a zo rediet gant un emgav politikel, hag arboellerezhel a enstumm o buhez wirion penn-da-benn. Kaer 'zo ober, n'eur ket deut a-benn, a adlavaren, da dennañ eus spered ar re a zo c'hoazh o vrezhonegeañ ez eo "ar yezh" tra ar beizanted : ne c'heller ha ne zleer displegañ nemet peizantachoù.

Per Helias en deus merket mat an dra-se : **feuket** e vez ar brezhoneger boutin pa zispleger e brezhoneg traoù ha na dennont ket d'e vuhez. Ha nevez 'zo em eus meizet penaos e oa drouklouen lod gant radio Breizh dre ma ne glevet ken ennañ peizantachoù Jakez Kroc'henn; re uhel ar yezh,

n'eo ket mui a neb lec'h, a lavare amañ ur Montroulezad. Eveljust e veulan-me Radio Breizh da ober gant ur yezh reizh, kribet mat, lennegel en ur ger; ret eo testeniañ bepred hag e pep lec'h diwar-benn "yezhelezh" ar brezhoneg. Hogen kement-se a ziskouez ivez ez eo hon dlead kentañ brudañ ar brezhoneg evel ur yezh klok, evel yezh an holl Vretoned gweitibunan, evel diazez unded hor broad, evel benveg gwellañ adsavidigezh hor pobl. Setu avat e doare pezh a zo akounac'haet peurliesañ gant ar stourmerion evit ar yezh, ken rannvro-elourion, ken lod eus ar vroadelourion a zo a-walc'h dezho, hafval eo, e ve kelennet ar brezhoneg dre laer, pe e ve graet implij anezhañ er c'hernesoù pe ouelioù seurt-se nemetken. Dre se e koll an dud-se o amzer hag o foan. Rak un huñvre eo, siwazh, krediñ o devo festoù-noz ha beilhadegoù an disterañ levezon war vuhez ha tonkadur ar yezh. Ne vern penaos ne reer ket er bodadegoù se gant ur yezh uhel; dic'houzvez e chom an dud eus an emsav lennegel hag an emsav broadel, ha peurgetket ne roer ket dezho da gompren pebezh pouez he deus ar yezh e buhez ar bobl hag e dazont ar vro. Ha keit ha ne vo ket degaset ar Vretoned da virout o yezh dre ret peogwir ne ouezint mat yezh all ebet, ne zalc'ho hini pe hini anezho d'ar brezhoneg, anez emskiantañ an dalvoudegezh anezhañ. "N'eus ket tu d'ober e-giz-all", emezoc'h, "ne c'heller ket ober pezh a lavarit."

Moarvat. Ha rak-se e lavaran n'eo ket dav dic'hastañ en un emgann a zo kollet an araok.

Qber gant ar brezhoneg en doare-se ne lam ket diouzh spered an dud ez int dispartiet diouzh peurrest ar bed ha digenvezet zoken diouzh ar pep brasañ eus o c'henvroiz gant ar brezhoneg, dres peogwir e teskont dre ar galleg kement a ouzont diwar-benn ar bed ha peogwir n'eo ket anv a zeskiñ ar yezh d'an holl Vretoned gweitibunan, bourc'hiz koulz ha kouer, kêriad koulz ha meaziad, roazhonad pe naonedad koulz ha kemperad pe vrestad. Ma ne garer ket ober eus ar yezh diazez unded ar vro eo tonket dezhañ mont da get rak dilozel a ra kouerion Vreizh-Izel ar brezhoneg, evit darn, dre ma fell dezho en em santout a unvan gant peurrest o c'henvroiz a zo gallekaet endeo. Adarre e lavaran ez eo ar brezhoneg evit ar poent ar ridoch houarn a serr kouerion baoureañ ha koshañ Goueled Breizh en o ghetto. Hag emsav ar yezh renet betek hen gant ar rannvroelourion pe ar vroadelourion pa fell dezho tizhout ar bobl, e-giz ma lavaront, a zo aozet e seurt doare ma ne ra netra evit dilemel ar ridoch houarn-se o vezañ ma'z eo a-walc'h dezhañ ober gant ar yezh hep kelenn an dud diwar-benn an dalvoudegezh anezhi. Rak atav e ren e Breizh ar memes sterc'henn e c'heller saveteañ ar yezh dre ar yezh. (1)

youenn olier

(1) Pa soñjer pegement a dud a zo bet tizhet gant an emsav sevenadurel ha pegen nebeut diouto a zo deut d'an emsav lennegel e c'heller soñjal eo komprenet hag aozet fall an emsav-se.

15. - Kelennadurezh ar yezh ez skolioù zoken ne zougo frouezh ebet hep bruderezh a-du gant ar yezh. Soñjit adarre pegement a dud a zo bet desket dezho lenn ha skrivañ un tammig ar brezhoneg. Lakoomp n'eo ket techet ar pep brasañ anezho dre o natur pe dre o stad da draoù ar spered. Hogen ma vije bet desket dezho evit mat karout ar yezh e vefe deut darn anezho da dommañ ouz al lennegezh dre garantez evit ar yezh. Aes e vefe ober ar gont eus ar re a zo deut da goumantañ d'Al Liamm abalamour d'an emsav sevenadurel, ha gwelot e vefe n'eus hini ebet koulz lavaret. Neuze da betra e talvez an emsav sevenadurel zoken pa vez renet gant broadelourion ? Pet e-touez lennerion "Brezhoneg ar vugale" a zo deut da goumantañ da Walarn ? Ur gentel a zo da dennañ eus kement-se hag houmañ ez eo : ma n'eo ket an emsav sevenadurel evit saveteañ ar yezh war-eeun n'eo ket gouest kennebeut er stumm en deus kemeret da bourchas brogarourion kalonek a-walc'h evit peuzeskiñ ar yezh. Ha setu an heuliadenn : n'eo ket ar brezhoneg er skol na zoken ar skol vrezhonek a zleomp goulen, er skol vrezhonek vroadel ne lavaran ket. An dra gentañ a zo da zeskiñ d'ar Vretoned vihan eo ar garantez evit ar brezhoneg diwar goust ar galleg hen lazh.

Ne vo ket tizhet ar pal diouzhtu hogen ma nac'her en em lakaat en hent ne vo tizhet biken ha kollet e vo ar brezhoneg. (1) Da ziraer ar pal-se hepken e talv ar boan ober bec'h ha n'eo ket strewañ ha forañ hon nerzh en ur barn strivadennoù difrouezh. N'hon eus ket a-walc'h a dud en emsav d'o c'holl da dreñf mein da sac'hañ. (2)

16. - Daoust ha didalvoud kreñn eo bet kement a zo bet graet a-du gant ar yezh ? Evit saveteañ ar yezh, sur mat, didalvoud kreñn eo bet. Diouzh m'en deus al labour sevenadurel dedennet evañ an dud war gudenn Vreizh dre vras, avat, en deus bet un tamm talvoudegezh bennak. Hogen ar bruderezh a zo bet graet en-dro d'ar brezhoneg ne c'hell netra evit gwellañ stad ar yezh war-eeun : an dra-se eo e fell din e ve anavezet gant stourmerion gozh an emsav sevenadurel. Ha zoken en defe gallet ar bruderezh-se bezañ aozet e doare kalz gwell : rak pouezusoc'h eo goumit bepred stourmerion wirion nevez ha brezhonegerion emskiantel - pezh na c'hell ket ober ur bruderezh gwak e-giz an hini a zo bet graet betekhen en-dro d'ar yezh - eget lakaat anat ar gudenn dirak menoz an dud. Forzh penaos eo poent d'an emsav sevenadurel paouz a doullañ an dud o lavarout amañ o vont da saveteañ ar yezh pa n'eo ket gwir.

(1) Eveljust e vo Breizh emren pe tost da vezañ en deiz ma vo tizhet ar pal-se.

(2) N'eus forzh peseurt bruderezh n'eo ket mat. Ober eus Breizh ur rannvro a zo fall. Ober anv anezhi hep muiken n'eo ket a-walc'h. youenn olier
Ne gredan ket er bruderezh ensilet.

17. - Un dra a ranker gouzout : keit ha n'hor bo ket ur stad broadel ne c'hellimp ober netra evit sevel un emsav a engroez a-du gant ar yezh. Hon holl strivadennoù a zle tennañ eta a-dost pe a-bell da sevel ar stad-se. Moarvat e arguo hini pe hini a izili an emsav sevenadurel n'eo ket deut a-benn stad Iwerzhon da adsevel ar yezh. Respont a c'hellan n'eo ket en ur ober 50 vloaz e tigoller an distruj a zo bet graet a-hed kantvedoù, pezh na dalv ket e kreden e ra Iwerzhoniz kement a rankfe bezañ graet evit yac'haat ar yezh en-dro, hag anzav a rin dichipot zoken e rankimp diwall diouzh fazioù a zo bet graet gant Iwerzhoniz en o stourm broadel. Ha da gentañ ar fazi-mañ : manet eo an emsav politikel broadel betek amzer Padrig Piareis un emsav saoznek. E Breizh, avat, emaoamp o vont d'ober hevelep fazi. Abaoe hanter kant vloaz e ren ar ger-stur : er politikerezh d'ar c'hallegerion a Vreizh-Uhel, ar "sevenadur" d'ar vrezhonegerion a Vreizh-Izel, diazezet war an troc'hadur diboell eus Breizh e div rannvro. Kement-se e gwirionez e zo barn Breizh keltiek d'ar marv hep mank.

D'ar vrezhonegerion, ha dezho hepken, eo kemer tonkadur Breizh ponn-da-benn etre o daouarn. Lakaomp e ve savet ur stad e Breizh : ne dalvezo netra ma vez savet gant gallegerion. Diwall a rankomp hiziv ma teu muioc'h-mui a dud e Breizh da veizañ e vo ret sevel ur stad e Breizh, ar Pleven, da gentañ e-unan (lennit e levr: Amzer da zont Breizh) Tud seurt-se avat ne gomprenont ket mat kudenn Vreizh goude ma anzavont ez eus anezhi. Evit ar poent ne c'hellomp ket ivez fiziout kalz er M.O.B. a ra hepken gant ar galleg ha n'an deus ket c'hoazh ur gwir spered broadel daoust d'ar stourmerion broger a zo o labourat ennañ. A zo gwashoc'h : kavout a reer en emsav-se zoken tud hag a zo a-enep d'ar yezh. E-keit-se emañ ar vrezhonegerion o vagañ hufvreoù kozh, pe o c'hortoz Arzur : ne gomzan ket eveljust eus skrivagnerion an emsav lennegel a gas da benn ul labour pounner ha ret-holl.

18. - Kefridi gentañ er vrezhonegerion eta eo lakaat an arigrap war an emsav politikel broadel. Int hepken a zle ren anezhañ, int hepken a zle sammañ ar c'hargoù pennañ anezhañ. Ar gentañ reolenn da lakaat da dalvezout ennañ eo ne c'hellio sternataer ebet bezañ anvet da vat en e garg hep bezañ desket ervat ar yezh vroadel, a-walc'h da vihanañ evit kompren anezhi ha chom hep rediañ bepred e genstourmerion da ober gant ar galleg abalamour dezhañ. Ur reolenn gallet eo moarvat hag emichañs e vo dav asantif e vo torret gwach a vez abalamour d'ur brogarour gwirion ha barrek, dic'houest avat da zeskiñ yezhoù.

Un dra diarvar eo avat, ez eo didalvez d'ar vro ur strollad politikel gallek pe a ra pep pouezusañ eus e labour e galleg.

19. - An hevelep reolenn a ranko bezañ lakaat da dalvezout er strolladoù "sevenadurel" hag e Kendalc'h peurgetket. Ur vezh eo soñjal n'eus nemet galleg gant renerion ar strollad-se e-kerzh o emvodoù : setu tud a lavar e stourmont evit ar yezh ha ne implijont nemet ar galleg bewach m'o devez tro da gejust. Daoust ha ne vo ket tamallet dezho bezañ pilpouz-ion a-benn ar fin ? Ha c'hoazh ne fell ket din gouzout peseurt yezh a gomzont er gêr ouzh o bugale.

Kavout e ra din ivez e tleo Kendalc'h bezañ kempennet en un doare all ma fell dezhañ bezañ efedus. Arabat e vefe, war va men, degemer ennañ kostezennoù a zo stag a-dost pe a-bell ouzh kenurzhadurioù ha n'eo tamm ebet o fal stourm evit Breizh. Lavaret em eus endeo e oa touall krediañ e vije tu da c'hounit ar c'hanurzhadurioù-se a-vloc'h a-du gant broadelzh Vreizh. Anv a ran amañ eus Ar Falz kenkoulz ha Bleun-Brug. Ar gwellañ eo divodañ ar bagadoù-se a rann an Emsav hag a wari ar mennad anezhañ. Nep-tu e tle bezañ an Emsav peogwir ez eo distag ar palioù anezhañ diouzh re an Iliz koulz ha re ar P.C.F.

Kement-se ne dalv ket n'o deus ket ar gwir ar stourmerion da empennañ natur ha kefridi o bro en doare-mañ-doare en amzer-da-zont, ha ma a gred va-unan da heul Kalloc'h ha meur a hini all ez eo ar sevenadur Kristen doareet diouzh tro-spered ar Vretoned, hengoun istorel hor bro ha temz kevredigezhel hor pobl. Hogen en ur Vreizh emren e c'hellio ar Vretoned difenn o meizadur eus Breizh e pep frankiz hag hervez an seundez. Lavaret em eus endeo e vo Breizh stummet ha speredegazh diouzh hini ar re o devo stourmet ar gwellañ d'he dieubif. Moarvat ez eus eno ur riskl evit ar re a lake o menozioù diwar-benn politikerezh diabarzh ha kevredigezh a-us da bep tra hogen d'an dud-se eo gouzout ha fiziañs a-walc'h o deus enno o-unan evit sammañ ar riskl-se, pe ha kavout a reont gwel dilezel Breizh kentoc'h eget lakaat war var o menozioù a-zivout prederouriezh pe relijion ? Ne c'heller ket ober kant tra war un dro. Ret eo dibab.

"Kendalc'h" nevezet n'an devo ket da blediañ gant kelennadurezh ar yezh dre vres. Diagent em eus merket e oa didalvez lakaat muezhiañ e Paris lezennoù ha na glotont ket gant manoz an dud er vro-mañ. Ne vezn pegen diglok e oa lezenn 1951 e vije bet tu da dennañ kalz muioc'h diouti ma vije bet pobl Vreizh emskientek. Hogen nac'het o deus a-vepred harperion al lezenn-se stourm a-zevri evit adsevel ar spered bro e Breizh hag int o rondoniañ e oant Gallaoued ha Gallaoued vat, ne oa ket dav stourm a-enep d'ar yezh a wask hon hini.

Ha setu an disoc'h : lezenn 1951 ha deus pouzhasat d'ar marerezh gall un digarez ouzhpenn da nac'hañ astenn kelennadurezh ar brezhoneg,

peogwir n'o deus ket ar Vretoned tennet diouzh al lezenn an implij o defe dleat tennañ. Ha n'o deus ket graet peogwir n'eo ket bet gouest paotred ar Falz hag ar re all, da ziskouez d'ar Vretoned na oa nemet un dra a verne evito er c'hantved-mañ : saveteañ o broadelezh dre ar yezh hag asurifiñ dazont o bro dre ar stad.

"Kendalc'h" a zle tennañ ar gentel a zo da dennañ ur wech ouzhpenn ha bezañ dreist-pep-tra ur benveg a zihun broadel. Moarvat ne vo ket hep sikour stourmerion daer ha na stummer ket dre ranezenniñ diziwezh e sigur yezh hag istor Breizh, dre lakaat splann hag enat ez eo Breizh ur vro a zle kaout gwirioù ur vro, ne lavaran ket.

Lod a vo feuket moarvat; ar re-se avat, ne c'hounezor biken hag o c'holl a rankor un deiz bennak. Gwalloc'h eo ur stourmer mennet start eget dek heulier gwak ha na ouzont mat na pezh a soñjont na pezh a vennont.

20. - Stourmerion an emsav sevenadurel n'int ket da vezañ diforc'h diouzh re an emsav lennegel. Ne vo ket ar re-mañ stourmerion vat anez bezañ peurzasket o yezh hag an dra-se ne raint ket hep kemer perzh ar vuhez lennegel vroadel. Pal an emsav sevenadurel eta eo brudañ yezh ha broadelezh Vreizh dre vras moarvat, hogen ivez heñchañ ar re varrekañ eus an danvezioù-stourmerion a gavint war-du emsav Al Liamm - rak kefridi an emsav-se eo bezañ kelennet ar Vretoned vroger. Faziñ a re ar re a gred ez omp "dilettante".

21. - Ar stourmerion evit ar yezh stummet gant an emsav lennegel broadel a c'hello ivez diouzh ma plijo dezho treif war-du tachennoù all. Kont a zo bet abaoe daou pe tri bloez eus ar c'hendrev a zo da sevel e Breizh. Un dra a-bouez bras-kanañ eo e ve kaset ar mennad-se da benn. Rak n'eus nemet un tu da lakaat hor yezh da drec'hiñ : ober implij anezhi evit ar vuhez wirion, evit an traoù fetis, hag en degouezh-mañ war dachenn an arboellerezh. Bewech m'en em vod ar Vretoned evit marvailhat pe kanañ e brezhonag, pell diouzh ar bed, en ur minic'hi a ziwall o hufvre, e kollont o amzer. Bewech ma vrezhonegont evit sevenañ ul labour resis ha fetis, politikel, bruderezhel, kelennerezhel pe arboellerezhel, neuze e kasont o broadelezh war-du an trec'h. Tachann an espernouriezh avat, a zo unan eus ar re bouezusañ ar bed a-vremañ. Lavarout a rin hepken n'eo ket dav e ve ar c'hendrev stag ouzh al labour-douar : ijinerezhel e c'hell bout kerkoulz all, diazezet war ar c'henober hag ar c'hendibab. An dalc'h, en ur ger, eo krouiñ kelligoù kavredigezhel bev

diazezet war ar yezh, tiegezh, skol, kendrev, strollad. Hag adarre e lavaran : bodañ brezhonegerion ha n'int ket staget kenetrezo dre un eus kevredigezhel start ne dalv ket ar boan.

Moarvat al labour-se holl - ken hini an emsav lennegel, ken hini an emsavioù all - n'eo nemet al labour prientif d'al labour meur a zo dihunif ar spered bro e Breizh ha sevel ar stad broadel a beurechuo al labour prientif-se.

22. - N'ouzont ket a-hend-all peseurt barr follentez a zo kroget e lod eus ar re a stourm evit ar yezh ar vro-mañ, dreist-holl abaoe diwez ar brezel diwezhañ. Deut int da gredif e c'halle ur yezh bevañ er c'houmoul, distag diouzh ar vro pe ar stad, pe ar bobl kemeret en he fahz. Ha padal e rankfe gouzout ar Vretoned na wallej ket d'o stad danvezel zoken ma ne ra ket berzh ar yezh, a-unan gant ar spered bro. Gwelout a reomp hiziv an deiz Bretoned hag a oa diseblant betekhen ouzh Breizh, o tizoleif ez eur direizh e-kafver hor bro, pe, ma karit, ez eo gwasket hor pobl. Lennit lavr ar Pleven a zo o paouez bezañ embannet. Hogen an nevez vrogerourion-se evel an holl re a zo douget da deurel fed ouzh ar gudenn arboellerezhel nemetken e Breizh a rank soñjal ne c'hello ket bezañ diskoulmet hounnezh keit ha n'o devo ket ar Vretoned skiant o c'henvad a Vretoned, ken n'o devo ket santet ez int ur gumuniezh.

Evit ar poent, peseurt foeltre a re da dud ar werin a ve 3 000 dan dilabour e Brest, ma kav ar re all labour o tivroañ ? Ne glaska ar Vretoned displegañ o bro da vat nemet en deiz ma nac'hint divroañ ha m'o devo komprenet ez int ur bobl, dezhi interestoù diforc'h-mat. Hogen ma ne c'hall ket ar yezh bevañ hep spered bro, ret eo lavarout ez eo ar yezh dres ur benveg dispar da adsevel anezhañ ivez. Evelse n'eus spi abet d'ar Vretoned da welout o stad danvezel o wellaat hep ma ve trec'h o yezh.

23. - Biskoazh n'eo en em gavet Breizh e brasoc'h argoll eget er c'hantved-mañ. Beteken hon eus kollet hor frankiz. Emaomp avat war var da goll hor yezh hag en diwez hon anv a bobl zoken. Ma ne zeuomp ket a-benn da sevel ur stad broadel e-kerz an 10 pe ar 15 vloaz a zeu, ez ay ar yezh da get a-grenn ha da vat, a-gevret gant ar spered bro, hag a-benn 100 vloaz ne vo mui gouezet nemet gant un nebeut tud halennek e vo bet komzet brezhoneg diagent el ledenez-mañ. Piv a oar e Gwennan pa e reter Gwened e oa

komzet brezhoneg eno kant pe kant hanter kant vloaz zo ? Den.

Na gomzomp ket eus studioù keltiek er Skol-Veur : sellit e pebezh stad emaint hiziv ma klevet c'hoazh kalz a vrezhoneg a Goueled Breizh. Ar wirionez eo n'eus a studioù keltiek sirius nemet en-dro d'Al Liamm hag an emsav broadel. Ha mervel a ray an emsav broadel ivez eveljust ma ne dizh ket adenaouiñ ar spered bro hag adsevel ar stad breizhat. (1)

24. - Evit tizhout ar pal-se e tle an emsav tizhout an unded; an unded-se ne c'hell bezañ graet nemet en-dro d'ar vroadelouriezh, da lavarout eo en-dro d'an emsav brezhonek broadel. Kement-se a dalv peurgetket e tleer lezel a-gostez tabutoù didalvez, evel an hini a zo bet stizet gant enep-brogarourion pe kostezennourion, evit abegoù a bolitikerezh diabarzh pe abegoù personel nemetken. Setu ugent vloaz e-pad ar skritur peurunvan : 80% eus ar skridoù embannet e kerzh an ugent vloaz-se a zo bet embannet e KLTG. Barnet eo ar prosez eta. Bez e c'heller moarvat aotren skrivañ e KLT da neb a garo. Hogen ne c'hell ar brezhoneg kaout nemet ur skritur a-gefridi, an hini nemeti a gлот gant hengoun KLT hag hini Gwaned, hag a glasked sevel abaoe derou ar c'hantved-mañ.

Un talbenn unvan, ur politikerezh-spiswel, taer ha poellek, diazezet start, anez degemer an divizoù-mañ ne c'hell ket an Emsav ober e vad eus emdro an emgav istorel a zo o kas herrekoc'h-herrekañ Europa war-du an dreist- stad kevredel ma tle hor bro bezañ un ezel leun-wir anezhaf.

Rosko, miz Maurzh 1961

oooooooo
ooo
o

(1) Manoz ar C'hallaoued teknokrat diwar-benn Breizh eo ober eus hor bro un dachenn labour douar a vo gonezet gant 5 pe 6 gwech nebeutoc'h a dud ur wech ma vo kaset da benn mekanikadur al labour-douar. Hag a-hend-all un dachenn hafvif ha bevañ diwar e leve, e-giz ar "Côte d'Azur". Goude bezañ dic'hastat e-pad e vuhez e broioù du krugellmerienhefval an ijin-erezh e tauy ar micherour pe an implijad da 55 bloaz da echuiñ e vuhez a mirvañ an natur e-giz Breizh pe nod ar mor kreizdouarek. Empennadurioù seurt-se a gaver e-barzh levrioù Saucy, da skouer, diwar-benn arboellerezh. Ur poblañs nevez a gozhidi a ray e annez e Breizh, ha moarvat e vo kollet neuze betek an anv a Vreizh ha ne vo mui nemet hendraourion da c'houzout e vo bet komzet ur c'hantved arak ur yezh estreget ar galleg, - pe alamaneg, piv 'oar !

A. Even

DEŃVED GOUEZ HA DEŃVED DOŃV

Tri, eme an Drouiz-Meur e Gorsedd Digor, a zo un niver bardik; daou avat a zo un niver breizhek, niver an Emsav da vihanañ. Div vanniel ha div gêrbenn hon eus; daou strollad broadel hon eus bet, daou C'hoursez, div iliz keltiek, daou emsav drouizel - hag evel just div yezh lennegel ha daou reizhskrivadur evit pep hini. D'ar re eus hor c'henvroiz hag a vije dare d'ober goap ouzh Kongoiz e c'hell ar re-mañ respont : an treust en ho lagad, breudeur.

Ne fell ket din distreiñ adarre war gudenn an doare-skrivañ : heuet on ganti. Un dra hepken a lavarin, o vezañ n'eus ket bet pouezet a-walc'h warni, a gav din. Ar gudenn nemeti a zo houmañ : pe e fell deomp kaout ur yezh lennegel hepken (1) - ha neuze doare-skrivañ 1941, gant e sioù ha ne nac'han ket, a zo c'hoazh an hini gwellañ; pe ez omp kontant da gaout div yezh skrivet, KLT ha

arzel even

(1) Ne fell ket din lavarout ez eo difennet d'ar skrivagner mirout d'ar yezh a skriv liv e rannyezh c'henedik. Er c'hontrol.

gwenedeg, ha neuze da betra mont da c'hoari gant doare-skrivañ an Emgleo, a oa mat-tre evit ar KLT ? An daelenn forc'hek-se, d'am meno, a zo trawalc'h da gondaoniñ "doare-skrivañ ar Skol-Veur" - evit an dud ha n'int ket dalc'het pe dallet gant ar "raison d'Etat", evit komz evel an Ao. Gourvil.

Hogen ne deo an doare-skrivañ nemet un arouez - ur vanniell adarre. Arouez ur rannidigezh c'hrevusoc'h etre daou venoz a-zivout ar brezhoneg, etre daou rummad tud a anvin, evit bezañ berroc'h, "deñved gouez" ha "deñved doñv", en ur amprestañ an anvioù-se digant Roparz Hemon. Klaskomp diskrivañ an div ouenn-se. An "deñved gouez" a zo holl gwitibunan broadelourien. N'eo ket da lavarout ez int holl "stourmerien"; n'eo ket da lavarout kennebeut e vefent a-unvouezh bepred war gudennoù a bolitikezh hag a relijion; hogen akord int da vihanañ war ur poent : an holl zishevelderioù-se a zo a nebeut a bouez e-keñver ar pezh a ra o unvaniezh, ar menoz broadel. Hag ar menoz broadel, war dachenn ar yezh, a zo kement-mañ : ur yezh vroadel eo ar brezhoneg, dezhi an hevelep gwirioù ha dleadoù hag ar yezhoù all, bras ha bihan. Gwirioù : bezañ anavezet ez-ofisiel, kelennet e pep derez (evel yezh an deskadurezh, ha n'eo ket evel danvez) hag implijet e pep degouezh er vuhez pemdeziek, e kêr ha war ar maez, gant tud uhel hag izel, gant ar mererezh-stad hag ar mererezh lec'hel. Dleadoù : en em varrekaat da zerc'hel ar renk-se, da ziskleriañ ezhommoù materiel ha spereidel ar vuhez vodern, da zisplegañ ul lennegezh dellezek eus ur vroad.

N'eo ket ken unvan gouenn an "deñved doñv" - strange bed fellows ha maz int. Penaos en em zibab ar gatoliked en o zouez evit kaout peoc'h gant o c'houstiañs en ur genlabourat gant komunourien; petra a soñj ar gomunourien eus jakobinelezh o strollad; petra a ra er gale-se un nebeut tud hag o deus gouzaitvet e 1944 abalamour d'o menozioù breizhek - kement-se n'eo ket va afer.

Un doare unvaniezh o deus evelato, hogen unan nac'hel hepken : an eneberezh d'ar menoz broadel. Breizh n'eo ket - pe n'eo ken - ur vroad; ar brezhoneg n'eo ket ur yezh vroadel, hogen ur yezh rannvroel; m'he deus "gwirioù", ne dle ket ar gwirioù-se ober gaou ouzh ar yezh vroadel. Ret eo he c'helenn er skolioù, hogen evel danvez hepken ha bepred hep aloubiñ tachenn ar galleg. Diskianterezh ha koll-amzer eo klask skrivañ e brezhoneg lennegezh uhel ha bremanek, nebeutoc'h c'hoazh skridoù a ouiziegezh hag a brederouriezh : ne vo ket "brezhoneg", ha bez' hon eus bepred ar galleg evel yezh a sevenadurezh.

Bremañ, Preder a zo ur gelaouenn evit an "deñved gouez", ha ne vo ket ezhomm lavarout muioc'h amañ diwar-benn ar re-se. Ra ouezo hepken an "deñved doñv" - ar re anezho a vo difur a-walc'h evit lenn ar pennad-mañ - n'eus ket pennoù foll ha dispac'herien eus o breudeur gouez gwitibunan. Met ret eo deomp ivez meizañ n'eo ket an holl "deñved doñv" krenerien ha liperien-seulioù. N'eo ket bepred kennebeut diwar ziouiziegezh ha leziregezh e nac'hont implijout ar brezhoneg evel yezh a sevenadurezh hag a ouiziegezh. E 1943 ez embannas SAV pennadoù ma roe an Ao. Falc'hun enno un tafva eus e gavadennoù war dachenn ar soniadouriezh. Lennet e vezent aketus ganin, daoust din bezañ yaouank-flamm d'an ampoent (pe marteze abalamour d'an dra-se). En trede pennad (niv. 28) e verzis diouzhtu ur c'henn anat er yezh : c'hwek ha naturel e oa, brezhoneg skiantel ha koulskoude brezhoneg bev, ha yezh ar pennadoù kentañ, keñveriet ganti, a seblante reut, pounner, artifikel, "chimik" en ur ger. Disklêriadur ar c'henn-se a oa roet deomp ivez : an daou bennad kentañ a oa bet skrivet e galleg ha lakaet e brezhoneg gant D. Mablern, hogen aet e oa hennezh da bell, ha ret e oa bet d'an Ao. Falc'hun skrivañ ar peurrest rag-eeun e brezhoneg - hag e daol-esa a oa bet un taol-mestr. Quod erat demonstrandum : m'en dije karet an Ao.

Falc'hun, e vije deut da vezañ hor gwellañ skrivagner skiantel (1). Gwell eo bet gantañ, e-lec'h gouestlañ e vuhez d'ar brezhoneg, ober imbours'hioù skiantel e galleg diwar-benn ar brezhoneg. N'hen tamallin ket dezhañ; n'on ket eus ar re a lavar n'he deus ket ar Republik ezhomm gouizieien. Daoust ha ret e oa dibab avat ? Frañsez Vallée a zo bet, kenkoulz ha Roparz Hemon bremañ, brezhonegour gouiziek ha servijer ar yezh war un dro. Ya, met an eil a zo chomet bepred er-maez eus pep tra ofisiel, hag egile n'en deus kavet labour war dachenn ar brezhoneg nemet en estrenvro ! Ernault e-unan, skolveuriad ha ma oa, a oa bet roet dezhañ ur gador (pe ur skabell) vrezhonek e.... Poitiers !

An Ao. Falc'hun, forzh penaos, a ranker sellout outañ evel un direolder e-touez an "deñved doñv", a gav diaes skrivañ ha diaesoc'h c'hoazh komz e brezhoneg diwar-benn traoù un tammig a-us da brederiennoù ar vuhez pendeziek. Doue 'oar n'eo an Ao. Gourvil na diouiziek na lezirek; ma, lennit pennad M. Glanndour war Barr-Heol diwezhañ : skrivet en deus an Ao. Gourvil dezhañ evit respont d'e bennad skridvamerezh - ha skrivet en deus e galleg (2). Abeg an emzalc'h-se n'eo ket hepken an diaester - gwirion - a gaver en ur implijout evit menozioù difetis ur yezh chomet difraocst e-pad kantvedoù. Da dud evel an Ao. Gourvil, ha da galz brezhonegerien dizesk (ya, me a lavar, dizesk e-keñver o yezh, pegen gouiziek bennak e c'hellont bezañ a-hend-all), ober gant ar brezhoneg da venveg a sevenadurezh uhel n'eo ket hepken un huñvre diboell: un doare disakradur eo ivez. Ur "Sot-Breton" evel don ne vo birviken, aon am eus, evit meizañ an dro-spered-se. Din da welout, koulskoude, ez eus enni teir elfenn,

(1) P'emaon ganti, e kontin un istorig all, daoust n'eo ket tre war ar memes poent. E 1947 e voe moulet war ar gelaouenn Kad ur varzhoneg hir gant G.B. Kervezhioù, Nemeton: un nebeut deizioù goude e resevas en oberour ul lizher hegarat e brezhoneg, o veulif kaerder an oberenn ha reizhder ar yezh. Al lizher a oa sinet F.Falc'hun.
 (2) Un istorig all c'hoazh. Pa voe dalc'het ar Goursez e Tregastell e miz Ebrel 1950 e voe un "noson lawar" e sal-degemer an ostaliri m'edo Kembreiz o lojañ. Deut e oa an Ao. Gourvil d'an abadenn-se, ha goulennet e voe digantañ treiñ komzoù ar c'hanaouennoù kembraek ha reiñ un nebeut diekleriadurioù diwar-benn ar sonerezh kembraek, h.a. Kregiñ a reas d'hen ober e brezhoneg, hogen a-c'houde pemp munutenn e kendalc'has e galleg, daoust d'ar garmadennoù "Brezhoneg, mar plij !" a zeue gant tud yaouank "diseven".

arzel even

kemmesket hag o c'hoari an eil gant eben. Da gentañ, "kompleks" ar brezhoneger a-vihanik a zo bet ret dezhañ deskiñ ur yezh all er skol ha gounit drezi kement tra a oar. Neuze ez eus ur garantez hiraezhus ha trivliadel evit yezh ar c'havell : e galleg eo bet tapet an deskadurezh, e galleg e vez gounezet ar bara, hogen ar brezhoneg a chom stag ouzh eñvorennoù hag huñvreoù ar vugale-aj, ken c'hwek da bep hini ac'hanomp; na ve ket e vent saotret. Ha war ar marc'had e teu alies ar rannyezhoù pe ar folklorour da lakaat e fri en afer : arabat eo unvaniñ, distrujañ rannyezhoù hag isrannyezhoù prizius; arabat eo ivez treiñ da venveg sevenadurezh "kêrel" ha difetis ur yezh hag a zo bet a-viskoazh organ ur sevenadurezh "maezel".

An "nevezianted" a zo hgozik holl diouzh tu an "deñved gouez", hag aes eo da gompren : ar brezhoneg n'eo ket bet roet dezho evel o herezh, deut int dezhañ dre garantez, pe gentoc'h ne deo o yezhkarouriezh nemet un dremm eus o brogarouriezh, ha fellout a ra dezho e vije ar brezhoneg ur yezh par d'ar re all war bep tachenn. Hogen n'eus ket "nevezvrezhonegerien" hepken en hon touez, a-drugarez Doue ! bez' ez eus ivez kalz brezhonegerien a-vihanik, kozh ha yaouank, trec'het ganto ar "c'hompleks" a venegen bremaik. Tra heverk : ar re-se o deus alies beajet pe zoken bevet en estrenvro, gounezet deskadurezh dre yezhoù estr eget galleg (saoznek pe alamaneg, peurgetket) (kv. Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh), ha bruzhnet dre-se ar c'hevataladur "deskadurezh = galleg" hag a zo gwriennet-don e spered ar vrezhonegerien all, hep gouzout mat dezho. Daoust pegement a zoujañs hag a garantez o deus ouzh an amzer dremenet e sellont ouzh ar brezhoneg, dreist pep tra, evel yezh an amzer-da-zont, ha teurel a rafent a-walc'h d'o c'henseurted "doñv" galvadenn Tangi Malmanche: "Bretoned, komzit nebeutoc'h eus yezh kozh ho tadod, ha komzit muioc'h trefoedach nevez ho puzale !"

arzel even

Ma, bezet pe vezet, rannet omp da vat, ha ne welomp ket o tont diouzhtu an amzer na vo ac'hanomp nemet un tropellad. N'eo ket un dra nevez; a-viskoazh ez eus tabut etre paotred ar "brezhoneg du-mañ" hag ar re all, hogen diwazh, donoc'h eget biskoazh e seblant ar rannidigezh bezañ. N'eo ket ar rannidigezh -se, enni hec'h-unan, un dra fall e pep keñver. Sav, a-raok ar brezel, a oa en e zoare ken dudius ha ken talvoudus ha Gwalarn - ez leal, un toullad mat a skrivagnerien a genlaboure d'an div gelaouenn. Abaoe ar brezel hon eus gwelet Brud, a oa he dezo ivez, sañset, reiñ d'ar brezhoneg ul lennegezh "vev". Maro eo bremañ. Ne leñvin ket dezhi. Ul lec'h a vije bet dezhi e-kichen Al Liamm, evel m'en deveze Sav ul lec'h e-kichen Gwalarn - ma n'he dije ket klasket "stourm war an tu-enep".

Bremañ, daoust hag ez omp peurzidamall, ni, deñved gouez ? Ma kredet hon enebourien, n'hon eus nemet dismegañs evit ar bobl ("des cérébraux qui méprisent foncièrement le peuple"). Peadra da vous-c'hoarzhin. Piv ar re o deus klasket (hep ampartiz a-wechoù marteze, hogen gant youl-vat bepred) embann levrioù evit ar bobl, evit ar vugale dreist-holl; piv ar re a zesav o bugale e brezhoneg (hag int-i bet desavet e galleg gwall-alies); piv ar re o deus strivet hag a striv c'hoazh evit kelennadurezh ar brezhoneg, n'eo ket hepken dre c'henou hogen dre ober ha skouer - piv, ar "re ouez" pe ar "re doñv"? Setu amañ ur c'hlaser-bara truilhennek ha laouek; piv a ziskouez karantez outañ, an hini a ginnig e walc'hiñ hag e wiskan, pe an hini a lavar dezhañ : "Chomit evel m'emaoc'h, va den mat; c'hwil a zo ur patrom dispar d'hon arzourien" ? Gwir eo ez eo bet bepred ar brezhoneg yezh ur sevenadurezh kourerien; foll an hini a zisprizfe ar sevenadurezh-se. Met, foll ivez an hini na wel ket ez eo tonket da vervel, petra bennak a raimp. Ma vije stag ar brezhoneg, dre e natur, ouzh ar sevenadurezh-se, e vije barnet d'ar marv ivez - ha setu end-eeun pezh a gred al lodenn vrasañ eus ar vrezhonegerien, kenkoulz hag

arzel even

enebourien ar yezh. Hogen n'eus liamm anienel ebet etre ur yezh hag ur stumm sevenadurezh. Diwall ur sevenadurezh broadel e nevez-varbariezh hor bed a zo evel just ur gudenn sirius-kenañ, hogen balzamiñ an amzer-dremenet n'eo ket un diskoulm d'ar gudenn-se.

Un dra koulskoude a zo c'hoarvezet er bloavezhioù-mañ ha n'heller ket nac'hañ : digempouezet eo al lennegezh, re boumner diouzh tu ar skridoù "sirius". Bez' hon eus zoken teir c'helaouenn - Preder, Skol hag Hor Yezh - gousstlet penn-da-benn d'ar studioù nann-lenneg, ar pezh ne oa bet gwelet biskoazh betekhen (1). Re nebeut avat a romantoù, barzhonegoù, pezhioù-c'hoari, zoken "uhel". Mar deo un arouez eo deut ar brezhoneg d'e oad-gour, ez eo ivez ur brouenn emañ en arvar, goude bezañ bet e-pad kantvedoù trefodach ur milion a gouerien, da echuiñ e vuhéz evel sañskriteg ur c'hant a arc'hveleien. Hag e-keit-se emañ brezhoneg ar bobl o tisleberin muioc'h-mui, ha bemeiz emañ an islonk etre an div yezh o tonaat. Ha dres, aze 'mañ an dalc'h : n'eo ket hor fazi-ni hepken. Peurvarv eo bremañ (ne oa ket c'hoazh a-raok ar brezel) rummad ar vrezhonegerien damzesket, tud eus ar bobl o doa desket lenn ar brezhoneg, e mod pe vod, hag a c'helle kemer plijadur e Kroaz ar Vretoned, Breiz, pe zoken Kannadig Gwalarn ha levrioù aes embannet gant Gwalarn - traoù eeun ha skrivet mat evelato. Evel maz eus bet diskouezet mat gant Y. Olier, lavarout hiziv an deiz e skriver "evit ar bobl" a zo en em douellañ : anez skrivañ e trefodach ur barrez (ha neuze ne vezor komprenet nemet gant tud ar barrez-se...lakaet e oufent lenn), e ranker mui pe vaez implijout gerioù ha stummoù ha n'int ket "poblek". Ha ne vezor ket lennet kennebeut : gwelit Brud, gwelit ivez, diouzh hon tu-ni, enñvorennoù Jarl Priel, a vije peurverzh et Bro-Dreger nemetken hanter-kant vloaz 'zo.

arzel even

(1) Ar pèp heñvelañ ouzh Preder a oa Galv, hogen lennegezh a embanna ivez, ha ne vern penaos e voe berr e vuhéz.

N'eo ket da lavarout koulskoude ne dlefemp ket "skriñ evit ar bobl". An dra gentañ d'ober avat eo reiñ d'ar bobl an tu hag ar c'hoant da lenn ar pezh a vo skrivet eviti, ha da zigentañ-holl, ober ma vo sellet ouzh ar brezhoneg komzet evel ur yezh da vezañ enoret, ur yezh da vont drezi hep mezh da gement hini a c'hell he c'hom-pren, da vezañ implijet gant tud yaouank ha bugale kenkoulz ha gant tud kozh - ha setu perak ez eo pouezus-dreist an "emsav-lavar" a gomzer kalz anezhañ bremañ. Ma ra berzh an emsav-se, ha ma teuer a-benn da reiñ adarre da vrezhonegerien ar bobl ar c'hoant da lenn brezhoneg evit o flijadur, e vo gallet stankañ evit mat ar boulc'h a zo etre al lennegezh uhel hag ar pezh a chom eus al lennegezh-werin, ha zoken, tamm-ha-tamm, ar boulc'h brasoc'h c'hoazh a zo etre ur yezh-pobl o vreiñañ hag ur yezh lennegezh hag a c'hellfe alies - koulz eo hen anzav - bezañ eeunoc'h hep koll tamm eus he glanded.

Piv a c'hell sevel ar skridoù-se ? N'eus ket diouer a skrivagnerien "vev" en hon touez; hogen evit an "deñved doñv", ar skrivagnerien-se n'eus ket anezho (nemet Jakez Riou, a zo bet fur a-walc'h evit mervel abred; ha c'hoazh e taver gant evezh war e venozioù politikel). Petra 'sinifi an enebiezh-se ? Daoust ha n'eo ket, ouzhpenn euzhus, ken diskiant, ken di-ster, maz eus peadra da c'hoarzhin ha da leñvañ war un dro ? Diouzh un tu, skrivagnerien a bep seurt, darn anezho ken poblek ha tra; diouzh an tu all, skrivagnerien a fell dezho bezañ poblek hepken, a rank avat implijout ur yezh ha n'eo ket bepred yezh ar bobl, o vezañ n'eus tu ebet d'ober a-hend-all. Neuze, perak en em zrailhañ tra m'emañ ar brezhoneg o vervel ? Ne vevo ket ar brezhoneg ma ne vez ket roet boued-spered d'ar bobl; ne vevo ket kennebeut ma ne zeu ket da vezañ ur yezh par d'ar re all. Labour a zo evit pep hini; en em

unanomp, pe anzavomp frank n'eus d'ar gasoni-se nemet abegoù politikel, pe, divalavoc'h c'hoazh, abegoù a warizi bersonel. Ne lavaran ket ez omp-ni, "deñved gouez", gwelloc'h eget an "deñved doñv", hogen sur on ez eus nebeut-kaer ac'hanomp ha na vijent ket prest da zouarañ ar vouc'hal-vrezel ha da genlabourat ganto - gant ma karjent paouez da noazhout ouzhimp ha da ziskar hor bern-mein.

Unan hepken a daou dra a c'hoarvezo en amzer-da-zont - e-pad buhez hor remziad marteze. Pe e varvo ar brezhoneg, ha neuze e vo fin d'an tabut, pe e vevo hag e vleunio - dre labour an holl.

oooooooo
ooo
o

P. Denez

UR SELL WAR PEMZEK BLOAVEZH :

1945 .. 1960

E 1944-45 he deus anavezet Breizh un heskinerezh seurt na oa ket bet abaoe amzer ar chouanerezh. Istor an heskinerezh-se a zo da ober. Krediañ a ran emeur ouzh hen ober. Met un istor diases eo. N'aus ket kalz a zihelloù. Ar c'hazetennoù - a-du pe a-enep - setu c'hoazh an andon fonnuseñ. Un nebeut skridoù-efvor a zo bet savet, a gredan. Re nebeut. Ha neuze, pell c'hoazh e chomint prevez, ar pezh a zo mantras. Lizheroù, ne zle ket bezef kalz anezho: ar bloevzhioù trubuilhet-se a zo bet ur walenn evit dihelloù-istor an emsav breizhat, gant ar boestadoù, ar sac'hadoù lizheroù a zo bet davet, distrujet, laeret. Hag an dud, ar re a zo bet a-barzh an darvoudoù zoken, a zeu da zi-soñjal munudoù zo : testoù talvoudus a varv. En un doare, n'eo ket sousezhus na oufe ar re yaouank netra, pe dost, war ar prantad-se, nemet an traoù di-valav a zo bet kontet gant hon enebourien. Ha, koulskoude, ez eo trist na oufent netra. Pet studier, e Roazhon, o vont da vale en Thabor, a oar ez eus bet fuzuilhet eno, e toull an "Ifern", broadelourien vreizhat, hag emañ o vale war zouar santelaet gant o gwad ? Pet den a ya da lakaat, bep an amzer, un torkad bleunioù war bez Leon Jasson, hag a varvas ken laouen evit Breizh ? Pe war vez Mersel Kolin, a guitaas an toull-bac'h evit ar sana, hag ar sana evit an toull-bez ? Pe war hini Gi Vissault de Costlogon, hag a respontas, pa voe barnet d'ar marv: "Un enor eo, Aotrounez", hag a nac'has astenn an dorn da c'houlenn truez ? Iwerzhoniz a zo lorc'h enno gant o merzherien, gant o

per denez

"zraitourien" : Breizhiz, gant an hevelep doug koulskoude da lidoù ar marv, a chom dinden gazell-ge, mezhek : n'o deus ket hejet c'hoazh diwar o spered samm ar gevier gall.

Pemzek vloaz war-lerc'h, ne c'heller ket lavarout, ez-resis, pet broadelour a zo bet fuzuilhet, diskaret, toullbac'het, merzheriet : gwalit ar rummedoù levrioù a zo war vrezelioù Iwerzhon, war ar Resistefs, war emgann ar Yuzevien, war stourm Al Djezaïr. Evit hon emsav, evit hor strolladoù, netra pe dost. Sellout a ran ouzh kazetennoù kozh : e 1952, ar Commission Bretonne d'Enquête, diazezet en Iwerzhon, a embanne anvioù 45 den marv evit Breizh. Diglok-tre e oa ar roll, a greden. Hag, a-hend-all, n'ouzon ket petra eo deut da vezañ labourioù ar Strollad-Enklask-se. E 1947, pa ne oa ket echu an heskinerezh, ez embanne An Aimear Cheilteach e oa bet 60 den barnet d'ar marv, 75 d'ar galeoù da viken, 82 d'ar galeoù evit ur prantad bihanoc'h eget 20 vloaz, 210 da gastizoù toull-bac'h ha 140 da goll o gwirioù kaodediz. Reizh a-walc'h e tle bezañ ar sifroù-se, nemet an hini diwezhañ, hag a zo kalz kalz re izel.

An darn vrasañ eus an dud a oa klask warno a c'hellas tec'hout. Kredif a ran avat ez eo un deud hag ur reizhder dianzav an tamall divalav a zo bet graet gant un den na oa ket enep-broadelour a-pad ar brezel, met a zo deut d'hen bezañ abaoe, o treiñ gant an avel : n'eo ket aet ar renerien da guzhat en ur repu arc'hantet, goudoret ha prientet-mat, o lezel o heulierien d'en em zifreñ. Gouzout a ran an holl en emsav ez eo bet hemañ prizoniet en ur c'hamp saoz, en Itali, dinden evezh an Intelligence Service, hag ez eo deut a-benn da streaoù kêr evit chom hep mervel gant an dienez. Gouzout a ran an holl ez eo bet hennezh o terrif mein war hentoù Alamagn, gwisket, e-kreiz ar goañv kriz, gant truilhoù, hag e oa o tizeriañ gant an naonegezh pa'z eur deut a-benn da skoulmañ darempred gantañ. Gouzout a reer c'hoazh ez eo bet hennezh all o werzhañ gwastilli o korn ar streaoù a-benn magañ gwreg ha bugale, hag ez eo bet henhont, e-pad mizioù, o kousket er parkeier, bugale vihan hag all. Hag erfin, ma leverin mat, n'eo ket ar renerien a zo deut a-benn da dremen da gentañ en tu all d'ar mor, al lec'h nemetañ ma oa herberc'h da gaout, met ur paotr yaouank, soudard er Bezenn Perrot, hag a ouezas, en Havr pe e Kervourc'h, en em silañ war vourzh ur vag o vont, dre Iwerzhon, da Amerika. M'o doa ar renerien soñjet e kalz traoù, n'eo ket sur en o surentez personal.

Unan bennak, n'eus ket pell, ur paotr yaouank speredek-tre, a skrive din ne wele ket kalz a dalvoudgezh gant an strekeltelzh. Respont a ris dezhañ : ma n'eo ket bet diouennet an emsav goude ar brezel, ez eo a-drugarez d'ar Gelted all, a-drugarez d'al liammoù etrekeltiek a oa bet skoulmet abaoe amzer Kervarker ha Vallée. Rankout a reas an heskinerezh habaskaat goude ma teuas Kembreiz da

c'houzout petra a dremene e Breizh, ha da zihunañ koustiafs ha barn an dud ar broioù keltiek, e Bro-Saoz hag en Amerika, ha da sachañ evezh ar gouarnamant breizhveurat zoken. E miz Kerzu 1945 e savas an Ao. Emrys Roberts, kannad Meirion, e vouezh e ti ar C'humunou e Londrez, ha da heul, e miz Genver 1946, e roas an Ao. Ernest Bevin, ministr an Aferioù Estren e gouarnamant al Labour, an urzh d'e gannad e Pariz da enklask diwar-benn ar pezh a dremene e Breizh ha da gemenn d'ar gouarnamant gall pegen nec'het e oa gant an darvoudoù eno. Hag ar c'hemenn-se, ouzhpenn an holl drouz a oa bet hag a oa atav, eo a lakaas un termen d'ar prantad krisañ eus an heskinerezh. Ha, taolit evezh mat, ne oa ket, er bed kelt, ar vroadelourien hepken hag a stourme evit Breizhiz, daoust ma'z eo int a lakaas an traoù e brall : kannaded, eskibien, ha tud anavezet eus pep kostezenn a roas o skoazell. Setu aze c'hoazh un istor a vefe ret ober. An dihelloù, emañ, a zo fonnusoc'h : lenn Y Faner, Y Tvst, Y Draig Goch, The Welsh Nationalist, Inniu, The Irish Press, h.a. Met lod e-touez ar re a reas ar muiañ ne c'hellint ket mui displegañ o ennoñnoù rak, goude stourm kement evit ar justiz, ez int aet d'ur bed gwelloc'h : soñjal a ran da skour en dan hael ha kalonek, ar Rev. Dyfnallt Owen, hag er politiker galloudus, an Dr D.J. Davies. Pet Breizhad a oar o anv ? Ha, koulskoude, un die broadel he deus Breizh en o c'heñver.

Tri darvoud a fell din menegiñ dreist-holl en emdroadur an heskinerezh : prosez Roparz Hemon e 1946, Beaj ha Danevell Kembreiz e 1947, hag eil prosez Geffroy e 1949-1951. Roparz Hemon a voe, ma ne fazian ket, an hini kentañ e-touez renerien an emsav da vezañ stlejet dirak al lez-varn (ar re all e voe barnet hep ma vefent aze) : anavezet-mat e oa er broioù keltiek ; ha, ma oa broadelour, ne oa bet morsk politiker. "Prientet-mat" e oa bet e brosez gant ar c'hazetennoù ha, war a gonted a-berzh mat, e oa Roparz Hemon da gaout 20 bloavezh toull-bac'h : bez e c'hellan lavarout ez eas mamm Roparz Hemon da glemm ouzh rener ar gazetenn gatolik La Voix de l'Quest ha da c'houlenn gentañ paouez gant ar pennadoù mezhus a oa embannet diwar-benn he mab ; un diviz ken rust he doe gant an Ao. Cheruel, baleg, ma kouezhas ar vaouez paour, an deiz war-lerc'h, klañv gant un taol-gwad hag a gasas anezhi d'an toull-bez. Prientet mat e oa bet ar prosez eta, ha lakaet an dud "e stad-degemeradus", evel ma lever arbennigourien ar "brezel psikologek". Taol-kurun, avat : ur c'hazetenner kembreat, an Ao. Dewi Powell, a oa deut, a-berzh Y Faner, da vezañ test d'ar varnedigezh : an den-se, ken sioul ha ken hagarat, roz ha kuilh e zremm evel dremm dinnoas ur babig, a voe sebezet-krenn o welout an toussmac'h a lakaas da sevel e kalc'hioù uhel Roazhon : degemeret e voe er Prefektur, e-lec'h ma lennas dezhañ Komiser ar Gouarnamant ar brezegenn a oa o vont da ober a-enep da Roparz Hemon ! Met ne voe kendalc'het gant ar prosez nemet amzer da gaout ur respont eus Pariz : da noz e oa apellat ar varnedigezh goude un endarvezh kalet dirak ur saliad touzous, rak deut e oa an emsav war sikour e rener.

Daou viz hanter goude e voe adc'hraet ar prosez : kemmet a-grunn an aergelc'h; ne gaved mui netra da damall ouzh Roparz Hemon, ha lezet e voe da vont kuit diouzhtu, dieub. Hanter-kant den a zegemeras anezhañ pa zeuas er-maez eus an toull-bac'h, a-lec'h ma oa aet da zastum e draoù. E-pad ar prosez e lavaras e zifenner en doa bet ul lizher digant Prezident kozh Iwerzhon, an Ao. Douglas Hyde, ha digant 700 den a-bouez eus ar broioù keltiek : met ne voe ket lezet da lenn anezho.

Prosez Roparz Hemon a zo ur miltir en istor an heskinerezh. Da heul an trouz e Kembre, hag a yae brasoc'h-brasañ, krefoc'h-krefvañ, dreist-holl dre ma oa deut, etretant, un nebeut Bretoned da ziazezañ e Kembre ha da sevel eno ur servij-kelaoua, e teuas ur menoz skedus e penn kannad Bro-C'hall e Londrez, an Ao. Massigli : pediñ un nebeut Kembreiz da zont da welout e oa pep tra evit ar gwellañ e Breizh, hag e oant bet int, Kembreiz, tud re hegreidik, touellet gant forbanned. Ar bedadenn ne voe ket graet, evel just, da dud ar Strollad Broadel, ken milliget ha broadelourien Vreizh, met da renerien an Eistezvod, hag a oa en o zouez kelennerien hag a brize kalz Bro-C'hall hag he sevenadur; hep mar ebet e oa spi gant ar c'hannad e vefe diganto un danevell mat a-walc'h da lakaat ar vrudourien da deval. An Ao. Massigli, diwazh, en devoe ur wall-gerseenn. Da gentañ, ne deo nemet dre ur muiañ-mouezhioù izel-tre ez asantas poellgor an Eistezvod degemer ar gouviadenn; d'an eil e voe an danevell a-enap-tre da dezenn Vro-C'hall; ha, d'an trede, e teuas da vezañ gouezet e Kembre, diwzhatoc'h, e oa bet ar veaj unan embrouget aketus ha gwarezet-mat. An danevell hec'h-unan e voe barnet garz a-walc'h gant broadelourien Gembre evit bezañ chomet hep lavarout pep tra, ha kazetenn ar Strollad a venegas zoken e oa bet kaset an danevell, dre sevender, kent bezañ embannet, d'ar gargidi c'hall, a c'houlennes ma vefe kemmet traoù e-barzh, ar pezh a voe graet : notann a-bouez, rek diskouez a ra e seblante ar gouarnement gall asantif d'an tamalloù a chome en danevell er stumm ma voe embannet.

Ret eo din lavarout, avat, e nac'has sekretour an Eistezvod e vije bet diskouezet skrid an danevell d'ar gargidi c'hall, met peurliesañ e vez kelaouet mat ar strollad. Erfin, diaesast bras e voe an dud e Kembre pa voe gouezet e oa bet o dileuridi heuliet e pep lec'h, leuniet o devezhioù gant banveziou ha kouviadennoù a bep seurt, e doare n'o doa ket mui amzer da welout an dud o dije karet gwelout, e oant embrouget gant "tud a fiziañs", blieniet hag evezhiet e pep lec'h, hag a-wechoù zoken "gwarezet" gant ar polis. Danvez o doa dastumet an dileuridi, a-hed o beaj, a-walc'h da embann un eil levrenn, kalz rustoc'h, ma teufe d'an traoù gwashaat. Gwellaat a rejont. Ha miret e voe di-embann an dielloù prizius-se.1)

An trede darvoud a garfen degas da soñj eus ur mare n'eo ket bet paour e darvoudoù eo afer Geffroy. Andreu Geffroy a oa bet, a-raok ar brezel, unan eus brudourien wellañ, akuitañ ha barrekañ an emsav broadel. Harzet e oa bet nouspet gwec'h, ha tamallet outañ bezañ bet e-barzh Gwenn-ha-Du. E galonegezh yen ha goapaus a lakae e heskinerien da daerif ha da vrouezañ sportus, ken n'eo ket souezh ma voe talvezet dezhañ kement-se pa voe kavet an tu da lakaat an darn warnañ. Pa lavaran, a-hend-all, e voe lakaat an darn warnañ, ne lavaran ket reizh : kuzhet e oa Geffroy pa glevas e oa bet harzet e wreg en e lec'h, taolet e vugale er zu ha gwellgaset gant tud aet e gouez; en em zaskorif a reas evit ma vefe dieubet e wreg da vont d'ober war-dro ar re vihan. Ar wreg ne voe ket dieubet, a-hend-all, mizioù e chomas ar c'hamp-bac'h, hag eñ, "Jef bras", a voe barnet da 20 vloaz galsod. Diskennet e voe, diwzhatoc'h, e gastiz betek 5 bloaz hag e miz Du 1949 e oa war-nes bezañ lezet da vont pa darzhas, a-greiz-holl, ur vombezenn : kavet e oa bet e Bro-Veljik, a lavared, ur baperenn sinet gant Geffroy, meneget anni e oa bet diskleriet gant Geffroy daou Saoz d'an Alamanted. Ur prosez nevez e voe, unan hag a reas trouz, rak d'an ampoent-se e oa echu mare bras ar prozezioù. Direk ur barnet leun e gasoni, ha ne baouez ket gant ar c'hunujennoù, e chomas Andreu Geffroy balc'h ha diz-aon evel bosz. Prim e voe klozet an traoù a-hend-all : ur c'hard-aur a voe a-walc'h d'ar juri evit e gondaoniñ d'ar marv (miz Du 1951).

Kollet e seblante bezañ Andreu Geffroy, met a lazh korf en em daolas e vignoned en emgann : da gentañ evit miret na vefe fuzuilhet diouzhtu ha d'an eil da deural sklerijenn war un afer tafval-tre. "Strolladoù-difenn Andreu Geffroy" a voe savet er broioù keltiek, bodadegoù a voe graet evitañ e Trafalgar Square (e-lec'h ma voe lennet ur pellskriz faos o lavarout e oa bet dieubet), e Kêrdiz, e Dulenn, en Abertawe, tud o tougen skritelloù a valeas a-vandennadoù dre streadoù kêrioù bras Kembre, klemmoù a voe livet gant ter-du war vogerioù kannadiez Bro-C'hall en estrenvro, pennadoù ha levrioù a voe embannet, miliadoù a skouerennoù skignet, kantadoù lizheroù ha pellskridoù a resevas Geffroy an e gell, Kembreiz hag Iwerzhoniz a zeuas d'e weladenniñ, a skrivas da Brezidant ar Republik, da Gannad Bro-C'hall e Londrez - ken e teuas da vezañ anat na vefe ket fuzuilhet.

Met an dra-se ne oa ket trawalc'h : ret e oa sklaerast an tamalloù. Ober a reas ar strollad kembreat-iverzhonat, ken dister koulskoude e c'halloudoù, un enklask-skouer. Dont a reas a-benn da adkavout an holl dud, koulz Germaned, Saozon pe Gallaoued, o doa kemeret perzh en darvoud a oa bet kondaonet Geffroy war e zivout : ha da fin kement-se e voe komprenet n'en doa bet Geffroy netra da welout e-barzh. Un istor spierezh e oa, luziet ha kevrinus, o tegas e Lokireg, nepell diouzh ti Geffroy, Saozon, Germaned, hag ivez Gallaoued, ar re-mañ o labourat evit an daou du ! Un darvoud a-bouez, peogwir ez eo d'e heul e c'hellas an daou lestr-brezel alaman, Scharnhorst ha Gneisenau, enket abaoe pell e porzh

1) Ur skrid talvoudus e chom Danevell Kembreiz. Tu a zo da gaout al levr-se digant ar GORSEOD, 70 Avenue du Plessis-Tison, NANTES, hag a wezhañ anezhañ evit 1,00 LN.

Brest gant ar bagoù ha kirri-nij saoz, tec'hout betek Alamagn. Bezat a vezo, rener er soudarded alaman, an ofiser Eckert, adkavet e miz Du 1952, a zigabluzas a-grenn Geffroy. Ha neuze, e voe klevet e oa an testeni kavet a-enep dezhañ e Bro-Valjik ur baperenn skriverezet penn-da-benn, sinatur hag all ! (1)

Daoust da gement-se, avat, e chome Geffroy en toull-bac'h : daoust d'en testeniou degaset en e geñver, daoust d'ar goulennoù ha d'an azgoulennoù graet evitañ. A-benn ar fin, d'an 13 a viz Du 1952, e tivizas Geffroy, evit an eil gwech, chom hep debrif boued ken; ne adkrogas da gemer boued nemet d'ar 5 a viz Kerzu hag en arvar e chomas e vuhez e-pad pell. E Keltia, kuzulioù kêr, kuzulioù kontelezh, sindikajoù, tud prevez, a save o mouezh e-du gantañ. Kaset e voe e afer dirak an O.N.U. N'eo nemet e miz Gouhere 1953 e voe lezet Geffroy da vont - hep ma vefe bet adc'hraet e brosez. N'eo ket bet lavaret pep tra c'hoazh, a-hend-all, war afer Geffroy : spi a zo da gaout e skrivoañ e afvorennoù, e afvorennoù toull-bac'h koulz hag e afvorennoù stourmer a-raok ar brezel : talvoudus e vint.

Un heuliad dic'hortoz a voe da afer Geffroy. Klevet o doa Breizh-Veuriz hag Amerikaned, sebezat-kner, e veze, e Bro-C'hall, dalc'het ar gondaonidi d'ar marv chadennet, noz ha deiz, treid ha daouarn : diwar an trouz e voe war gement-se, dreist-holl goude ma voe burevioù an O.N.U. oc'h emellout en afer, e kavas furoc'h d'ar gouarnamant gall terrañ ar reolenne.

N'emson ket o vont da glask barn amañ ar pezh a zo bet graet e-pad ar brezel. Ret e vefe, da gentañ, displegañ an darvoudoù dre an hir, hag evit o displegañ mat e ranker anavezout pep tra, dreist-holl an traoù ne vezent ket embannet pe vrudet d'an ampoent : ha pell on da anavezout pep tra ! D'ar re, avat, a zo tuet da varn re brim, e fell din degas un nebeut traoù da soñj :

- 1. ar Strollad Broadel a zo bet renet e-pad ar brezel gant kostezenn gatolik en emsav, kostezenn Remont Dalaporte, rener-meur ar Bleun-Brug, un den hag a oa pell-bras diouzh menozioù an diktatorelezh.
- 2. Savet eo bet Bezenn Perrot goude m'eo bet lazhet tri den a-bouez eus an emsav (Brikler, Kerhoas, Y.V. Perrot) ha gouezet e oa bet savet rolloù, warno 40 anv, eus emsaverien da vezañ diskaret.
- 3. Klasket ez eus bet, ouzhpenn ur wech, kaout darempred gant ar Saozon. Klasket ez eus bet ivez kaout darempred gant an Amerikaned. Bep taol ez eus bet c'hwitad.
- 4. Ma vefe deut an darempredoù-se da vat, n'eus ket tu da c'houzout pe-tra o defe graet ar Saozon, d'ar maza-se, pa weler penaos o deus ranket dilezel Mikhailovitch e Iougoslevia, hag Abas Kupi en Albania, pa weler ivez penaos eo bet heskinet broadelourien Ounizia ha Marokko, lazhet 45.000 den e Setif e mae

1) Istor Geffroy a zo bet lavaret gant un Alaman, Erich Borchers, hag a labouras kalz, war c'houlenn ha gant skoazell-arc'hant Kembreiz, da adkavout an holl ofisourien ha soudarded alaman a oa e Lokireg e C'hwevrer 1941. Ar re a oar lenn germaneg a vo dedennet gant e levr Weil ein Hund nicht bellte, embannet e Hannover Adolf Sponholtz Verlag, e 1953.

denez

1945, en un Afrika an Hanternoz e-lec'h ma oa Saoz Amerikaned.

5. Erfin, an nebeut Bretoned, dezho menozioù breizhat mui pe vui, hag a oa er Resistañs, gouez dezho bremañ, n'int deut morse a-benn da sevel, e-barzh ar Resistañs, ur strollad breizhat, o prometiañ da Vreizh he gwirioù hag o reif tro d'ar vroadelourien, evel-se, da stourm evit o bro e-barzh ar Resistañs. Mat e vefe dezho soñjal en dra-se a-raok sevel o mouezh hiziv an deiz.

Ur wech c'hoazh, ret eo gouzout evit barn, ha den ne oar pep tra. An nebeut evezhiadennoù em eus graet a skoazello, spi am eus, un nebeut tud a youl-vat da welout sklaer.

A-raok echuiñ gant lod an etrekeltielezh en istor modern an emsav, e rankan menegiñ un dra all c'hoazh, hag a vez tavet a-grenn warnañ. Gouzout a reer a voe gounezet un disterig-tra evit ar brezhoneg gant lezenn Deixonne. Ne ouzer ket al levezon en deus bet al labour etrekeltiek d'ober d'ar gouarnamant gall asantif d'un dra bannak, zoken ma oa nebeut a dra. E miz Gwengolo 1948 e voe savet ur gevredigezh anvet "The Friends of Breton Culture" hag a gasas da Bariz ul lizher o c'houlenn ma vefe kelennet ar brezhoneg er skolioù. Setu amañ dibenn al lizher-se hag a oa, evel ma vo gwalet, teer a-walc'h :

"Ni, hag a sin amañ dindan, a c'houlenn start digant ar gouarnamant gall ha digant Bro-C'hall ma vezo ar yezh vrezhonek kelennet ar-reoliek e-barzh ar brezhonegva ha ma vo, ouzhpenn, kelennet istor Breizh, adalek e zeroù, e skolioù Breizh a-bezh, avel m'hen goulenn diganto ar garz a vererezh o deus e Breizh.

Ma vefe nac'het hor goulenn, en em gavfemp, evel brogarcurien eus ar broioù kelt all, rediet, gant keuz, da lakaat anavezout e pep degouezh an droug hag an direizhder bras graet ouzh yaouankiz Vreizh, rak anat e vefe neuze ez eo pal ar seurt politikerezh distrujañ yezh ha doareoù dibar ar Vretoned, hag a zo, war un dro, tost d'hor c'halon ha talvoudus da sevenadur ar C'hornog."

Sinet e voe ar goulenn gant 3.125 den, en o zouez ar Rev. Dr Mihangel MacGrath, arc'heskob Kêrdiz, ar gelennerien J. Gwyn Griffith hag Ambrose Bebb, eus Kembra, an Ao. James MacSparran, kannad eus Iwerzhon an Hanternoz, Dan Breen, kannad iwerzhonat, stourmer brudet eus brezel an Dieubidigezh, Oscar Mac Uilis, sekretour ar C'hendalc'h Keltiek, an Dim. Mary P. Ramsay, ar Rev. T. Murchison, an Ao. J.H. Miller, eus Bro-Skos, an Ao. R. Morton Nance, eus Kernev-Veur, ha Cormac O Cuilleain, eus Skol-Veur Iwerzhon. Na voe respont ebet d'al lizher-se. D'an 21 a viz Gwengolo, avat, e oa bet kaset al lizher, ha d'an 30 e oa aotreat kentelioù brezhonek diredi e liseoù Brest ha Kemper.

E miz Kerzu, e voe kaset ul lizher all, o c'houlenn ur respont, na zeuas ket. Hag e miz Meurzh 1949, direk ur seurt disavander hag ur seurt di-

par denez

reizher, e c'halvas Cormac O Cuilleain, ar sekretour, an holl Gelted da stourm par ma c'hellent. E miz Meurzh, em eus lavaret. Hag e miz Mae e oa savet kinnig-lezenn Deixonne.

Bruderezh ar Gelted an hini eo a redias ar gouarnamant da asantiñ d'ul lezennig a-du gant ar brezhoneg. Ur brouenn all eus kement-se a gaver e niverenn miz Eost 1947 Y Ddraig Goch, e stumm ul lizher gant J.E. Jones, sekretour ar Strollad Broadel :

" Er mintin-mañ, Mezheven 17, em eus degemeret ul lizher digant an Ao. Pierre Hervé, kannad evit ur c'horn-bro eus Breizh; gant al lizher e oa testenn al lezenn a ginnige-ef ha re all, da Gambr Bro-C'hall, "evit ober ar pezh a zo ret ober da saveteiñ yezh ha sevenadur Breizh". An Ao. Pierre Hervé a zo kannad komunista. A-du gantañ en deus 179 komunista ha 16 kannad eus kostezennoù all.

..... N'eus mar ebet, da labour Strollad Broadel Kembre eo ez eo dleat, dreist-holl, ar c'hinnig-lezenn-se a glask reiñ un tammig justiz da Vreizh - labour ar Strollad dre e levr Breton Nationalism ha dre ar bruderezh a reer er bed a-bezh diwar-benn an heskinerezh e Breizh. Gouzout a ra an Ao. Hervé emañ ar Strollad Broadel o kas en-dro al labour-se : setu perak en deus kaset d'hor sekretourva un eilskrid eus e ginnig-lezenn. (1)

An davezhioù-se a oa davezhioù brav a intrudu etrekeltiek : e 1947 eo e voe savet e Dulenn un Emglev Politikel Etrekeltiek Undeb Celtaidd, peogwir, evel ma ouzer, e chom ar C'hendalc'h Keltiek er-maez eus pep politikerezh. Rener an Unvaniezh Kelt a oa an Ao. Gwynfor Evans, rener Strollad Broadel Kembre, hag e sekretour Dan Breen ar mah. Zoken ma c'hwitas taol-arnod an Undeb Celtaidd, e vefe poent, a greden, adsevel un dra bennak heñval.

War gil ez eo aet, siwazh, an etrekeltelzh, er bloavezhioù diwezhañ-mañ. E 1947 e oa savet, en Iwerzhon, ur gazetenn viziek An Aimsear Cheilteach, a oa skrivet dreist-holl e saozneg, hag a blede gant ar politikerezh a-raok pep tra all. An dle o deus Breizhiz d'ar gazetenn-se ha d'he rener - a oa breizhat - a zo bras. E 1954 e paouezas ar gazetenn da vezañ embannet. Klasket ez eus bet hec'h adsevel. Klask a reer c'hoazh ober un dra bennak. Spi am eus e teour a-benn.

E Breizh, e-keit-se, e kouezhe ar samm war divskoaz ar re yaouank. Hag ur samm ponner e oa. Tamall ar c'hanlabour gant an Alamanted a oa bet kavet, n'eo ket hepken evit distrujañ an emsav ez-korfel, met ivez evit hen diskar e spered ar bobl. Ar renerien a oa war dec'h, kuzhet, pe en toull-bac'h, ha da vintin, pe save en heol, e Roazhon, pe e Pariz pe e lec'h all, e tregerne a-wechoù, etre mogerioù un toull-bac'h, ur Bro Gozh troc'het prim gant ar bolodoù : rak paotred a varve evit Breizh, e barr o yaouankiz - ha ne oa, d'o c'hennerezh, nag ur chapeled lavaret a vouezh uhel e-tal dor an toull-bac'h,

1) Al levr Breton Nationalism a zo e gwerzh e ti an Ao. Danigo, levrier, rue Marc Sangnier, Kerfeunteun, Quimper.

evel en Iwerzhon, nag ur c'han eilet gant youc'hadennoù er merc'hed, evel en Aljeria. Zoken ar Bro Gozh, evel ma oa kanet ganto, peogwir e oa bet kanet ganto, a zo bet klasket hen distrujañ, gant aon na gasfe e gomzoù, betek spered ar re yaouank, efvor ar poanioù gouzafvet evit Breizh. Met trec'het, faezhet, kunujennet, distrujet - ez adsave an emsav gant ar rummad nevez hag e stlaka adarre er bannial en... Avel !

Fellout a ra din degas da soñj emañ -dlaet mat eo - anv an hini a savas ar gazetenn vreizhet kontañ moulet(1) goude ar brezel : Yann ar Gall. Abaoe en deus Yann ar Gall hor c'huitast - Doue d'e bardono - ha n'ouzon ket hag-ef en deus graet kalz tra all, war dachenn an emsav, estraget sevel An Avel. Met savet en deus anezhi, hag ar re hepken o deus bevet ar mare a c'hell kompren nag ur goanag a zegase ganti ar gazetennig. Gant-se e tle efvor Yann ar Gall bezañ miret en hon touez.

Ne oa ket aes sevel kalacouennoù d'an ampoent. Difennet e oa moulañ tra hep aotre. Liesskrivañ zoken a oa difennet. N'ouzon ket piv a zizoloas, avat, he doa al lezenn lezet un toull en he roued da bakañ an enebourien : an embannadurioù "nann-mareadek", pe ar c'hamennadurioù-diabarzh evit ur strollad pe ur gevredigezh, ne oa difenn ebet a-enep dezho. A lavared atav. Met, evel just, ne oa ket tu da zegemer komanentoù. Hag ouzhpenn e oa ret kavout ur mouler prest da embann traoù a oa sur da zisplijout d'an dud e karg, ha prenañ paper goude-se da briz ar marc'had kuzh. Rak ar paper ne oa tu d'hen kaout nemet gant tikadoù, ha meur a gazetenn vihan, embannet gant ar bennozh ofisiel, a veve, n'eo ket diwar ar skouerennoù a werzhe met, ma c'heller lavarout, diwar ar re na werzhe ket, o kas d'ar marc'had kuzh ar paper a reseve, d'ur priz izeloc'h, war ar marc'had digor.

Meneget em eus krouer An Avel, Yann ar Gall. Met an daou zen a lakeas ar gazetenn da vont en-dro, adalek an derou betek ar fin, a voe Yann ha Youenn Olier. Re all a oa en-dro dezho, hag o zi bihan, e don ur porzh e ru Sant Melani, en unan eus karterioù koshañ Roazhon, a oa ul lec'h ma tremene kalz tud. An emsav en deus un dle bras e-keñver Yann ha Youenn Olier.

War un dra all c'hoazh e ranke sachañ evezh al lenner : ar baotred yaouank hag a reas war-dro An Avel a oa holl, pe dost, eus an emsav "sevenadurel". Arabat krediñ e oa, a-hend-all, ha gant reizh, un diforc'h strizh, ur voger etre an emsav sevenadurel hag an emsav politikel. Nann. Holl e oant broadelourien. Met lod a blede dreist-holl gant ar yezh, ar sevenadur hag ar studi, pa veze re all o plediñ dreist-holl gant ar bruderezh politikel. Ha dinuzh hon doare e voe doare hor c'helaouennoù, An Avel hag ar re all a zeuas d'an hevelep mare. N'eo ket peogwir e oa suroc'h, diarvarusoc'h, skrivañ anezho e brezhoneg eo e oa embannet ar yezh vroadel an traoù a blede gant ar politikerezh hag ar menozioù; met peogwir e kave deomp e oa e brezhoneg e tle bezañ

1) Lavarout a ran moulet : Tir na n-og R. Huon ha P. ar Gourriereg a oa koshoc'h, met liesskrivet.

meret ar c'hudennoù pouezusañ, ar c'hudennoù uhelvennad ha politikerezh. Evit ar surentez, n'ho pet ket eon : tud vat a oa, o treñf e galleg, evit an uhelidi, pennadoù Youenn Olier e-barzh An Avel evel ma voe troet va re-me e-barzh Al Liamm.

E miz Here 1945 e voe embannet niverenn gentañ An Avel. Bihan e oa ar gelaouenn, ha goullto a-walc'h. Met ne zaleas ket da greskiñ, ha da bourchas d'al lenner skridoù talvoudus ha, va c'hredit, skridoù dizaon : rak ne oa ket an dic'hoanag o ren en hon touez. En niverenn 4-5 e oa War-du An Trec'h anv pennad brezhonek Youenn Olier hag ennañ e oa diskleriet kement-mañ, ez eoun, e-sigur an heskinerezh hag an tamalloù a-enep d'ar vroadelourien : "Ne zleomp ket bezañ barnet gant Gallaoued evel Gallaoued fall, rak n'omp ket Gallaoued"; ha c'hoazh : "Kredif a reomp n'hon eus nemet ur vro, Breizh an hini eo, ha n'hon eus dlead brogerour nemet en he c'heñver. Setu holl."

N'en em douzlemp ket war ar pezh hor boa da ober. "Deomp-ni eta (ar vroadelourien)", e skriva Youenn Olier, "e chom ar pep diassañ hag ar pep dafjerusañ : kenderc'hel da stourm e-giz a-raok evit reiñ da Vreizh ar gouder politikel n'hall broad ebet bevañ heptañ."

Klask a rin displegañ ez-eoun petra c'hoarvezas gant emsav An Avel. Bezet a vezo, adsavet hon eus ar banniel - banniel roudennet gwann-ha-du Breizh vroadel. Paebet hon eus evit se. Ker. Met paebet hon eus a galon laouen. Ha, goude holl, n'hon eus roet netra e-skoaz ar re - yaouank, bagol ha kalonek - o deus roet o buhez.

A bep seurt traoù a voe kavet da gentañ e-barzh An Avel : studiadennoù arboellerezh gant Le Huedez, dezou kontelioù brezhonek gant Ar Merser, ur studiadenenn iwezhonek, pennadoù-istor, kontadennoù (gant Alan al Louarn ha Per Denez) troidigezhioù, dreist-holl diwar Edgar Poë gant Per Denez, kaleier, tabutoù diwar-benn yezh an darempredoù etrakeltiek hag an esperanteg, ha me oar. Met buan e teuas muoc'h a urzh er gelaouenn, ha pajennadoù niverusoc'h-niverusañ a voe gouestlet da studiañ savboent an emsav dirak an darvoudoù he da vrudañ ar pezh a dremene er broioù keltiek. Er c'heñver-se e fell din menegiñ ar pennadoù embannet gant Youenn Olier dindan ar sinatur An Tremener : talvezout a rafent ar boan bezañ adembannet e stumm ul levri, evel ma voe embannet skridoù Roparz Hemon e-barzh "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh". Hep termal tamm ebet e lavaran e voent al labour pouezusañ - al labour nemetañ zoken - graet war dachenn menoziadur an emsav er bloavezhioù goude ar brezel. Setu amañ o roll : Diwar-benn an doare-skrivañ, niv. 1; War-du an Trec'h, niv. 4-5; Yezh ha Pobl, niv. 6-7; Lennagezh ha Speredigezh, niv. 8-9; Sevenadurezh da Gentañ, niv. 10-11; Ober, niv. 12; Gwerinoniezh, niv. 12; Penaos embreger hor stourm en amzer da zont, niv. 1, eil rummad; Stadelouriezh, niv. 1; Burutellerezh, niv. 1;

Broadelouriezh, niv. 2; Ni ha Bro-C'hall, niv. 2; Paoc'helouriezh, niv. 2; Kudenn an Ober, niv. 3; Barnerezh ha Reizhded, niv. 3; Reizhadurioù diwar-benn ar stourm sevenadurel, niv. 4; A-enep d'ar vroadelouriezh rik, niv. 4; Politikerezh rannvroel ha digrannouriezh, niv. 5; E-sigur likouriezh, niv. 5 ha niv. 6; E-sigur kevredadelouriezh, niv. 6. En niverenn 7 ez eus ivez ur pennad Diskleriadurioù talvoudus evit istor emsav An Avel.

Un deiz e vo studiet pizh ar pennadoù-se. Ne c'hellan menegiñ amañ nemet o flegoù pennañ. Bez' e oant, da gentañ holl, un difenn eus ar vroadelouriezh vreizhat. N'eo ket hepken gant ar C'hallaoued pe ar Vretoned enep-breizhat - ar frañskilhoned - eo e oa taget ar vroadelouriezh; met ivez gant tud zo, bet broadelourien, ha marteze o chom broadelourien e kevrin o c'halon, a zisplege na felle dezho stourm nemet evit ar yezh, n'o doa dudi ebet er-meez eus lodenn vrezhonek an tri departamant, n'o doa preder gant tra nemet sevenadurezh. Atav e voe lakaet gant An Avel an emgann war e wir dachenn : "Na garo Breizhiz o yezh nemet pa garint o bro" - "Ma tilez ar Vrezhoned o yezh eo dre ma fell dezho he dilezel, ha ma fell dezho he dilezel eo dreist-holl en abeg ma kav dezho int Gallaoued" - ha c'hoazh : "N'eo ket ar brezhoneg evidomp-ni stourmerien un dra varv a virer evit dudi ar yezhonourien hag an istrogelled falstrivliadet a vourr en hendraoù. Bez ez eo da gentañ yezh ur bobl vev. Un tu eo da Vreizh d'an em zieubiñ, ur benveg ivez da zisplegañ he buhez vroadel, da grouñ he sevenadurezh hag erfin da seveniñ er bed en amzer da zont ar c'halvedigezh roet dezhi gant Doue. Ur bobl eo a garomp ha n'eo ket gerioù na sonioù, ken kozh bennak e vo o orin..."

... Ne stourmer ket ha na verver ket evit ur yezh, evel ma krede R.H. Stourm ha mervel a reer evit ur bobl; ha ma'z eo un dlead evidomp stourm evit hor bro ha mervel eviti diouzh ret, eo peogwir n'he deus hor bro gwir ebet d'en em lazhañ, evel n'en deus den ebet ar gwir d'en em zistrujañ. Rak pep bro he deus he c'hefridi da seveniñ ha bro-Vreizh he deus hac'h hini ivez. Ha me stourmomp evit ar yezh eo dre ma ne c'hell ket ur vro bezañ hep yezh. Hep Brezhoneg n'eus Breizh ebet. Breizh hag he spered eo a zifennomp pa zifennomp ar brezhoneg. Netra ken." (Genver 46).

Setu ar gredenn e-keñver yezh. Ar gredenn e-keñver sevenadurezh a zo heñvel :

"Al lennegezh a zo graet da gentañ evit ar vroad, ha dleadoù e-keñver ar vroad he deus eta, pe evit komz ez reasoc'h ne c'hell ket ur skrivagner bezañ ur skrivagner hepken : bez a tle da gentañ bezañ un den, hag e Breizh ur brogerour... N'eo ket p'emañ hor bro o varvel a c'hellomp chom hepken da c'hoari gant gerioù, ha pa vefent re hor yezh. N'eo ket va soñj-me da vihanañ." (C'hwevrer 46).

Un dra heverk eo hemañ : deut eo ar politikerezh e-barzh An Avel da heul, diwar, ar sevenadurezh, hag ar strollad a zo deut evit ar yezh hag ar sevenadurezh. E miz Here 46 e skriva Youenn Olier diwar-benn ar goulennoù graet evit ar yezh : "N'eo ket hor goulennoù, hogen ni eo a zisprizer." A-se, sevel un nerzh hol lekay doujañ.

Ha daoust ma skriva Youenn Olier "e rankomp en em glevout gant kement hini a labour evit Breizh, pere bennak e ve a venozioù", ne oa ket Olier evit chom hep diskouez an droug graet d'an emsav gant an "opportunistes" : "Il n'y a aucune sorte de personnes plus exaspérantes dans le mouvement breton que celle des opportunistes, gens qui tout en se réjouissant au fond d'eux-mêmes de voir certaines positions plus avancées tenues par leurs camarades de lutte, jugent cependant prudent et politique de les insulter à l'occasion, pour donner le change. Nous estimons qu'ils rendent là un très mauvais service à la cause qu'ils prétendent défendre. Ils donnent à croire, à des gens qui y sont portés à l'avance déjà, qu'il existe des idées et des conceptions du problème breton illégales. Or en démocratie la liberté de penser est complète, et y porter atteinte, sous quelque prétexte que ce soit, c'est faire du nazisme."

N'eo ket sur An Avel a glaske touellañ an dud : "Hor reolenn-stourm a chom etav an havelep hini : kenderc'hel da embann ez eo an dishualded gwir grofs ur vroad; un torfed eo lazhañ Breizh - aratozh-kaer pe get - e-giz ma ra ar C'hallaoued". Ha diwar-benn an obererezh e-pad ar brezel : "Kemer a reomp tro diwar-se evit reizhañ da vat afer ar bloavezhioù 1940-44. Faezh omp o klevout tud ouzh hon tamall en abeg n'eo ket bet heñvel hon emzalc'h ouzh hini Gallaoued vat. Penaos avat e c'hellfemp bezañ Gallaoued vat pa n'omp ket Gallaoued ? Lavarout a raomp kreñn ha krek n'hon aus keuz ebet da vezañ dalc'het da labourat evit Breizh pa oa tu d'hen ober. Ar brezel ne selle ket ouzhomp; n'hon aus ket kemeret peizh ennañ ha mat hon aus graet. N'hor boa a-hend-all gouarnamant ebet. Neuze e vefe bet sod-nay lezel pevar bloavezh da dremen hep ober netra. Ne vije ket bet diouzh mad Vreizh. Setu perak e kredomp n'eo ket bet fall al labour sevenadurel hag al labour bruderezh hon aus kaset en-dro e-pad an amzer-se. Lavarout a ran adarre n'omp ket Gallaoued ha n'hor boa ket da stourm evit ur stad n'he doa graet biskoazh nemet hor gounit." (Kerzu 45).

E miz Gwengolo 1946 e kuitas Yann ar Gall ar renerezh, hag e teue An Avel da vezañ Avel en Trec'h. Derc'hel a reas ar gelaouenn da greskiñ brav ha da wellaat betek miz Kerzu 1948, pa baouezas tizum da vezañ embannet. En hafv 1947 e oa bet savet ar strollad Emsav Fobl Vreizh : rener Yann S. ar Gouez, is-rener Per Bodenan, sekretour Yann Olier, tefuzour Andrav Hemlin. Diskleriet e oa bet ar strollad hervez lezenn, graet un arouez (daou driskell aour war ur skramm gwenn ha gwer), savet kevrennoù e Roazhon, Naoned, Paris, Añjer, Kemper, Caen, Crossac, Gwened, Ar Mañs, ar Pouligwenn, Frejus, ha graet ur

c'hendalc'h e Roazhon d'ar 7 ha d'an 8 a viz Eost 48, er "Pigeon Blanc". Dileuridi eus Iwerzhon hag eus Euskadi a zeuas, ha niverus e voe ar stourm-erien en em vodas eno. Studiet e voe kudann Vreizh "au point de vue politique, social, économique, administratif et militaire", hervez ar follenn roet d'ar gendalc'hidi. Berzh a reas ar c'hendalc'h e gwirionez, ha kresket e voe Avel en Trec'h da heul. Hag, a-greiz-holl, echu an traoù.

Buhez An Avel ne oa bet marse didrubuilh. Spi am eus e konto Youenn Olier, un deiz, kement en deus gwelet e-pad ar mare-se. An trubuilhoù grevus kentañ a zeuas goude an niverenn 4-5. Adskrivañ a ran amañ ar pezh a voe embannet war ar follennig liesskrivet An Ere (Gwengolo 46), ha na voe nemet un niverenn anezhi, dre ma oa ken diass ober gant ar benveg-liesskrivañ marc'had-mat prenet gant An Avel ma voe ranket lezel a-gostez embannadur ar stagadennig An Ere :

"Un tammig eus Istor an Avel.

"Yann ar Gall ha Youenn Olier eo a reas war-dro An Avel er penn kentañ: edont o-daou soudarded en arme c'hall e Sant Brieg d'ar mare-se. E derou miz Here 1945 e rankjont dispartiañ. Youenn Olier a voe soudard e Roazhon hag a guitas an arme e miz Kerzu 1945. Bez e chomas Yann ar Gall e Gwened, e-lec'h e oa bet kaset, betek miz Ebrel 1946. Abaoe miz Here 1945 ez eo Yann Olier a ra war-dro ar mererezh.

"An Avel ne zlee ket bezañ ur gazetenn na zoken ur gelaouenn bolitikel-rik: n'oa ket tu, ez anat, ken abalamour da stad an daou rener, ken abalamour d'ar mare ha d'an diouer a arc'hant. Koulskoude a kave d'ar re he savas e oa ret ma ve klevet e-barzh ar gelaouenn da nebeutañ mouezh Vreizh evel hini ur vroad. Hogen n'oa ket An Avel e gwirionez ur benveg d'ober bruderezh; bez e van betek hiziv, a-raok pep tra, ul (liamm) etre an emsaverien.

"Daoust da se e klaskas ar pennadurezhioù gall heskinañ An Avel adal ar penn kentañ. Graet e voe enklask diwar he fenn gant polised Roazhon e miz Here 1945. Abaoe e klevjomp meur a wech gourdirzoù diouzh tu ar Prefedti, dreist-holl da heul an niv. 4-5, pa voe troet ar pennad War-du an Trec'h; e miz Ebrel e voe harzet Youenn Olier gant ar polised c'hall e-pad daou zevezh, ha graet e voe furchadeg en e di. Komzet e voe eus an darvoud-se a-hend-all e-barzh div niverenn eus Y Faner hag un niverenn eus Inniu en Iwerzhon.

"Abaoe e seblant an traoù mont war sioulaat, daoust ma voe Yann ar Gall war-nes diskregiñ diouzh an ervenn e miz Mezheven 1946, da heul gwallvrudoù skignet gant tud zo...

"N'eus bet goulennet aotre ebet peogwir dreist-holl e ranked gouzañv evit se ur reoliadur polis dizere a-grenn ouzh dallid un den dieub.

"Ar skoazell hon aus bet.

"Betek bremañ n'eus bet nemet pevar den o labourat a-zevri evit An Avel hag o tatum kounantoù : Alan al Louarn e Paris, hag a rankomp trugarekaat

kalz, Youenn Olier ha Per Denez. Re hir e vefe a-hend-all lakaat amañ roll hor c'henskrivagnerien.

"Ar Strollad da sevel.

"Gwalet o deus hol lennerien e oamp e soñj sevel ur strollad evit stourm war dachenn ar sevenadurezh. Per Denez eo en deus kuzuliet dreist-holl hen sevel, daoust ma karfe e ve ec'honoc'h e dachenn eget ar sevenadurezh. E gwirionez, bez e fellfe deomp gantaf dreist-holl skignañ ar menoz broadel. Evit ar poent ne gredomp ket e talvez ar boan en em veskañ er politikerezh rik peogwir n'omp ket c'hozh da stourm en dilennadegoù. Evel m'hon eus diskleriet a-hend-all e karfemp strollaf ar vroadelourien yaouank en ur gevredigezh dizolo ha lezennel hag o lakeat da labourat a-gevret : ne dalv netra ur strollad kuzh. Ret eo diwall a-hend-all diouzh kevredigezhioù na ouzer ket anv o renerien. Ret eo forzh penaos chom dindan al lezenn ma fell deomp ober bruderezh : ur strollad ne ra ket bruderezh - hag ur strollad kuzh ne c'hell ket ober - n'en deus talvoudegezh ebet. Evidomp-ni, daoust deomp da c'houzout e vo ret ober ur strollad politikel rik ar buanañ ar gwellañ, e kredomp e c'heller bremañ kas da benn ul labour vat-tre en ur ober diouzh skouer ar Gaelic League.

Hogen a-raok sevel diezezoù ar strollad-se, e c'houlennomp ali eeun ar vrogerourien : dezho da reiñ da c'houzout hag-efñ int prest da genlabourat.

Ne oa ket gwall chalet renerien An Avel gant gweladennoù ar polis, met tud all a oa asec'h o levezonañ : ar voulerien. Dleout a reas ar gelaouenn chefeh mouler. Hag en ur mare diaes-meurbet, e voe miret ar plomennoù c'hwec'h mizvezh hep o moulañ, dindan gourdrour ar polis, dre ma vanke tikedoù paper.

An eil barrad trubuilhoù a zeuas en hañv 1947 : d'ar mare-se e tisklerias An Avel e oa o sevel ur gazetenn viziak a stourm politikel Démocratie Bretonne, ur strollad, hag e klaske un ti e kreiz kêr Roazhon evit lekaat e vursvioù. An embann-se a lakaas ar prefedti da bennfolleañ, hag e Mezheven 1947 e oa kaset al lizher-mañ da vignoned An Avel :

"M et cher compatriote,

Nous avons le regret de vous faire savoir que Monsieur Le Nan, délégué à l'Information pour la Bretagne, vient d'interdire la parution de notre organe.

En conséquence, nous devons désormais nous contenter de faire le service d'un bulletin intérieur à tous les adhérents de l'U.P.B. dès que celle-ci aura été déclarée.

Espérant que vous voudrez bien continuer à nous donner votre appui dans cette dure lutte pour la Bretagne,

Nous vous prions de croire à l'excellence de nos sentiments bretons.

"Démocratie Bretonne"

E-pad an hañvezh-se (1947) e voe stank gweladennoù ar polis, ha ne baouezas ket kalz an ensellerien da "labourat" pe war ar renerien, pe war ar mouler. An niverenn 7 a oa deut er-maez e miz Here 47, an niverenn 8 a zeuas er-maez e miz Meurzh 48. En niverenn-se e skrive Youenn Olier :

"Setu ouzhpenn 6 miz e oa bet harzet Avel an Trec'h. Gouzout a ra hol lennerien peseurt tro-widre o deus implijet ar gargidi c'hall evit mirout ouzh hor c'helaouenn da zont er-maez : sañset abaoe miz Meurzh ez eus gwir da embann ur gelaouenn hep aotre, - nemet evit he moulañ e ranker kacout tikedoù paper hag a roer da neb a garer. Deut eur eta da gounañ deomp, war-lerc'h niverenn 6 hon eil rummad, n'hor boa an tikedoù paper-se hag e oa dav deomp o goulenn e Pariz. Da lavarout eo e oa ret deomp gortoz 6 miz da vihanañ, - ha marteze en aner en diwez - a-barzh gellout embann Avel an Trec'h en-dro. Lavaromp diouzhtu n'omp ket bet re nac'hant gant an ukaz nevez : deut e oamp da vere an ehanoù, ha bez e felle deomp dreist-holl embann Avel an Trec'h a-barzh ar strollad a oa da vezañ savet. Hogen ne zeujomp ket a-benn da gavout tud ar bagad-ren a-raok fin miz Eost. Kelaouenn brevez ar strollad e vo Avel an Trec'h bremañ eta; ne c'hall ket bezañ gwerzhet; ha n'eus nemet un tu d'hor mignoned d'he bevañ : kavout izili niverusoc'h-niverusañ da Emsav Pobl Vreizh...

"... E-sigur difenn trumm ar pennadurezhioù gall da embann Avel an Trec'h. N'eus ket kalz a adisplegoù da ober. Farsus a-walc'h e oa an digarez o doa kavet, ha lu dreist-holl, ret eo hen anzav. Diaes eo reiñ un abeg resis d'eo menoz. Marteze aon : pe klesk gounit amzer; m'hor bije gallet stagañ gant ar bruderezh a-zevri, hor bije gallet stourm marteze en dilennadegoù diwezhañ. Ne gav ket din o doa kement-se c'hoant da darrif lafs an emsav da vat : doareoù all garvoc'h o dije dleet kemer, ha ne gradient ket ober. Hogen bez e kredan kentoc'h e felle dezho daleañ hon emled. Ha damspi o doa ivez hor bije fall-galonet. Warbouez nebaut tre a dra ez eo buhez an emsav ar mare-mañ: a-walc'h e vefe da unen eus ar baotred o deus sammet warno leviañ adarre politikerezh Breizh war-du ar vroadelouriezh digalonekaat evit ma vefe gouledet an emsav-se, ha marteze da vat. Rak stad ar brezhoneg ne c'hell ket gouzav goursez. A-hend-all, marteze a-walc'h e voe divizet an difenn gant gargidi isderezh, ha n'o doa mennad spis abet, nemet bezañ direbech a-kefver gouarnamant Bro-C'hall. Daoust ma tiskouezer hon disprizout, e reer kalz war hon tro. Ha mentrus eo zoken e vije deut ar spierezh un ensavadur a-berzh-stad e "Bro ar Frankiz". N'hon eus ket lec'h amañ da gomz eus an enklaskoù a zo bet graet e Kernev diwar-benn stourmerien zo hag ar c'helc'hioù keltiek dre vras e-doug an hañv-mañ. Mavelien ar gouarnamant a zo bet spontet ivez gant barzh an hevelep kelc'hioù. Frouezh o c'hounnar hag o aon eo bet ar pennadoù fultret, droukyoulek ar stumm anezho, hag a zo deut er-maez nevez zo war an "Télégramme". E gwirionez, n'eus netra nevez e kement-se. Brudoù isklia a zo bet lakaat ivez da redek e-pad

mizioù kentañ ar bloaz-mañ : gortoz a rae ar bolised un dro vat evit hor bac'hañ, h.a... M'hor bije selaouet ouzh kement gourdrour a zo bet graet deomp he dije paouezet An Avel da zont er-maez edal an niverenn 4-5. Ne reomp ket kalz a forzh eus kement-se. Ar pezh doanusañ a zo, avat, eo n'hon eus ket kavet ar skor hor boa ar gwir da gaout a-berzh an emsaverien d'ar mare-se. Reoù zo o deus hor pismiget en abeg m'hor boa diskouezet re splann e oamp Bretoned, ha n'eo ket Gallaoued. N'eo ket un dra da lavarout, evelato, dreist-holl p'emeur war var deiz pe zeiz da vont d'an toull-bac'h en abeg da se. Nouspet gwasch hon eus klevet an hevelep diskant : ret eo lavarout gevier rak n'omp ket krefv a-walc'h. Hogen n'eus ket fallet deomp plegañ, rak kentañ diviz eus frouezhusted un emgann eo anaoudegezh ar pal. War-bouez touellañ en em doueller. Rak-se ne c'hell nep bruderezh breizhat bezañ efedus, ma ne laka ket anat ez eo evit Breizh hor bro, hag hor bro nemeti, eo e stourmomp. Gouzout a reer ne c'hell ket Breizh bezañ savetaet hep emskiant vroadel : hor pal pennañ eo he dihuniñ - ne vern amañ an doareoù-ober - ha pezh a zo sur eo na vo ket adenaouet an emskiant bobl-se e-touez Breizhiz ma anzavomp, pe ma reomp van da anzav, ez eo Breizh ur rannvro c'hall. Diaes e kavan distreif war an sewvddor-mañ, hogen ret eo hen ober hiziv c'hoazh, rak bez e c'hellfe tud klask adarre sevel kazetennoù gant arc'hant broadelourien evit asuriñ ez eo Breizh rann eus Bro-C'hall. E-giz m'am eus lavaret meur a wech, n'eo ket gant gevier e saveteser ur bobl."

Marv An Avel a zo dleet da veur a abeg. Bez e voe evel just labour ar polis hag an "Information" a viras ouzh ar gelaouenn da zont er-maez e-pad un hanter-vloavezh. Bez e voe ivez darvoudoù personel hag a gasas hogos an holl re a rae war-dro An Avel er-maez eus Roazhon : Youenn Olier a zimezas hag a yeas da Bondi da gelenn; Yann Olier a guitaas an ti kozh er straed Sant Melani hag a anavezaz diouzhtu trubuilhoù diases-tre; Andreu Hemlin, hag a oa tafzorier ar strollad nevez, a zivross d'ar C'hanada (bez e voe, d'ar mare-se, e-touez tud an emsav, ur gwir zivroadeg d'ar C'hanada); me a oa aet kuit ivez da gelenn e Kemper; rener an E.P.V. Yann S. ar Gouez, a roas e zilez, ha diases e voe kavout un all. Met un abeg all, pouezusoc'h, a zo c'hoazh : hen reañ a ra Youenn Olier er pennad emson o paouez menegiñ (Gwengolo 47) :

"... A-hand-all hon eus kavet gwell en em glevout gant tud all evit lakaat da zont er-maez ur gelaouenn a oa da vezañ skignet ha gwerzhet e pep lec'h : kredañ a ran e vo frouezhus ar c'henlabour nevez-se, rak diazezet e vo war genlealded, ha prometet eo bet din e vije broadel forzh penaos spered ha displegerzh Le Peuple Breton. Setu gouesti sklaer ar rener. N'hon eus abeg ebet d'e ziskredañ, gouzout a reomp ez eo ur brogerour hag anavezout a reomp e ampartiz kelaouenner. Aet eo faezh hiziv gant ar politikerezh rannvroel : netra n'e zisrann diouzhip et. Mat e vo harpañ Le Peuple Breton gant ma ray ul labour vroadel yac'h."

An "emglev"-se eo a siellas marv Avel an Trec'h.

Dindan renerzh uhelidi naonedat ar Strollad Broadel - ur renerzh oberiant-meurbet anezhi - e oa en em vodet en-dro ul lodenn vat eus pennañ ar Strollad Broadel evit dastum arc'hant da sevel ur gelaouenn vras. Kavet e voe kalzik arc'hant, savet ur gazetenn Le Peuple Breton, ha gopret un den, an Ao. Martrey, d'ober war-dro. Ore ma oa, avat, rastallet eviti an holl arc'hant a oa tu da gaout en emsav, e tizerias Avel an Trec'h, ha dre ma soñje d'an dud e oa ar stourm da vezañ kreizennet hiziviken en-dro d'ar Peuple Breton e varvas kazetenn ar re yaouank. Mantrus e voe. Gwalloc'h e oa graet ar Peuple Breton, sur eo : mat Avel an Trec'h e oa un dra a-bouez ganti, ar yaouankiz, ha neuze ur strollad, ur gredenn didroidell, ur vroedelouriezh dizolo, hag erfin tud o komz hag o vrudañ. Atav hon eus kredet e Breizh e vartuz ar paper moulet : ac'hane niver hon embannadurioù. Met n'eus ket bet meizet mat etav talvoudgezh ar ger bev, an diviz a zen da zen : an dalvoudgezh-se a oa gant bagad An Avel. Sellomp ouzh Kembreiz : n'o deus c'hoazh nemet div gazetennig viziek. Met mont a reont d'an dud. Poan o deus bet en derou. "Meetings were broken up and speakers shouted down", a skriv rener ar Welsh Nation e niverenn miz Genver 1961. Met dalc'het o deus penn ha bremañ int ur strollad krefv ha doujet. Ar Peuple Breton gant Strollad Avel an Trec'h a vije bet mat-tre. Heptañ.... En hañv 1947 e voe ur c'horn-tro nevez en hent an emsav, pa voe dibabet sevel ar Peuple Breton ha lezel e-gostez Avel an Trec'h.

Padout a reas Le Peuple Breton, embannet kempenn bep miz, eus miz Here 1947 betek miz C'hwevrer 1949. Un niverenn (17) a voe c'hoazh embannet a miz Mae ha neuze, echu. Meur a abeg a voe d'an drouziwezh : ar gereouez a voe er bloavezhioù-se a zo bet unan, ha pa baouezas ar Peuple Breton e oa koll a-walc'h gant ar c'haf; ar gevredigezh he doa savet ar gelaouenn a stankas an toull, e doare na chomas die ebet e-kefver den ebet.

Ur gelaouenn graet-mat e oa ar Peuple Breton, am eus lavaret. Moulet e oa brav, dont a rae er-maez ingal. Digor e oa he spered ha ne oa ket dall ouzh ar bed : e niverenn miz Kerzu 47, da skouer, ez eus pennañ diwar-benn ar strollad iwerzhonat Clann na Poblachta, diwar-benn Tunizia, Traonienn Aosta, Euzkadi, Birmania, Palestina... Menozioù mat e oa displeget anni hag ar studiadennoù embannet a oa studiadennoù speredek. Ouzhpenn-se e voulas ar gelaouenn, gwech ha gwech, pennañ kalonek war danvezioù "arvarus". Perak e c'huitas neuze ? Unan eus an abegoù eo, a gredan, e chomas mouzhet ar yaouankiz, dre na oa ket broadel, ez-dizolo, savboent ar gazetenn, dre na oa ket rost da vagad An Avel a lec'h anni, ha dre na oa ket politikel, er ster a vez rost gant ar vroedelourien d'ar ger-se. Stag ouzh an abeg-se ez eus un all : ne oa ket a strollad o harpañ ar gelaouenn. Hen kompren a reas ar renerien ha d'an 10 a viz Genver 1948 a voe savet un emsav Renaissance du Peuple Breton (teurel evezh e oad d'ar

memez mare o sevel an E.P.V.) met an emsav-se n'en doe morse buhez abet. N'eus nemet unan eus e gevrennoù hag a vevas e gwirionez, Emsav Keltiek Breizh, ar strollad brezhonek awenet gant Roparz Hemon ha meret gant Erwan Tymen. Un dra da verkañ : e burevioù ar Fédération, e Paris, e oa bet savet an R.P.B. Souezh ebet neuze mar deo dindan levezon hag askell ar Fédération e voe savet, d'ar 27 ha d'an 28 a viz Du, en ur C'hendalc'h graet en Naoned, un Union Bretonne des Fédéralistes : an Ao. J. Martray a oa sekretour meur, an Ao. Besson e oa merour, hag an Ao. Gab ar Moal a oa tefzorier. An U.B.F. avat, a oa distert-tre ennañ niver ar vroadelourien : ar yaouankiz a c'omas skornet, ha ne gredan ket e voe morse gant an U.B.F. gwir vuhez ebet⁽¹⁾. Un nebeut mizioù goude, a-hend-all, e paeuze ar Peuple Breton da vezañ embannet, ha ne oa mui komzet eus an U.B.F. An Ao. Martray a zevas neuze da vezañ sekretour ar Congrès des Régions Européennes hag en doe e vuzav e ti ar Fédération e Paris.

Un dervoud all a voe, e miz Meurzh 48, hag en doe ur gwell efed war dezont ar Peuple Breton, dre ma tistroas dioutañ Bretoned vat a oa troet d'hen sikour. E korf ur pennad, kalonek a-hend-all, diwar-benn "Le Scandale de l'Épuration en Bretagne", e tagas an Ao. Martray, garv-tre, renerien Bezenn Perrot. Tamall a reas outo bezañ lazhet, pe sikouret lazhañ, Bretoned all hag a oa broadelourien, hag e c'houlennas "des sanctions impitoyables contre les créateurs et les responsables de la Formation Perrot". Ur respont, ken garv all, a voe embannet e-barzh niverenn 4 (miz Du 49) Breizh Atao kuzh : ar pennad, savet hep mar gant Laïné, a zinac'he groñs tamalloù en Ao. Martray. Un eskemm lizheroù a voe a-hend-all etre an Ao. Martray hag an Ao. Guiaisye, hag an Ao. Martray a dennas e damalloù, o lavarout e oa bet touellet. Met fall a voe kement-se evit ar Peuple Breton : forzh petra a soñjent eus Bezenn Perrot, e kave da galz Bretoned ne oa ket da vreizhiz da c'houlenn digant Gallac'ed kastizeañ Breizhiz all. Ha da heul e kollas ar Peuple Breton kalz skoazell hag a oa bet roet dichipot en a-raok.

Keuz a zo da geout da c'hwitadenn ar Peuple Breton : gallet en defe sevel ur seurt strollad kevredadelour dereat-meurbet. Goulenn a rae : "La Bretagne rattachée à la France par les liens du Fédéralisme" (Eost 48) hag e tifenne lec'h Breizh en Europa. Ne voe morse, avat, a strivoù sirius evit sevel ur strollad, hag ar yaouankiz, kollet ganti hec'h Emsav Pobl Breizh, ne oa ket dedennet kalz gant un Unvaniezh Kevredadelourien dindan askell tud uhel ha doujus. Un heulienn dedennus a voe avat da strivoù ar Peuple Breton ha da endro an Ao. Martray : Kendalc'h ar Broioù Europat a voe adkemeret gant Daniz ha brasañ he deus Breizh ul lec'h dereat er gevredigezh a zo an Ao. Skadegaard, eus Bro-Danmark, ar sekretour anezhi, war-lerc'h an Ao. Per Thaulow.

Ne glaskin ket displegañ amañ an holl strivoù a voe graet da sevel ur strollad, broadel e spered, goude-se. Divizoù hir, raktreoù predriet mat a

voe, dreist-holl e 1949-50, hag a vode kalzik tud hag o deus diskouezet, abaoe, e ouient labourat. Hini ebet eus ar strivoù-se ne zevas da vat. Ha Youenn Olier, koulz ha me, en em gavas buan er-maez : Youenn a gollas e blas kelenner-stad, hag a rankas divroañ e Gwengolo 1950, o chom en harlu e-pad tri bloaz; me, kelenner-stad evel Youenn, a voe kaset pell diouzh Breizh, e Gwengolo 1950 ivez, hag a gouezhas klafv, en un doare grevus a-walc'h, ar bloaz war-lerc'h. A-benn ar fin e voe ret gortoz savidigezh en M.O.B., anavezet mat gant hor mignoned.

Morse ne voe berr ar Vretoned, a-hend-all, gant ar c'hazetenoù. Sofj am eus eus MOR BRO, ur gazetennig skriverset ha dornskrivet hag a voe skignet gant Alan al Louarn adal... kamp-bac'h Margueritte e Roazhon da gentañ ! ; eus EMLÉD, a goustas kalz arc'hant; eus CELTA, renet gant An Diuzet, ha na badas ket pell; eus LA PLUS GRANDE BRETAGNE, savet gant an Ao. Mevelleg hag Alan al Louarn; eus ME A ZALC'HQ, kazetenn ar C'helc'hioù, renet gant an It. Galbrun, eus VENT D'OUEST, a oa o kenlabourat enni J. Martray, evit ar galleg, ha Roparz Hemon, evit ar brezhoneg, ur gazetenn eus ar Resistañs adkemeret...gant ar Vretoned; ha n'eo ket klok ar roll !

An istor nevesoc'h a zo anavezet gwelloc'h. Gouzout a reer penaos e voe savet AR VRO, penaos e tevas da vezañ JEUNE BRETAGNE. Anv a oa neuze da sevel aders ur Strollad Broadel, pa voe roet lafs, da heul ar P.O.B., d'an M.O.B. L'AVENIR a voe savet neuze ha, goude bezañ chomet diembann e-pad ur pennad amzer, ez eo kroget en-dro AR VRO da zont er-maez evel ur gelaouenn e studi, tra ma'z eo L'AVENIR ur gazetenn a vruderszh kentoc'h. An M.O.B., a-hend-all a zo oc'h endreñf, hag a zeu, muioc'h-mui, da vezañ un emsav politikel a spered broadel - ar pezh a zo un emdroadur eus ar re blijusañ.

Ar studierien a oa e Roazhon war-dro 1945-46, a yae war-dro ar C'helc'h Keltiek, a zaremprede ti An Avel, ne raent ket fae war al lennegezh, pell ac'han. Dacu anezho, Ronan Huon ha Pol ar Gourriereg, a savas e C'hwevrer 1945 Tir na n'Og, follennoù liesskrivet a embanne, e gwerzennoù Roparz Hemon, e vefe "an huñvreoù kaer trec'h d'ar bed". Da gredañ eo e oa gant ar brezhoneg, d'ar mare-se, un dalvoudigezh dispac'hel, rak gourdrouzet e voe, e-barzh La Voix de l'Ouest, ar follennoù liesskrivet-se "qui empoisonnent l'atmosphère" !!! E Meurzh 1946 e tevas Tir na n'Og, gant e niverenn 7, da vezañ moulet. A-hend-all e savemp, Arzel Even ha ma, Kened hag a voe embannet div niverenn anezhi. Hag e Pariz, a oa ur bagad paotred yaouank all, dreist-holl Per ar Bihan, Andreu Latimier ha Ronan Chevalier, o sevel Al Liamm. Difur e oa kacout teir c'hazetenn e brezhoneg goustlet, koulz lavarout, d'an skoulmañ kenetrezo un emglev a vreuerezh. 1947 dreist-holl, e labouris da skoulmañ kenetrezo un emglev a vreuerezh. Evel-se e voe embannet Al Liamm - Tir na n'Og. Ober a ris al labour renerezh e-pad ar bloavezh ma voe Ronan Huon e Kembre (1948) hag eñ a adkemeraz penn an traoù goude e zistro, me ouzh a sikour e-pad hir amzer c'hoazh.

denez

1) Un diviz hir a oa bet, e ti An Avel, etrezomp-ni, ar studierien yaouank a rae war-dro An Avel, hag un dileuriad eus ar Fédération. Nac'het hor boa ober emglev.

per denez

Per ar Bihan, adalek an derou, a bledas gant an defzorierzh, hag ur gwall labour en deus bet da seveniñ. Andrev Latimier a reas war-dro ar bruderezh. Hag abaoe meur a vloaz e ra Per Bodenan, skoazellet bremañ gant F. ar Galleg, war-dro gwerzh embannadurioù Al Liamm : ur gwall samm ivez. Re all o deus sikouret c'hoazh. Labour a zo bet evito. Ha labour a vefe evit muioc'h a dud ma vefent kavet.

An ober sevenet gant Al Liamm, hon holl lennerien hen anavez : 83 niverenn embannet, levrioù a bep seurt moulet ha gwerzhet, kazetennoù strish-oc'h o zachenn savet ha degemeret mat, an holl anezho ganet eus kreizenn Al Liamm : Mor Yezh, Prader, Skol, Barr-Heol, Ar Bed Keltiek, hag all. Un emsav krefav hag efedus eo bet, hag e chom, emsav Al Liamm. N'eo ket ne vefe ket bet stourmet a-enep dezhañ : meur a wech, ha dreist-holl goude savidigezh doare-skrivañ an Ao. Falc'hun, e voe klasket hen diskar. Met bagol e chom ar gel-ecouenn gozh hag he zorad pofsinet. A-hend-all, eus an traoù hag a oa a-raok, pe e-pad ar brezel, a chom bev SKOL OBER. N'he deus paeuzet nemet e-pad m'eo bet Marc'harid Gourlaouen er c'hamp-bac'h, ha kroget eo bet en-dro diouzhtu goude he divac'hidigezh. Piv a lavaro biken al labour sevenet gant Marc'harid Gourlaouen e-pad tregont bloavezh gouestlet d'ar brezhoneg ? Met hevlene c'hoazh n'he deus ket bet Marc'harid Gourlaouen ur gweneg toull eus Devezh ar Brezhoneg.

Ne c'heller ket kefeveriañ en emsav a-vremañ gant ar pezh a oa a-raok pe e-pad ar brezel. Neuze e oa ur gwir strollad politikel, bev hag oberiant, zoken ma oa trouzus e oberiantiz. Mont a rae ar vroadelourien d'ar bobl : lennit, war AR VRO, nag a bet bodadeg a rae Debauvais a-barzh bistrioù er c'hêrioù bihan hag ar c'harterioù paour. Na fell ket din izelaat labour an M.O.B., hag a zo a-hend-all o kemmañ bemdez. Pezh a vank dezhañ ar muiañ eo an tan a oa gant brudourien Breiz Atao, o spered a embardh hag o fiziñs e kalonegezh an den.

En hevelep doare ne c'heller ket kefeveriañ emsav Al Liamm ouzh hini Gwalarn. N'eo ket un tamall a ran : klask a ran hepken gwelout ar pezh a zo. Ha mar deo un tamall, neuze ez eo ivez un tamall a-enep din va-unan, rak me a zo e-barzh emsav Al Liamm. N'eus ket, gant Al Liamm, ar spered, an tan, an dud a ergerzherien douaroù gwerc'h hag a oa gant tud Walarn, Gwalarn en deus krouet, en deus digoret hentoù : ni, n'hon eus graet nemet kenderc'hel, ledanaat ha kas palloc'h. Evel just, gouzout a ran : ne c'heller, siwazh, dizoleiñ Amerika nemet ur wech.

Ar bam ouzh ar gened, an esmae ouzh ar bed, ar striv d'an etrevroadelezh, sed ar pezh a rae yaouankiz Gwalarn, Dre Walarn e tizolo ar brezhoneger lennegezhioù bras ar bed, evit ar wech kentañ en istor ar brezhoneg. Dre Walarn e

teue ar brezhoneg da vezañ, adarra, goude kantvedoù, ur benveg a gened hag a sevenadurezh. Ha da heul kement-se e tarzhe ul lennegezh yaouank, frondus, leun a nevez-amzer - a zo anni main-militir evel Pirc'hirin ar Mor, An Douar en-dro d'an Inizi, Geotenn ar Werc'hez pe Ar Follez Yaouank. Ur maread nevez a zo bet digoret gant Kan da Gornog hag a zo bet echu gant Beajour ar Gouav.

Ur seurt kempouez a vez atav gant ar vuhez, avat. Ma'z omp distroc'h, dre vras, e-kefever lennegezh, ez omp gwelloc'h e kefeverioù all. Gwelit ar yezh. Yac'hoc'h eo hor brezhoneg, dre vras, eget hini Gwalarn, dreist-holl Gwalarn er bloavezhioù kentañ. Gwelit ar studi hag ar ouiziegezh. Sevenet hon eus traoù na oant bet, gant Gwalarn, nemet hufvre. Gwelit an dachenn gevredigezhel : savet hon eus tiegezhioù brezhonek, ar pezh a oa rouez en emsav a-raok ar brezel. Met evit al lennegezh n'omp ket bet par da skol Walarn. Zoken arz an droidigezh - ar c'hask-se d'al lennegezhioù meur estren - a zo aet hogos da get.

An enkadenn-se en hol lennegezh ne zeu nemet diwar enkadenn hor spered broadel. A-dreñv Gwalarn e oa un emsav broadel krefav ha yac'h. A-dreñv Al Liamm ne oa, betek nevez zo, koulz lavaret netra. Unan eus darvoudoù heverkaf ar mare goude ar brezel eo e repuas ar spered broadel en embannadurioù brezhonek. Ouzh-penn-se e oa bet atav evel un urzhiadur en emsav : ar re a rae war-dro ar brezhoneg a veze roet dezho skoazell a bep seurt - dreist-holl skoazell bruderezh - gant an embannadurioù gallek. Diouzhtu goude ar brezel e voe mouzherezh a-berzh kalz kelaouennoù a-enep d'Al Liamm. Ha goude krouidigezh ar brezhoneg falc'hunek e teuas ar mouzherezh da vezañ gwir enebiezh, ha klasket e voe distrujañ Al Liamm : e departamant Penn-ar-Bed e kollas Al Liamm, d'ar mare-se, kalciz koumananterien, a drugarez da dud santel a yae a bresbital da lavarout da lavarout e oa ret digoumanentiñ diouzh Al Liamm evit koumanentiñ da Vrud hepken. Tud zo hen skrivas d'hor rener, Ronan Huon. Unan eus sinerien emglev 1941 zoken a skrivas e felle dezhañ mirout e holl arc'hant evit an embannadurioù e falc'hunek (ne zle ket bezañ bet rivinet) : hennezh a zo bet ur mare tefval en istor Al Liamm pa oamp diskouezet gant kalz tud evel an diskarerien, ar saverien-dabut, an nac'herien-silvidigezh-ar-brezhoneg. Abaoe ez eus bet dour o tremen dindan ar pontoù, Brud a zo un efor dispis, hag Al Liamm a zo krefavoc'h eget biskoazh. Met tristidigezh ar mare-se a zo diaes he disofjal.

E gwirionez, ar falc'huneged a c'hell bezañ sellet evel an darvoud mantrusañ en istor an emsav goude ar brezel hag an tri den o deus, dreist ar re all, kaset ar stourm-se en-dro, o deus sammet ur giriagezh a rafe aon da veur a hini. Pezh a vec'h hor c'halonoù, pa soñjomp ar mare-se, n'eo ket efor an droug a zo bet graet deomp ez-personel - daoust ma'z eo bet droug bras - ; pezh hor mantr eo an amzer gallet, an nerzhioù dispignet en aner, ar broc'h savet etre mignoned, ar gasoni ganet etre braudeur. Klasket hon eus ni selaou atav ouzh mouezh hor c'houstiañs, ha chom feal ouzh ar gredenn vroadel a oa

denez

per denez

maev hor c'henvroiz eviti - ar gredenn nemeti a c'hell degas da Vreizh ha d'he yezh ar silvidigezh. An amzer he deus diskouezet, a gredan, gant piv dalc'het bev, ar pazh a oa ezhomm d'ar re all kaout da genderc'hel. Miret emañ ar gwir. Met soñj ar bloavezhioù du a zo, hag a chomo, ur gwall samm.

Zoken maz omp bet ni, ar re o deus kemeret ar stur e 1945, ur rummad aberzet, zoken m'hon eus stourmet en defvalijenn hep gwelout alies penn an hent, kredif a ran hon eus da nebeutañ sevenet un dra : diwallet hon eus, dalc'het bev, ar pazh a oa ezhomm d'ar re all kaout da genderc'hel. Miret hon eus an hengoun broadel hag, ouzh hen degemer diouzh daouarn sekr ar re a gouezhe evit Breizh, hon eus han degaset, didorr, betek rummad ar re yaouankoc'h. N'ouzon ket re perak a oa bet roet da anv d'hor c'hazatenn Al Liamm : met, pa seller bremañ en a-dreAv, a weler ne c'hellfe ket bezañ bet dibabet unan gwelloc'h - ul liamm omp bet. A-dreuz d'an amzerioù tefval ha gwadek, hon eus liammet - war-bouez hor buhez - an emsav nevez ouzh an emsav kozh.

Rak klevet en deus ar rummad yaouank galv ar vroadelouriezh. Adkavet en deus ar roudenn gozh. Taollet en deus kuit ar raktresoù gwidraus, ar gwiblennerezh, sottoni ar re-finesa ; Breizh a zo ur vro, ha d'he saveteif e ranker stourm eviti evel m'o deus graet an holl vroadelourien abaoe m'emañ ar bed ar bed. Ha gouzout a reomp e teuio, neuze, gant adsav ar vroadelouriezh, d'al lennegezh hag hor boe gouestlet dezhi hor c'halonoù, an devezhioù kaer a c'hoantaamp hag ar pennoberannoù a hufvraemp. Ha petra 'vern ma ne vo ket savet ar pennoberannoù-se ganeomp, met gant tud all - gant ma vezint savet ! Ni zo servijerien. Ni zo servijerien Vreizh. Leouen e vimp bet ouzh he servijout.

Zoken mar deo al lodenn washañ hag a zo bet tonket deomp.

3.2.61

() () ()

A. Heussaff

P I V A Z O A - D U G A N E O M P

O prezeg dirak kelaouennerien en Evian ar sizhun-mañ tremenet e tisklêrie ar Ministr Joxe ne oa rediet den ebet da chom Gall ma ne felle ket dezhañ. Kalz gwad a vije bet arboellet ma vije bet graet diouzh ar sturienn-se en Aljeria c'hwec'h vloaz 'zo. E gwirionez ne ziskrog ket hon amezeien dre gaer eus ar pezh o deus lakaet o c'hrap warnañ.

Gwir e chom ez eo unan eus ar c'hentdivizoù evit dieubidigezh Vreizh ma c'houlennno an darn vrasañ eus hor c'henvroiz an emell eus o aferioù. N'eo ket ret e vije kreñv ar youl-se marteze, met ret eo e tiskouezfent o c'hoant d'en em ren. Ar re oberiant, hag a ro ur ster d'an darvoudoù, a vez atav ur bihanniver. Evit kas o mennadoù da benn o deus ezhomm koulskoude e ve "emsavus" ar plegennoù en-dro dezho. En degouezh-mañ : ezhomm e ve ar bobl tuet-mat evit ar vroadelourien.

A. Heussaff

Pouezus eo deomp kotliskoude diskouez hor c'hudenn e-barzh ur stern vrasoc'h, etrevroadel, da gentañ evit disarbenñ ar rebech a "rannvroelezh", ha d'an eil abalamour ma **ousomp** ne blego ket hor gwaskerien da zistardañ o gwask keit ha ma vimp hon unan dirazo.

Setu perak e vez kaset kelou d'an diavaezidi diwar-benn hor stourm. Evit ar mare ez eo dister levezon ar re a zo a-du ganeomp en estrenvro war red an darvoudoù, ha disteroc'h c'hoazh o levezon war renerien Vro-C'Hall. Re all a oar e stourm Bretoned 'zo, hag o deus un niver brasoc'h anezho abeg d'en em chalañ gant an doare ma vezont renet. E doare pe zoare e c'hellfe ar re-se skoazellañ ac'hanomp ur wech bennak.

Rak evito da **vout** dichek e-keñver urzhiadurioù etrevroadel ha ne servijont ket dezho, ar C'hallaoued a zamant da varnedigezh ar pobloù all. Damantiñ a reont d'o brud sevenadurel. Bez' e c'hellont bout nec'het pa ziskouezer penaos e reont o mistri e Breizh.

Arabat deomp kaout marc'hedoù o tegas hor breud dirak arallvroiz. Ma'z eo gwir ez eus ac'hanomp ur genel disheñvel diouzh hini ar C'hallaoued, hag o deus nac'het ar re-mañ selaou hor c'hlemmoù doujus ha seven, neuze hon eus ar gwir bremañ da zougen hor c'hlemm dirak ul lezvarn etrevroadel. En ur bed bihanaet, e teu darempredoù ar c'henedelioù (pe ar broadoù mar karit) da vezañ heñvel ouzh re an dud a-hiniennoù. Pa vez mac'homet pe gwallgaset un den gant unan all, e c'hell kas anezhañ dirak ur barner neptuek. Evelse e tle bezañ muioc'h-mui evit ar broadoù ivez. Me 'oar mat ne deo ket an **traoù** ken kompez-se c'hoazh, hag e talc'h ar broadoù galloudus muioc'h a veli eget ar re van e kuzulioù ar "Broadoù Unanet" da skouer. Koulskoude un doug a zo aze, ur red hag a dleomp kreñvaat par ma c'hellomp, en ur vont gantañ, en ur ober dicoutañ. En ur ziskleriañ hor feiz en un urzh hag a dalvezfe da gompezañ an tabutoù etrevroadel e savimp a-us d'an harzoù a lakaer deomp bremañ, hag ec'h eilgeriimp d'ar re a damall deomp bout o klask mirout Breizhiz dizarempred en o c'horn.

Eveljust ne c'hortozomp ket kalz digant Urzhiadur ar Broadoù Unanet evel m'emañ. Petra a ra an UNESCO evit hor c'hultur ? Gouzout a reomp e selaou kentoc'h ouzh hor mistri, rak gant skoazell-arc'hant ar gouarnamant e vez paet e gargidi. An Unesco, koulz hag U.A.B.U. a zo diazezet war youl vat ar stadoù evit un darn vat. A-hend-all, piv en U.A.B.U. en deus da c'honit o komz a-enep ar gwaskerezh e Breizh. Ha pa ve taeroc'h goulennoù ar Vretoned zoken, n'eus gouarnamant ebet ken van-se gant ar reizhded evit tuiñ ganeomp peorien !

Stadoù evel re India, Selan, Gana, h.a.. o deus etre o harzoù kudennoù heñvel ouzh hon hini, kudennoù Nagaiç, Tamiliz, Achantiz. Pennadurezhioù ar broioù-se a gav ar c'hudennoù-se argazhus, pa viroù outo a gas da benn o raktresoù pempvloaziat, pe da ziazezañ melestradurezh ur stad arvevez. Kavout a ra dezho e rankont plaenaat, seunaat gant aon e teufe pep tra da rouestlañ. Gwazh a se evit ar meuriadoù hag ar c'henedelioù na gavont ket o c'hont !

An Ao. Kloss, eus an Ensavadur-Enklask evit ar C'hudennoù Yezh ha Broadelezh, KIEL, a zisklerie d'e selaouerien e Kendalc'h Zuoz warlene e oa awenet emzalc'h ar Broadoù Unanet dre vras gant ur meizad **unvezel** eus ar Stad. Hervez ar meizad-se ez eo **reizh** reif d'an holl genedioù ha gouennoù e diabarzh ar stad an hevelep embregerezh en deskadurezh, e kevrennadur an danvez, h.a. Arabat anzav ez eus diforc'hoù. A-hend-all ez it a-du gant "apartheid", gant ar ouenn-elourien ! An holl kevatal dirak al lezenn, da lavarout eo an hevelep testenn-lezenn evit an holl ! Setu a zo gwall-heñvel ouzh emzalc'h ar C'hallaoued e-keñver "o" Breizhiz, Baskiz, h.a. Ar stad a zo unvezel, ar **vroad** (nation) a zo dirann : ar genel niverusañ a ra evel ma kar, evel ma tere outi.

Er c'hontrol, doare-gwelout ar re a c'houlenn evit pep kenel ar gwir da bleustrif ha da verañ he danvez hag he c'hultur, e diabarzh ur c'hevread-

alan heussaff

alan heussaff

broioù diazezet war emglev, ar seurt doare-gwelout a zo kevatal gant ur meizad kevreadel eus ar Stad.

Marteze ez eo ken luziet ha nec'hus kudennoù arboellerezhel ur stad nevez evel India ma rank he rennerien mont a-vras, plaenaat, ecumaat(1). Pezh a zeufe da harpañ tezenn an danvezelourien, a ro ar c'hentañ plas d'an arboellerezh e prederioù mab-den. Marteze ez eo gwir ivez ne roy pobl Vreizh hec'h asant kalonek da ziskoulm kudenn ar brezhoneg nemet goude ma vo bet diogelaet hec'h ezhommoù arboellerezhel. Kultur, un dra evit tud disamm hag o deus amzer vak ?

Hogen er broioù diarriañ e-lec'h ma tastumer muioc'h a eostoù eget na heller beveziñ, muioc'h a varc'hadourezh eget na heller gwerzhañ e tlefe an arboellerezh bezañ gouest da zicueriñ ha da c'hoprañ ur rummad tud, kargidi, arbennegerien koulz ha "stourmerien" evit ma pledfent da gudennoù sevenadurel en un doare kenreizhek ha skiantel. En ur vro diorroet, kompezet ganti he diassterioù arboellerezhel, o kenvevañ enni kenelioù disheñvel, ez eus ezhomm ur ministrerezh karget da eveshaat ouzh oberiadur an emglevioù graet evit mad ar c'henedelioù-se.

O terc'hel d'hor meizad kevreadel eus ar stad e c'houlakomp ez eo emdroetoc'h ar gevredigezh - pinvidikoc'h, desketoc'h, reishoc'h e kevrennadur he madoù - eget an hini a gaver er peurvuiañ eus ar broioù kenezelet gant U.A.B.U.

En Europa eo e kavimp c'hoazh hor gwellañ mignoned. Pa gomzan amañ eus ar stad, e soñjan eta en ur stad europat.

30.5.61

(1) An darn vrasañ eus ar stadoù nevez en Afrika, en Azia, h.a. n'o deus ket d'ober eus demokratiezh doare angel-saoz : da gentañ bara, hag evit e c'honit d'an holl, e troont kentoc'h da ober diouzh ar meizad unvezel eus ar Stad.

alan heussaff

GERIADUR

Kenel : Ar Vretoned a zo anezho ur genel disheñvel diouzh ar C'halleoued, ar Saozon.

Unvezel : Unitarian, einheitlich

Kevread : Federal, Bundes - (meizad ur c'hevre, un emglev a zo etre an dud pe ar broioù kevreet pe kevreadet (fédérés). Muioc'h eo ur c'hevread eget ur gevredinezh : rak-se ne ran ket gant kevreadel.

()()()

alan heussaff

Rigakos

L O R C ' H

Gouenn ar Gelted....laezh ur ramzez nerzh
he deus sunet, Kemeret eo bet war e zivrec'h
gant un doue ha stardet gantañ war e galon....

Sketla Segobrani, p.35

Er strobard studiadennoù kinniget amañ, va c'hoant nemetañ eo lakaat da sejal pegen talvoudus eo, dreist-holl evit ur vroad o tihuniñ, o tasorc'h-ih zoken, kavout e donañ e askre al lorc'h, frouezhenn nerzh he yaouankiz.

Al lorc'h evit ur ouenn a zo bleunienn ar yec'hed, ha mousc'hoarzh ar c'handed, ouzhpenn ez eo kreñvañ mirour he galloud hag he youl-emledañ, he spered-trec'h. Ar sklav a zo dilorc'h, anez ne vevje ket. An hini lorc'hus a zo faeüs ha dre-se

n'eo ket fall e-keñver e enebourien. Ar sklav eo a zo gourvennek ha dieeun. An hini balc'h a oar ar pezh a dalv ha gwelloc'h eo gentañ bezañ eñ e-unan eget bezañ unan all. Neuze ne gilo na ne ziskrogo, rak ezhomm en do atav da greskiñ e nerzh hag e binvidigezh-ene evit kenderc'hel da vagan an emskiant-se.

Ar sevenadurioù bras a zo bet diazezet evit kalz, war an dismegañs e-keñver ar "Varbared". Ar santadur a zreistelezh en deus en em zispleget moarvat dre zaou hent kenstur, da gentañ, an hini a uhelae an usdud (dre natur hag e pep keñver) a-zioc'h an isdud (dre natur ivez); da heul, an hini a zoug gwazed ur bobl uheloc'h eget ar bobloù tro-war-dro. War an eil poent-mañ, a dra sur, e c'heller lavarout ez eo ur seurt emskiant distrous war an holl linenn dre ma kaver e pep pobl un dibab hag un tropell. Hogen se ne vir ket ouzh gouennoù da vezañ dre vras trec'h d'ar re all, kreñvoc'h, donezonet bravoc'h hag ivez kaeroc'h da welout, rak er gouennoù sklaved ez eo divalav an neuz ha teñval ar youl. Lorc'hus ha balc'h eo ar re gentañ, an eil re a vag alies evel santadur-diazezet ar vezh. Ar vezh da vezañ ar pezh ez int, ar vezh da gaout boazioù, doareoù-bevañ, yezhoù ha madoù speredel, arzoù hag obererezhioù a gavont dister e-skoaz da re ar bobl-mañ-pobl stok outo pe, gwashoc'h, o vac'homañ warno. Ar vezh, arouez an disgra, an emzinac'h, an displeber, arouez ar re voutin, an eneoù c'hwitet, ar speredoù a netra. Arouez an dud kontammet ivez hag amañ e rankan dougen bri d'an doueed vroadel a roas d'o fobloù lorc'h ha fiziañs, kalon ha spered-trec'h. Iskis eo gwelout penaos eus relijion ar bobl a zo bet - hag a gendalc'h da vezañ - gwashañ gouennour ar bed holl, ez eo ganet - ha stummet nevez abred, gwir eo - unan all hag he deus ledet nebeut ha nebeut spered ar meskadur, an dalvoudegezh ingal an dud hag ar gouennoù, an aon d' en em lakaat da dalvezout klok ha kreñv hep skeud estren ebet. E-pad ar Grennamzer ha diwezhatoc'h, relijion ar C'hormog a voe ur gredenn, ur c'henstroll

dogmoù a gavas nebeut a grog war zoareoù-bevañ ur c'hevredad urzhazet kreñv ha berrus; da heul avat, e teuas, tra ma koaze an tu relijiel rik, da c'hounit diazezet ar vuhez kevredadel, o skubañ ar spered diforc'h, an uhelder, al lorc'h, ar youl-bevañ, an unanded gant an Matur hag he lezennoù evit lakaat en o flas perzhioù ar gwander hag ar c'hlenved am eus meneget uheloc'h, en o zouez eta ar vezh. Petra zo lousoc'h da welout eget an dud a ren en Alamagn a vremañ oc'h argas abaoe pemzek vloaz "torfedourien" brezel, en ur v-masoc'herezh na weljod biskoazh, hep diskouez an disterañ e soñjont ez eus seurt torfedourien e-touez o holl enebourien kent ? Petra zo muioc'h enep-brientinel eget emzizalc'h ar Re Wenn dirak gouennoù sklaved, gouennoù izel ? Mezh da yañ ez eo trec'h ar re zonezonet hael sevenidigezh ar c'henglot hollvedel, aon rak sorc'henn kevatalder an dud, ar bobloù hag ar gouennoù, sorc'henn ar "Gwir" a-zioc'h an Nerzh, divergentañ toullerezh a zo, ha pilpousañ gaou hon amzer, sorc'henn ar "pec'hed", ar rentañ-kont da idolennoù an tropell, ar "pec'hed", an arouez breinadur-se a ro an "emskiant fall", a liv an eneoù gant livioù enep da re ar vuhez, da re al lorc'h da vezañ darn er bed, eus bleuniadur ar gened, an nerzh, ar galloud, ar brokusted, al levenez, ar fae war ar chatalegezh hag an idolioù.

Gouenn a raed ur wech digant ul livour brudet piv a oa, war e veno, brasañ livour ar mare: "Me" a respontas kerkent an arzour. "Añ ! Ha petra a laka ac'hanoc'h da grediñ an dra-se ? - Mar n'hen gredfen ket, ne livfen ket". Hep "self"-fiziañs, n'eus den meur ebet, ur self-fiziañs hag a zo disheñvel-tre diouzh ar pezh a gaver ivez alies a-walc'h e-touez astud, o vezañ ma'z eo al lorc'h, tra ma'z eo hini santadur ar re all an emc'hloar, ret-mat (1). Santout an dalvoudegezh an unan a zo un dra, fougeal dre ma kaver e vezer en un doare bennak plijus, dedennus evit strolladoù a zo un all.

(1) Iskisat tra, gwelout er geriadurioù brezhonek an deou c'her "lorc'h": "Hochmut" hag "emc'hloar": "Eitelkeit" roet an eil evit egile hag i o skeudenniñ santadoù enebel.

A-zioc'h ar re-mañ e talc'h al lorc'h, en engroez e sank an emc'hloar. Gwelomp ar pezh a c'hoarvez en Algeria gant an "Troid du". O c'houleñn an en-sammadur e oant kollet en araok. Pa ranker plegañ, pe pa gaver e ranker plegañ, ra vezo graet da vihan-an gant dellezegezh. Mil gwech dereatoc'h e voe dilez India gant ar Saozon na anvjont biskoazh Saozon tud o zrevadennoù. Rak an aliesañ ez eo gwir lavar Henry de Montherland : "L'orgueil est une cuirasse et non une épée". Sujet e vez pobloù gant re all, kreñvoc'h, dre ma tiskouezata ar re-mañ, en ur mare, un dremm sklerijennet haeloc'h eus Kerzh ar C'heal denel er bed ha biskoazh ne weler gouennoù izeloc'h o sujañ gouennoù uheloc'h, nemet pa gouezh pred an disleber war ar re-mañ. Gant ar sujidigezh-se ne glask ket ar c'hounezerien hevelebe-ekaat an drec'hidi outo, n'o deus ezhomm ebet d'hen ober evit derc'hel d'o nerzh, ar c'hontrol eo. Daskoradur an hevelebeakaat a zo un arouez a gleñved, ar preñv a zo er frouezhenn. Evit ar pezh a sell ouzh "Europa vihan" hon amzer, ne weler o terc'hel anezhi en he sav, en un emzalc'h digened nemet : son dinzavet ha gourvenn a askre fall Bro-C'hall, mezevenn Alamagn kollet ganti doueed hec'h ene evit kemerout re all ha ne glotont ket outi, dienez ha berrentez Italia, distervez ar stadoù bihan da heul. Dispac'h bras Bro-C'hall a voe ivez ur sav, un alouberezh a-berzh an elfennoù a liveerezh, a gasoni, droukrañs ha gwarizi an tropell, a glask dalc'hmat degas an holl da vezañ heñvel, ha diskar ar vro-se eo a gemenne an darvoud. (Gwir eo e tiligneze he dibaboù-tud abaoe pell a-walc'h.)

Evit Breizh, trec'het gant Bro-C'hall, pelec'h edo he lorc'hentezh ? Dilezet gant an holl vlenierien ha koulz lavarout an holl lenneien ha tud a Iliz (Gallaoued e-leizh e-touez an eil re hag ar re all) ar yezh hag an aergelc'h keltiek kozh, c'hwez an dismantr a oa ganti. Daoust hag ez eus ur skouer splannoc'h a zallder politikel eget hini an Dug Arzur III ? E vuhez-pad e lakaas e nerzh, e galon

hag e ampartiz da dalvezout evit mad Bro-C'hall, pa oa anat ne c'hortoze houmañ nemet ar mare da lonkañ e vro ? Ha stourm a-enep Bro-Saoz a c'helle, eta, daoust da emzalc'h houmañ ha ne oa ket plijus dalc'hmat, bezañ harp a-enep drouk-youloù gwashañ enebour Breizh, an enebour a viskoazh ? Ma ne vije ket bet gallekaet kreiz-ennoù-ren Breizh hag ar galleg yezh nemeti an holl zibaboù, daoust hag heñvel e vije bet an degouezh ? Nann, rak Jili Vreizh, ha ne gomze ket brezhoneg kennebeut koulskoude, a blege war-du ar Saozon dre ma oa bet levezonet gant o doareoù-bevañ, dre an darempredoù ganto. Neuze amañ ivez e talc'h an da lavarout : "sujet e vez pobloù gant re all kreñvoc'h, dre ma tiskouez ar re-mañ un dremm, sklerijennet haeloc'h, eus kerzh ar C'heal denel er bed". An dremm a dle bezañ un dremm virion, hini ar boud hag a glot ouzh e dermenadur evel ar vleunienn ouzh e hini : ur boud lorc'hus gant e gened dezhañ e-unan, e nerzh hag e levenez d'en em astenn e red ar vuhez hollek, evel un dra dispar. Nann dremm treuzkinklet ur boud hironet e ene, kammet e youl, divarc'het e donkadur.

Nerzh dispar al lorc'h, evel dalc'her pennañ al lusk vuhez en ur bobl, a zo anataet gant ar Yuzevien. Lavarout a ran groñs diouzhtu ne venegan ket anezho evit aliañ den da gemerout skouer ebet diwarno. Hogos er-maez eus an den-elezh ez int bet atav ha n'eus netra vat da dennañ eus ar ouenn-se evit hini all ebet. Forzh pegen drastet eo bet avat ar Yuzevien, izelaet, dismegeñset (ha se, en hon hoalad, gant tud dleour dezho koulskoude eus sichenn o savadur speredel, forzh pegen distreset hag adtreset e vije bet ganto), dalc'hmat eo chomet sanket enno emskiant-stur ar "bobl dilennet" gant o Doue ha rammet krenn diouzh ar re all (ha mar deus un dra wir, hemañ a zo). Ur wech trec'het ha flastret gant Roma, kollet ganto war a seblante, ar spi da lakaat ar "c'h-goyim" dindan o zreid, hag i

douget neuze diouzh un tu da glask gourlid meur an daouzek meuriad en ur rouantelezh neñvel, se hag ar c'hantvedoù a zispletadur a heulias ne zeuas tamm ebet a-benn an taol-se da ziskar emskiant donañ o gouenn; hini o galvidigezh gant Iahwe da vezañ ar vrientinien a-zioc'h holl drepelloù an didradroc'het evel ma oa o doue mestr war re an tropelloù-se. Pe arouez a zo diskuliusoc'h eget an diouer a c'hoant er Yuzevien da c'hounit ar re all d'o c'hredenn ? Ha zoken da vezañ ur gentel evit unan bennak ? Met ret eo menegiñ ganto skouer ar c'hreñvañ lorc'h gouennel a anavezas biskoazh ar bed. N'eo ket int a zo gwelet da vihanañ o kouezhañ e viloni hor C'hornog war ziskar ma saotrer ennañ meurded hor gouenn wenn gant stummoù izel a zenelezh, boudoù du ha n'int ket bet gouest zoken da aozañ a-hed milvedoù ar gwareg reizh ma komz, da skouer, Xenophon dioutañ hag a oa anavezet pell a oa gant pobloù a ouenn wenn.

Ur c'houronk a levezon don, damgevrinus hag aspadennus ec'hon meurbet en oadvezhioù kent, eo e gwirionez ar stok gant testenioù klokded, leunder buhez hor hentadoù pa valeent en ur aergelc'h c'hlan deverret eus o youl bevañ ha bezañ kaer, kreñv ha trec'h, kuit a elfennoù speredel estren dinerzhus ha chatalus. Barr o nerzh a adkavas ar C'hermaned n'eus ket pell, pa flammas a nevez e kalon o fennañ blenierien tan an amzerioù kozh, hini glanded spered ar ouenn. Hag e darn eus gwellañ dasorc'herien Breizh ivez.

Bezomp lorc'hus, ni Breizhiz, gant an emskiant adkavet eus talvoudegezh hor gouenn ha digoromp d'an eien kozh, stank ha galloudus c'hoazh a dreuz ar c'hantvedoù, hon askre disaotret. Ha gant balc'hded ar re o deus ur youl d'ar galloud hag a laka da dalvezout lavar ar Gall La Rochefoucauld o reiñ da wir ez eus daou si da argas a-raok pep tra : ar voutinded hag ar wanded : ar voutinded, ken anat e Breizhiz c'hallekaet ar bobl, merk ar speredoù sklaved. "Arabat morse ober ar farouell" a skrivas ivez Epiktetos.

An diouer a demz aristokratel a zoug da zegemerout, trec'her pe drec'het, emzalc'hioù digened. Ar wanded, an izelegezh spered, an emzalc'h das-kirier, loan tropell. Pa sellomp ouzh hon istor, enni evel e re ar pobloù all kurioù kaer hag ivez loustonioù a bep seurt (dreistholl dre zilez herez ha perzhioù ar ouenn), chomomp hep keuz dirak ar re-mañ ha soñjomp e tle holl diskouezhatadurioù ar C'heal danvezet kenderc'hel gant loc'hadur o orinoù evit seveniñ evit ar gwellañ o zonkadur.

Arz meur an tisavouriezh o fetisaat ar c'healioù relijiel bras ne ro da bep hini eus ar re-mañ nemet un dremm : evit ar "C'hresianed", an dremm-se a voe hini an neved kolonnenek, evit ar Reter pellañ hini ar bagodenn, evit ar Gristeniezh hini an Iliz-Veur hag evit an Islam hini ar voskeenn. E-lec'h ma'z eus bet armodennoù evit sevel stummoù nevez, un druezh hag ur vezh eo bet gwelout an "nihil" arzel ha speredel a rojont. Dalc'homp soñj, ni, eus savadur broadel Breizhiz ar V-Xvet kantved. Mar deo kemmusoc'h ar furmoù amañ, ar spered a dle chom digemm.

Ret d'ar Vrezhonez a venn kenderc'hel da zougen ar c'hantolor ha da uhelaat anezhañ, bezañ balc'h, balc'h gant an nerzh hag ar youl kelt oc'h adsevel enno, ha kalz kaletoc'h a se e-keñver pep treuzvarc'had. An engroez a heulio, ne heuilh da vat nemet tud kreñv ha n'eo ket lubanerien. Pe varn gwelloc'h en e verrded, diwar-benn emzalc'h ken didalvoudek Loeiz XVI dirak an dispac'h, eget hini Napoleon : "Que collone !" (1). Ar youl evit ar galloud n'eo ket, da vihanañ, hini an tropell. An tropell a vez blienet dreist-holl gant c'hoant ha gwarizi ar re hep personelezh. Ne vev ket al loened preiz e tropelloù. Dalc'hmat hag e pep lec'h ec'h en em argas an eil egile perzh ha kementad. Salv ma c'hellor reiñ da c'hoant ar c'hre furm ar c'hlokted gouennel, ar sevenidigezh hon herez divarvel, ha treuzkas ar gwarizi

d'an amezeien dre reiñ dezho ur skouer a noblder hag a c'hlander.

Tec'homp, tec'homp pell eus dcareoù an astud a liv, rok ha dichek dirak gwengroc'heneien di-zellid ha displeberet, ha dare atav, diouzh un tu all, da astenn an dorm dezho evit kaout diganto. Mat eo evito, mat evit ur bugel, un den kabac'h; ur gour avat ne c'houlenn netra digant un ebour, kemerout a ra ar pezh a venn kaout pe e klask an tu da vezañ kreñvoc'h evit gellout hen ober. Pa weler pe respontoù a vez graet da c'houlennadurioù an dereatañ graet gant Breizhiz abaoe keit all, hag int o kenderc'hel atav, e ranker anzav n'eo ket hepken al lorc'h a ren e-touez anezho holl, na zoken an elevez eeun. Saludomp avat ar re ac'hanomp o deus strivet kalonek, kadarn, eeun ha pennek evit dasorc'hiñ o bro hag adreiñ dezhi flamm hael ha kaer yaouankiz spered gwirion he hendadoù Keltia, ar re o deus stourmet dibleg, dispont feal d'o uhelvennad, feal d'an tu kemeret ganto, betek ar marv a-wechoù, dalc'het sonn dalc'hmat gant balc'hded youl ar Gelted Veur. Saludomp anezho, dalc'homp hon daoulagad paret war o skouer, i hag a zo bet ankounac'haet, "nac'het louzet pe heskinet gant darn eus hor pobl, an darn estrenekaet, dilignezet. Ha plijet gant boudiged mat hor c'havell orinel ma c'hellfemp kanañ c'hoazh gant gwirionez :

" Siwazh d'ar vro drec'het hag a bleg d'an trec'h,
Siwazh d'ar bobl wasket hag a samm he bec'h,
Re gaer ez eo hor bro ha re uhel hor gouenn,
Da zougen er vezh ur chadenn."

000000
000
0

T A O L E N N

	P.
KINNIG.....	3
BROAD VREIZH gant Alan Toravel.....	5
SAVET EM EUS VA MOUEZH gant Gwennole Ar Menn.....	29
AR VELEIEN E BREIZH gant Gourlann.....	35
ALOUBEREZH, KILSTOURM, DISPAC'H gant Abanna.....	39
STANKET EO AN HENT, ADTROU gant Bodmael.....	51
OPIOM AN EMSAV gant Youenn Olier.....	55
DEÑVED GOUEZ HA DEÑVED DOÑV gant Arzel Even.....	73
UR SELL WAR PEMZEK BLOAVEZH : 1945-1960 gant Per Deniz.....	83
PIV A ZO A-DU GANEOMP gant Alan Heussaff.....	105
LORC'H gant Rigakos.....	111

000000

Komanant 1961, 12 nivereenn..... 36 NF
 Komanant 1961 d'ar Geriadur Istorel hepken,
 (4 nivereenn)..... 12 NF
 Komanant 1961 hep ar Geriadur Istorel,
 (8 nivereenn)..... 24 NF

Dr ETIENNE, Châteaulin, CCP. 16.093-13 Paris

Lieskrivet e ti
 Herve AR MEE, 32 str. Tad Bourdon, Roazhon
 CPPP Nn 35.709
 Diskleriet hervez lezenn, Trade trimiziad 1961

Priz ar c'haier-mañ : 7,50 NF

STAGADENN DA BREDER 24-25

Da zivankañ :

- p.42, 1.16 diwezh. : ...en e reized ha neket hini ur...
- p.43, 1.3 : ... Da verkaf spis hec'h anien, ...
- p.44, 1.16 diwezh. : ...lavarout : "Breizh zo va buhez", "Breizh zo me".
- p.45, 1.11 : ...an alouber o wiskañ...
 - 1.11 diwezh. : ...Stad hag an awen ez eus un disrann a anien. Ar Stad a gompren...
 - 1.5 diwezh. : ... Ar stadrenezh...
 - 1.3 diwezh. : ...mavdiern...
- p.47, 1.2 diwezh. : ...e zere evel reol, ...
- p.48, 1.4 : ...chatalaet ar bobloù...
 - 1.10 diwezh. : ...d'an emzalc'h...

